



BUEZ

HA VERTUZIQU

SANT JOSEPH

AL LEVR-MA A ZO GREET

GANT AN AOTROU KERLAN

PERSON POULDREUZIC

MOULLET EYIT AN TREDE VEACH

E BREST

En ti dalc'het guechall
Gant an Ao. A. LEFOURNIER
D. DERRIEN
Leorier
ru Siam, 85

E QUEMPEL

E ti IANN SALAUN, Leorier
ru Kereon, 56

PROPRIÉTÉ



APPROBATION ÉPISCOPALE

Nous avons fait examiner l'ouvrage intitulé : *Vie et Vertus de saint Joseph*, et sur le compte qui nous a été rendu de ce travail, nous en permettons volontiers l'impression.

Quimper, le 14 Juin 1868.

† RENÉ,
Évêque de Quimper et de Léon.

LIZER an Aotrou n'Eskop Sant-Briec
ha Treguier d'an Aotrou en deuz
skrivet Levr BUEZ HA VERTUZIOU
SANT JOSEPH.

AOTROU PERSON,

Lennet am euz gant ar brasa plijadur ho
levrgalvet *Buez ha Vertuziou sant Joseph*.
Eul levr mad hoc'h euz greet.

Kredi a dleit, aotrou Person, hoc'h euz
greet eun dra talvoudek d'ar brezonek.
Ar skridou sklear ha digemmesk a gen-
dalc'ho ar brezonek hag a rai ma vezo
karet muioc'h-vui.

Kavout a rejur kement-se enn ho levr.

Eur zonch vad hoc'h euz bet o skriva
buez ha vertuziou sant Joseph.

An devotion d'ar zant braz-ma, pehini
a ziskuez ker mad ar vuez kuzet, poaniuz,
gant ar speret troet var zu traou an Env-
da dud an amzer-ma pere na garont nemet
trouz ar bed ha falz plijadurezou an douar,

a zere ive dreist-oll ouz Breiz-Izel ken leun a feiz, ouz eur wenn dud kre ha nerzuz, pehini a dremen eur vuez didrouz o sonjal e Doue var an douar a dremgant ar c'houezen euz he dal. Ra zeskest muioc'h-vui e skol sant Joseph karout al labour, ar reiz en dibri hag en eva, ar vuez deread, feiz ho zadou-koz, kement a laka en tiegeziou divar ar meaz, beteg er re baoura, eun euruzded ha ne d'eo ket anavezet er paleziou alaouret.

Ho levr, aotrou Person, skrivet e brezonek sklear ha digemmesk, a lakai an devotion da zant Joseph da greski muioc'h-vui en hon touez.

Ho trugarekaat a rann euz a gementse ha rei a rann d'e-hoc'h va bennoz.

Kredit mad ez oun leun a garantez evid-hoc'h.

† AUGUSTIN,

Eskop a Zant-Briec hag a Dreguier.

Sant-Briec, an nao a vis Kerzu 1868.

EUR GUER BENNAG

DIVAR BENN AL LEVR-MA

Petra eo al levr-ma ? Al levr-ma a zo evel eur boket, dastumet e chardin hor Mam zantel an Ilis da guinig da zant Joseph Pried ar Verc'hez Vari ha Tad maguer d'hor Zalver Jesus-Christ. Evit ober eur boket, petra a reer ? Kemer eur fleuren du-ma duhont hag ho lacaat en eur voden, an eil e kichen e ben, ar guella ma c'heller evit plijout d'an daou lagad. Setu petra a zo great ama. Ar fleur a zo cavet en Aviel, e scridou an Tadou Santel, e scridou ar Zoent, an Doc-

toret, hag e levriou skrivet evit creski an devotion da zant Joseph. Ia, al levr-ma a zo tennet euz an Aviel hag euz ar pezh ho deuz lavaret ar Zœnt hag an dud gouiziec divar benn sant Joseph, ha ma ve dibabet ho c'homzou, na chomfe ket nemeur a dra. Guelit, lenner ker, hag hen eo great mad ar boket-ze. Ma cavit abeg enhan, ma neket great gant ijin, na damalit ket an danvez ; rag ar fleur a zo caer, euz chardin an Ilis e teuont ; mez tamalit an dorn en deuz ho dastumed hag ho renket, hag an den dievez en deuz manket a furnez en he labour.

Perag al levr-ma ? Evit creski an devotion da zant Joseph ; evit ma vezo anavezet muioc'h mui, caret, enoret ha pedet gant an oll. An Drindet Santel, hor Zalver Jesus-Christ hag

an Itron Varia ho deuz roet da zant Joseph ar c'haera mercou euz ho fizianz hag euz ho c'harantez. An Tad Eternel hel lakeaz da zerc'hel he leac'h a dad var an douar ; Jesus-Christ her c'hemeraz da dad hag a zentaz ounthan an darn vrassa euz he vuez ; hag an Itron Varia ive her c'hemeras da bried hag a zoujaz d'ezhan. Mar d'eo bet ker caret ha ken enoret gant an Drindet, gant Jesus ha gant Mari, peguement ne dleomp ni ket ive he garet hag hen enori !

Drugare Doue, an devotion da zant Joseph a ia bemde var gresk e peb leac'h ; ar pezh a dle rei calon d'an dud a feiz e creiz an amzer denn a zo brema var an Ilis. Seul vui e vezo enoret sant Joseph, seul vui a c'hras-sou a ziskenno euz an env var an Ilis

catholic ha var peb hini ac'hanomp ; rag gallout sant Joseph a zo braz, ha c'hoant en deuz da ober vad d'eomp, mar keromp goulenn sicour digant-han.

Brema ez euz var dro tri c'hant vloaz, eur relijius devot a scrivaz eul levr var buez sant Joseph, hag e lennomp enhan ar c'homzou-ma : « Ar Speret Santel en deuz lakeet e calon an dud euz ar broiou Cuz-Heol ar c'hoant da renta da zant Joseph bep seurt enoriou. Credi a reomp ne chome ket an enoriou-ze, rentet da zant Joseph, hep pellaat ar goualigner divar an Ilis nag heb tenna eul larguentez a bep seurt grassou hag a bep seurt madou var ar gristenien.

Setu perag am euz sonjet ober al levr-ma. E gallec ne vank ket levriou

a bep seurt var sant Joseph ; mez e brezonec ne velan ket nemeur a dra skrivet divar benn ar patriarch santel-ma. Credet am euz ober eun dra vad ha talvoudeg da neb en devezo ar vadelez da lenn ar pezh am euz skrivet ; credet am euz e vezo sant Joseph anavezet, caret hag enoret guelloc'h gant ar re na ouzont ket ar gallec. Evuruz en em gavin, ma vezo diguemeret mad al levric-ma gant an dud divar ar meaz, evit pere eo skrivet. Paet mad e vezin euz va foan, mar guell lacaat ho c'harantez evit sant Joseph da greski ha rei d'ezho eur fizianz vrasoc'h er guella euz ho mignoned.

Caret am bije ober guelloc'h labour ; mez evel m'ema her c'hinigan da vignoned sant Joseph.

Jesus ha Mari, e hars ho treid e lakan brema al levr-ma ; gouzout a rit ez eo great dre garantez evit sant Joseph. Roit d'ezhan ho pennoz, evit ma lavaro e pep leac'h gloar ha madelez ho servicher mad ha leal ; ha c'hui ive, sant Joseph, na zisprijit ket anezhan : roit, m'ho ped, ho pennoz d'ezhan.

Ke brema en hent, levr ic bihan, gant bennoz ar Famil Zantel. Chanz vad d'id ha buez hir. Gra tro Breiz-Izel ; ke e ti ar paour coulz hag e ti ar pinvidik ; na zisprijez den, ha lavar e pep leac'h gloar ha madelez sant Joseph. Na ean ket da greski e calonou an oll ar garantez evit pried Mari, hor Mam, ha Tad maguer hor Zalver Jesus.

KERLAN.

BUEZ SANT JOSEPH



I

Abars comz euz vertuziou sant Joseph hag euz ar mysteriou braz eo bet test anezho, e compagnunez Jesus ha Mari var an douar, greomp eur zell var buez ar patriarch santel-ma.

A viscoaz ar gristenien ho deuz bet eur garantez vraz evit sant Joseph,

evel m'her gueler e scridou an Doctoret hag an Tadou Santel euz an Ilis ; mez en amzer-ma eo cresket e peb leac'h an devotion d'ezhan. Calz levriou a scriver evit skigna muioc'h mui an anaoudeguez euz he vuez santel. E brezonec n'euz nicun ; eur c'hantic caer bennag hag eun draic bennag euz he vuez e levr *Buez ar Zant* : netra ken. Mad ha deread am euz cavet eta dastum ama eun nebeud euz ar peza lavarar divar benn sant Joseph, evit ma c'houezo mad an oll petra eo ar patriarch santel-ma, hag evit ma vezo anavezet guelloc'h-guel he vuez hag ar peza dle hon lacaat oll d'hen enori ha da greski hon devotion. Credet am euz dre guement-ma ober plijadur da vignoned sant Joseph. An dud desket ho deuz lennet peurvuia he vuez hag a anav pell zo ann traou-ma ; mez e c'helfe beza calz a re al hag ho deuz nebeud a anaoudeguez euz a vuez ar

zant braz-ma. An dud na anavezont ket mad sant Joseph, ar re n'ho deuz ket studiet he vuez na taolet evez er peza eo bet e guirionez var an douar, na velont marteze er Zant braz-ma nemet eur paour keaz mecherour, heb madou, eur c'halvez carguet da vaganant he boan hag he labour Jesus ha Mari ha d'ho difenn ous ho enebourien, ous counar Herodez, eur roue criz ha didruez.

II

Sant Joseph en deuz renet var an douar eur vuez cuzet ha didrouz ; ne veler ket en defe great nemeur a vuzudou. Caout a reer eun darn dud ha na garont nemet ar re ho deuz great traou burzuduz ha na sonjont ket peguen huel eo bet savet sant Joseph gant Doue, pa z'eo bet dibabet e mesk ar re al evit beza Pried d'ar

Verc'hez Vari ha Tad maguer da Jesus. Dre-ze ar re-ze a ra nebeud a stad anezhan hag ho deuz nebeud a garantez evidhan. Gouscoude ma dleer enori ar Zœnt ha caout devotion da eur re bennag, eo dreist oll da zant Joseph. Goude Jesus ha Mari, sant Joseph en em gav er Famil Zantel : an tri hano-ze a ia bepred assamblez pa gomzer euz ar Famil Zantel. Hen eo evel an tad a Famil : d'he gaout e teu an Eal, pa zo eur c'helou bennag euz an env ; d'ezhan e roer an urz.

Oh ia ! Roit da Jesus ha da Vari ar reng kenta en ho carantez ; mez na zerrit ket an or ouz Joseph ; roit d'ezhan eur c'hornig en ho calon. Goude Jesus ha Mari, sant Joseph a dle caout al loden guenta en ho carantez hag en ho tevotion d'ar Zœnt ha ne ve ken nemet abalamour d'ar vad en deuz great da Jesus hor Zalver

ha da Vari hor Mam, epad an amzer en deuz tremenet gantho var an douar.

Ma rit stad ouz eun den evit he noblanz, e peleac'h e kefet den no-ploc'h eguet sant Joseph ? Bez' ez oa euz a lignez ar rouaned, Pried oa d'ar Verc'hez Vari rouanez an env hag an douar ; Tad maguer oa da Jesus mab unig an Tad-Eternel crouer an env hag an douar. Mez paour oa... guir eo. Guel a ze ; rag panefe se ne vije ket bet savet ken huel gant Doue. Ma vije bet pinvidik, Jesus-Christ n'en dije ket her c'hemeret da dad ; ma vije bet roue, var eun tron, Jesus na vije ket eat da chom en he di, o tont er bed. Jesus a felle d'ezhan guenel en eur c'hraou, beva er baourentez ha mervel var eur groaz.

Aoalc'h a dud pinvidik hag a rouaned a oa en amzer-ze er bed ; mez Jesus-Christ a felle d'ezhan tremen an darn vuia euz he amzer e ti eur me-

cherour, e ti eur c'halvez ; a felle d'ezhan zoken beza galvet mab ar c'halvez, evel m'her gueler en Aviel : « Ha neket hema eo mab ar c'halvez ?... Neket hema eo ar c'halvez, mab Mari ?... »

III

Sant Joseph oa euz a dribu Juda, pehini he doa ar c'henta reng en daouzec tribu. Disken a ree euz a lignez ar rouaned, euz a famil David mab da Jesse, choazet gant Doue evit pignad var an tron ; euz a famil ar roue Salomon, savet ken huel ma oa dreist an oll rouaned euz an douar dre he zanvez hag he furnez ; euz a famil Zorobabel, en doa savet a nevez templ Jerusalem. Bez' ez oa euz a ouenn ar batriarched santel hag ar veleien vraz euz al lezen goz.

Doue en doa lavaret da Abraham ha da Zavid e tiskenje ar Messias pe ar

Zalver euz ho lignez : ar pez a arruaz e guirionez evel m'her gueler e Aviel sant Vaze hag en Aviel sant Lucas.

Er penn kenta euz he Aviel, o comz euz kerentez Jesus-Christ, sant Vaze a lavar ez oa hor Zalver mab da Zavid, mab da Abraham, hag e talc'h mad da henvel ho lignez a rum da rum bete sant Joseph, pried ar Verc'hez Vari, dre pehini eo ganet Jesus hanvet Salver.

Jesus-Christ oa eta e guirionez ar Messias-Roue, promettet gant Doue da Abraham ha da Zavid hag annonet ken aliez a vech gant ar Bropheeted, pell oa abars ma teuaz er bed. Guir heritour ez oa da Zavid dre lignez sant Joseph hag hini ar Verc'hez Vari he Vam, pere a ziskenne var eün euz a lignez ar roue David, evel m'her gueler sclear e Aviel sant Vaze ha sant Lucas. Setu perag an tri roue, o tont da Jerusalem, a c'hou-

lenne : E pe leac'h ema roue ar Jusevien nevez ganet ? Setu perag c'hoaz Pons-Pilat a scrivaz var ar groaz da zevez ar Bassion : Jesus euz a Nazaret, roue ar Jusevien. An Aotrou Doue en doa lavaret d'ar roue David ec'h asseje ar Messias var he dron : « Hag an Otrou Doue a rei d'ezhan, eme sant Lucas, tron David he dad. » — Bez' ez oa evit guir euz a lignez ar roue David hag heritour d'ezhan ; mez ma oa roue ar Jusevien, he rouantelez na oa ket henvel ouz rouantelez David ; he rouantelez a zo eur rouantelez spirituel : ar pezh a zo caeroc'h. Roue e oa, nan evel rouaned an douar, mez roue var an eneou, var an Ilis dre he c'hrassou, dre he sacramanchou hag he oll vadou spirituel. Hen he unan hen discleriaz d'ar Jusevien ha da Bons-Pilat, o lavaret ez oa roue ; mez he rouantelez na oa ket euz ar bed-ma,

Sant Joseph, evel m'her gueler e Aviel sant Vaze, a oa mab da Jacob ; hag hervez sant Lucas, e oa mab, da lavaret eo, mab caer da Heli pe Joachim tad ar Verc'hez Vari, he bried (1). An Tadou Santel euz an Ilis a lavar e meur a leac'h ez oa Mari ha Joseph euz ar memez tribu hag euz ar memez famil. Setu perag an Aviel, o rei deomp lignez sant Joseph, a ro deomp ive er memez amzer lignez ar Verc'hez Vari, pa ez oant ho daou euz ar memez tribu hag euz ar memez famil.

IV

Guenevelez hor Zalver, eme an abbat Rupert, a zo evel ar skeul burzuduz en doa guelet ar patriarch Jacob en he huvre. Eur penn outhi oa var an douar hag ar penn al a dize beteg an env. Abraham ha David a zo evel

(1) Cornelius a Lapide.

ar postou euz ar skeul-ze ; d'ezho ho daou e oa bet lavaret gant Doue e tiskenje ar Messias euz ho lignez. Ar Batriarched a zo evel ar bisier er skeul-ze. Sant Joseph a zo er peñ huella, e beg ar skeul, evel ar vaz diveza var behini eo harpet an Aotrou Doue : Ar Mabig Jesus a zo harpet enhan evel var he c'houard.

Sant Bernard a lavar ive eo ar Batriarched e tisken Jesus-Christ outho, henvel ouz ar menezioù divar pere e tisken hor Zalver beteg enomp en draonien-ma euz ar bed.

Mez lignez ar roue David a oa discaret divar an tron. Eun divroad oa var an tron caer-ze, pa zeuaz hor Zalver var an douar : Herodez oa deuet a benn da guemer leac'h ar guir rouaned ha d'en em lacaat da roue var ar Jusevien, hen pehini ne oa ket zoken euz ar bopl Israel.

Sant Joseph en em gave var an derez guenta da bignad var tron David ma vije chomed ar gurunen en he lignez. Mez evidhan da veza euz a ouenn ar rôuaned, ar patriarch santel-ma a oa couezet en eur reng izel hag heb madou an douar : kement se oa en urz euz a brovidanz Doue. Eleac'h beza e creiz an danveziou, eleac'h kaout madou braz evel ho devoa guech al he dud coz, sant Joseph oa o chom en eur gueur vihan, hanvet Nazareth, eur gueric ken disprizet, evel m'her gueler en Aviel, ma oa ar c'hiz etouez ar Jusevien da lavaret : « Hag hen e c'hell netra vad dont euz a Nazareth ? » Eno en doa eun tiic bihan, e pehini e veve didrouz, gant Jesus ha Mari he bried, o labourad ouz he vecher calvez, o c'hounid he vara var bouez he zivrec'h. Arab eo credi oa Mari ha Joseph er brassa paourentez ; ne oant ket pinvidik,

guir eo ; mez evel ato ne oant ket o clask bara. Eun ti bihan ho devoa e Nazareth : enhan eo bet concevet Mab Doue en em c'hreat den.

An ti-ze a zo bet douguet gant 'an Elez d'an Itali, e leac'h galvet hirio : Itron Varia Loretta.

Euruz en he stad hag en he gondition, eme sant Ian Damacen, Joseph a vele, heb goarizi, Rom mestrez var he vro, hag an tyrant Herodez asezet var tron David hag he dud coz. Eurussoc'h e oa en he baourentez eguet ar roue Herodez hag an impalaer August var ho zron ; rag caret a rea he baourentez ha guelet a rea dorn Doue e peb tra euz a guement a arru var an douar.

V

Evel an oll dud santel euz an amzerze, sant Joseph a oa e gortoz euz hor

Zalver ; na eane da huanadi var zu an heur d'he velet ha da bedi an Otrou Doue d'he zigass var an douar ar c'henta ar guella. Kement a humilite en doa ma oa pell dioc'h he zonch caout er mysteriou-braz euz a zilvidiguez ar bed eul loden ker caer ha ken enoruz. Hen oa couscoude an den euruz, an den burzuduz, dibabet gant Doue e mesk ar re al evit ar brassa burzudou ; e tre he zaouarn e tleje lacaat he gaera tenzor : Jesus ha Mari. Enhan e tleje fiziout he vrasa secrejou, bete ken e teuje an heur merket evit ho discleria d'an douar.

Ia, sant Joseph a oa choazet gant Doue evit beza pried d'ar Verc'hez Vari, evit miret he guerc'hded, evit he difenn, evit he sicour, evit he maga gant he labour, evit cuza myster an Incarnation didan he briedelez, tre ken e vije deuet ar mare d'hen discleria d'an dud, hag oc'hpenn evit

beza Tad maguer da Jesus, da Vab Doue en em c'hreat den.

Dre-ze en deuz bet diganthan ar gras-sou en doa ezom en eur garg hag en eur reng ken huel ha ken enoruz. Neket souezuz eta ma clevomp an dud ho deuz comzet anezhan, o rei d'ezhan bep seurt meuleudiou; rag ar Speret Santel he unan a zo en em garguet en Aviel da ziscleria he zantelez hag ar reng huel en deuz bet var an douar. Gant eun nebeudic comzou heb ken e lavar calz muioc'h eguet na c'hell speret an den da anavout ha calz muioc'h eguet na c'hell an Doctored da lavaret.

Ar c'homzou-ma euz an Aviel a ziscouez he zantelez: « Joseph o veza eta eun den just. » Eun den just, hervez sant Thomas, a zo eun den hag en deuz an oll vertuziou. — « Joseph pried Mari, dre pehini eo ganet Jesus galvet ar C'hrist. » Ama e veler he briedelez gant Mari, hag

oc'hpenn ez eo ive Tad maguer da Jesus. — Ar Speret Santel hag an Itron Varia a ro d'ezhan an hano a dad. — « He dad hag he vam a oa estlammet gant ar pez a glevent lavaret var he bouez. » — Hag ar c'homzou-ma lavaret gant ar Ver-c'hez d'he Mab: « Va mab, perag oc'h euz-hu great kement se? Setu ho tad ha me glac'haret ho claske? »

« Joseph mab da Zavid, n'ho pezit ket aoun o viret Mari ho pried, rag ar pez e deuz concevet a zo a bers ar Speret Santel. Lacaat a rei er bed eur mab hag a c'halfot Jesus, rag hen eo hag a saveteo he bopl euz he bec'hejou. » Ama e veler roet da Joseph an huella carg en deuz bet biscoaz den var an douar. — Goude, en Aviel, e tiscouezer deomp Joseph oc'h ober an deveriou braz ha diez euz he garg: e Bethleem, en templ, en Egypt, e Nazareth. Achui a ra, o lavaret e

sente Jesus ouz Joseph evel ouz Mari he vam : « Hag e sente outho. »

Dre an nebeudik comzou-ze ar Speret Santel a lavar deomp petra eo Joseph e kever an tri ferson euz an Drinded, e kever Jesus-Christ hag e kever an Itron Varia. Lacaat a ra dirazomp an den euruz-ze, heb he bar e touez an dud hag an Elez hag an huella goude Jesus ha Mari. An Tadou Santel euz an Ilis, an Doctoret, ar Zcent hag an dud ho deuz comzet anezhan na reont hed an amzer nemet explica ar c'homzou-ze. Guelomp eun darn euz ar pezh ho deuz lavaret divar benn sant Joseph.

VI

Hervez sant Thomas, Doue a ra da neb en deuz choazet evit eur garg bennag an oll c'hrassou en deuz ezom evit ober an deyeriou euz ar garg-ze.

An Aotrou Doue eta, emesant Liguori, o veza lekeat sant Joseph da zerc'hel leac'h a dad da Jesus, a roaz d'ezhan, heb mar ebet, an oll zonezonou a furnez hag a zantelez a zere d'ezhan caout er garg-ze. Credi e c'heller en deuz roet d'ezhan an oll c'hrassou hag an oll zonezonou ho deuz bet ar Zcent al. Gerson ha Suarez al lavar en deuz bet sant Joseph tri zra ha ne d'int ket bet roet d'an oll : da guenta, eo bet santeleat abars m'oa ganet, evel m'oa bet ar prophet Jeremi ha sant Ian Eadezour ; d'an eil, e oa bet confirmet pe creveet e stad a c'hras ; d'an drede, e oa bet tennet diouthan an tech pe ar pleg d'ar pec'het, hevelep fceson ma 'nem zante ket an distera douguet d'ar pec'hed (1). Ar penn kenta euz he vuez neket anavezet gant

(1) Saint Liguori, *Œuvres complètes*. Serm. sur saint Joseph.

an dud ; Doue heb ken a oar peguer braz eo ar zantelez en deuz cavet er grassou hag en donezonou caer en deuz bet euz an env. Choazet gant Doue evit beza Fried d'ar Verc'hez Vari ha Tad maguer da Jesus, sant Joseph a dle beza santel adaleg ar penn kenta euz he vuez. Ar Speret Santel en em guemeraz abred evit he zével d'ar zantelez a zere caout en hini a dleje tremen keit amzer e compagnunez Jesus ha Mari.

Ar Speret Santel ha sant Joseph, eme sant Lauranz Justinien, oa en em garguet euz ar Verc'hez Vari : sant Joseph a dleje pourvei da ezomou ar c'horf hag he zifenn : hag ar Speret Santel a bourvee da ezomou hec'h ene hag he zioualle.

A dra zur santelez sant Joseph na oa ket par da zantelez Mari he bried ; rag an Itron Varia, evel Mam Doue, Rouanez ar Zcent hag an Elez, eo ar

zantela a zo deuet euz a zorn an Aotrou Doue. Evel ato, santelez sant Joseph a dlee caout eun dra bennag a henvelediguez gant hini he bried santel, evit ma ne vije ket bet re a guemm etrezho, hag evit ma vije deread ho dimizi ; rag er bed, en eureujou deread ne veler ket nemeur a guemm etre ar priejou.

Ar Speret Santel, evel m'hon euz guelet, a lavar e oa eun den just er penn kenta euz he briedelez, da lavarret eo, eme sant Perr Chrysolog, eun den santel ha leun a vertuziou. « Mar d'eo dre zaouarn Mari e teu an oll c'hrassou ho deuz an dud digant Doue, evel ma lavar sant Bernardin a Sienn, gant pebez larguentez, eme sant Liguori, e tleomp credi he devoa ho scuillet e ene sant Joseph he fried, a gare kement ha gant pehini ez oa ive ker caret d'he zro. »

Credi a ran, eme sant Bernardin,

he deuz ar Verc'hez scuillet gant ar brassa larguentez an oll denzor euz he c'halon e ene Joseph, kement ha ma c'helle ene Joseph da ziguemer.

« O Joseph, nag huel oc'h savet, eme Gerson, na burzuduz eo hoc'h enor, pa 'z eo guir Mam Doue, Rouanez an env hag an douar, ne deuz ket credet en em izelae re oc'h ho kervel he mestr, he otrou. »

VII

Eun darn theologianet ho deuz credet ha lavaret e oa bet tennet digant Joseph an tech pe ar pleg d'ar pec'hed ractal goude he eured, en hevelep faeson ma n'en em zante ket an distera douguet d'ar pec'hed (1). — An donezon-ze en doa bet dre respet evit ar Verc'hez sacr ha Mam Doue. Dre-

(1) Eckins, Christopol... Gerson, etc.

ze en doa eur garantez vraz evit an Itron Varia ha goude Doue, he vrassa fizianza oa enhi.

Suarez en deuz credet ha lavaret e oa sant Joseph santeloc'h eguet sant Iann Badezour hag an Ebestel (1). — Setu ama penoz en em guemer an Doctoret hag an Theologianet evit discouez santelez vraz sant Joseph.

« Seul dostoc'h, eme sant Thomas, en em gav eun dra d'he fenn-grisien, seul vrassoc'h eo al loden he deuz er c'hrisien-ze. Ar c'hrisien euz ar c'hraz a zo e Jesus-Christ; evel Doue, hen he gra, hag evel den, hen he ro deomp, diouthan e teu deomp. Sant Iann a lavar (2): « Ar c'hraz hag ar virionez a zo great dre Jesus-Christ hag euz he leunder e recevomp oll. » Ar Verc'hez Vari a zo bet an tosta

(1) Quæstio 29, art. II. Suarez.

(2) Cap. 1.

da Jesus-Christ evel den ; dre m'en deuz en em c'hreat den enhi.

Suarez ha re al a lavar neuze : Den na zo bet tostoc'h eguet ar Verc'hez da Jesus-Christ mamen ar c'hraz, na den na zo bet tostoc'h eguet Joseph d'ar Verc'hez Vari canol ar c'hraz. Dreze 'ta, goude ar Verc'hez Vari, sant Joseph en deuz bet ar brassa loden e graz Jesus-Christ.

Setu ama penoz ne deuz den hag e ve en em gave tostoc'h eguet Joseph da Jesus ha da Vari ; ha da guenta da Vari. Mari a zo rouanez an Elez, ha dre-ze eo huelloc'h eguet an Elez. Mari a zo rouanez ar Zœnt hag ho mam ; dre-ze eo huelloc'h evidho. Mez Joseph a zo pried Mari ; dre-ze Joseph en em gav unanet gant ar Verc'hez en eun doare burzuduz, ma eo ar c'haera hag ar guella a oufe eun den da gaout. Ne deuz ken nemet an Drindet santel hag e ve bet una-

net huelloc'h gant ar Verc'hez Vari. Dre-ze Joseph a zo calz tostoc'h da ganol ar c'hraz, da lavaret eo, d'ar Verc'hez, eguet nicun euz an Elez hag euz ar Zœnt. Dre eno ez eo savet huelloc'h evidho.

Mez pa zeo guir en em gav an tosta d'ar Vecr'hez canol ar c'hraz, ez eo ive, goude Mari, an tosta da Jesus-Christ ar c'hrisien hag ar vamen euz ar c'hraz. An Ebestel a zo er penn kenta euz an Iliz ; canaded int da Jesus-Christ ha carguet da brezeg an Aviel, da rei ar zacramanchou ha da c'houarn an Iliz. Mez Joseph en deuz eun hano caeroc'h, huelloc'h : Pried d'ar Verc'hez ha Tad maguer da Jesus-Christ. Oc'hpenn, eur garg huelloc'h en deuz. Carg an Ebestel a zo evit an urz euz ar c'hraz, mez hini Joseph a zo evit an urz euz a vister an Incarnation, calz santeloc'h, eme Suarez. Sant Ian Badezour en deuz

digoret ha kempennet an hent da Jesus-Christ ; an Ebestel ho deuz casset an anaoudeguez euz Jesus-Christ e peb bro, o prezeg he Aviel hag o skuilla he c'hrassou var an dud ; mez Joseph a zoug Jesus-Christ da Jerusalem ha d'an Egypt, hag he zigas en dro. Hen eo an Tad a famil ; rei a ra lojeis da Jesus ha da Vari ; ho maga a ra gant ar c'houezen euz he dal ; hag ho c'has hag ho digas a ra e pep leac'h ma lavar d'ezhan an Eal abers Doue. Tregont vloaz e tremen en doare-ze gant Jesus ha Mari, heb en em zispartia dioutho. Kent-se ta Joseph, dre an enor en deuz bet da veza Pried d'ar Verc'hez ha Tad maguer da Jesus, en em gav en eur reng hag en eur garg a gostez, ha dishenvel ouz hini sant Ian Badezour, hag ouz hini an Ebestel. Piou ne vel ket aze en deuz bet sant Joseph muioc'h a c'hrassou eguet an oll Zcent al, hag

eo savet huelloc'h evidho dre he hano a Bried d'ar Verc'hez hag a Dad da Jesus, hag ive dre ar zantelez en deuz cavet o veva keit amzer gant Jesus ha Mari ?

Sant Joseph, evel hon euz lavaret, a zo en em gavet an tosta da Jesus-Christ mamen an oll c'hrassou, ha d'ar Verc'hez canol an oll c'hrassou. Kent-se, goude Mari, n'euz den hag en defe bet digant Doue kement a c'hrassou eguet sant Joseph.

VIII

An Tadou Santel euz an Ilis ho deuz credet en doa sant Joseph miret ar guerc'hded epad he vuez hag o viret an tenzor caer-ze en deuz evel meritet beza Pried d'ar Verc'hez Vari. O tifenn guerc'hded Mari eneb Helvi-

dius, eun heretik hag a felle d'ezhan rei da gredi ne oa ket Mam Doue guerc'hez, sant Jerom a lavar ar c'homzouma : « C'houi a lavar neket Mari guerc'hez ; mez me a lavar neket Mari heben hag a zo chomet guerc'hez, mez Joseph zoken en deuz miret ar guerc'hded dre Vari evit ma vije ganet eur mab guerc'h en eur briedelez guerc'h. » Sant Augustin ha calz a re al a lavar ive en deuz sant Joseph miret an tenzor caer euz ar glanded ; setu ama he gomzou : « O Joseph, bevit er guerc'hded gant Mari ho pried ; rag euz ar guerc'hded e teu vertuz an Elez. Ra vezo Mari Mam da Jesus-Christ, o viret he guerc'hded ; mes c'houi, bezit Tad da Jesus dre ho glanded hag ho cuerc'hded. Bezit laouen eta, Joseph, abalamour m'oc'h euz, dre ar merit euz ho cuerc'hded, tremenet gant ho pried eur vuez ker pur ha ker zantel ma

zere ouzoc'h beza galvet Tad d'hor Zalver (1).

Sant Perr Damien a ziscouez deomp creden an Iliz var ar poent-ma en he amzer. « Ha n'ouzoc'h-hu ket, emezhan, en deuz Mab Doue caret kement ar glanded a gorf ma na gave ket braz aoalc'h evidhan glanded ar priejou evit dont er bed, mez fellet eo bet d'ezhan caout eur Verc'hez evit mam. Ha c'hoaz oc'hpenn, ne oa ket aoalc'h evidhan caout eur Verc'hez evit mam, creden an Ilis eo en deuz ive miret ar guerc'hded an hini a dremene evit he dad. »

Sant Joseph na gavaz ket aoalc'h evidhan miret ar vertuz gaer-ze, evel ho devoa great calz tud santel beteg neuze ; ober a reaz oc'hpenn vœu d'he miret bepred, evel ho devoa great ar Verc'hez Vari. Pe da vare her greaz ?

(1) Serm. in Nativit. Christi. 14.

N'ouzer kel hag hen en doa great ar vœu-ze pell araog he eured ; mez a dra zur her greaz da viana en he eured ; rag an Tadou Santel euz an Ilis hag an Doctoret hel lavar deomp. Sêtu ama comzou sant Augustin : « Joseph, pehini en doa great vœu da chom guerc'h, na oa ket pried d'ar Verc'hez evit tenna he guerc'hded diganthi, mez evit he viret (1). » Sant Thomas, Suarez, sant Frances a Sales ha calz a re al a lavar en doa sant Joseph great ar vœu-ze.

IX

EURED SANT JOSEPH

Setu ama petra lavar sant Gregor a Nyss, sant Iann Damacen, Nicephor ha calz a re al var eured Mari ha Joseph. An Itron Varia a guiteaz abred ti he zad hag he mam. D'an oad a dri

(1) Serm. LIII.

bloaz, sant Joachim ha santez Anna a gassaz ho merc'h d'an templ evit he goestla da Zoue. Ar Verc'hez santel a chomaz eno unec vloaz hag epad an arñzer-ze e collaz he c'herent. Pevarzec vloaz e doa, pa oa sonjet he dimizi. Evel ma lavar an Tadou Santel euz an Ilis, pa vije deuet ar mare da zimizi ar merc'hed iaouank casset d'an templ gant ho zud, e vijent lekeat etre daouarn ho c'herent evit mont d'ar gear. Mez, evel m'her c'hreder, kerent an Itron Varia oa maro unec vloaz goude m'ez oa eat d'an templ. Petra da ober dicuthi ? Ne oa ket deread miret en templ ar merc'hed deuet en oad da zimizi ha ne oa ket ken nebeud ar c'hiz d'hen ober. Ar veleien a guemeraz neuze cuzul etrezho evit gouzout petra da ober diouz ar Verc'hez, ha dre ali ar Speret-Santel e claskjont eun den fur ha santel, gouest da viret ar Verc'hez Vari. Cavet e oa

an den fur ha santel-ze : sant Joseph oa an den-ze, choazet gant Doue evit ar garg enoruz-ze. An daou bried santel oa euz ar memes famil hag euz ar memes tribu. An eured a oa great gant lid'en templ hag ar veleien a lakeaz ar Verc'hez Vari etre daouarn sant Joseph (1).

Da he oad e temezaz sant Joseph d'ar Verc'hez Vari ? Bez' ez euz hag a lavar ez oa deuet var an oad ; ez oa coz. Mez Suarez a lavar a dleer credi kentoc'h e oa e creiz he vrud, var dro tregont pe daou ugent vloaz. Mar vije bet coz ne vije ket bet eaz d'ezhan cass ar Famil Zantel d'an Egypt, hag oc'hpenn penoz en dije gallet labourad evit gounid peadra da vaga Jesus ha Mari ?

Credi e c'heller, eme Suarez, e vevaz tre ken na'z eaz hor Zalver Jesus-

(1) S. Grégoire, S. Jean Damascène, Nicéphore, etc. Suarez, Quæstio xxix, art. 11.

Christ da brezeg he Aviel. Dre-ze sant Joseph en deuz tremenet tregont vloaz gant Jesus ha Mari.

X

Sant Francez a Sales ha calz a re al ho deuz credet eo resussitet sant Joseph ; eme er Baradoz corf hag ene. « Penoz, eme sant Frances, e c'helfemp-ni mancout da gredi en defe Jesus-Christ casset ganthan d'an env sant Joseph corf hag ene, hen pehini en doa bet an enor hag ar c'hraz d'he zouguen ken aliez a vech etre he zivrec'h ? Sant Joseph a zo eta en env corf hag ene, hep douetans ebet (1). »

Suarez ive a lavar na vel ket netra hag a helfe miret da heulia ar greden ho deuz calz a dud eo resussitet sant Joseph da Vener ar Groaz pe d'ar Zul Fask.

(1) Entretien, 19.

Nag huel eo savet sant Joseph en env ! Ha penoz ne vije ket ? Uzet en deuz he ners hag he iec'hed o labourad evit maga Jesus ha Mari. Tregont vloaz en deuz tremenet gantho ! Pebez buez ! Ma en deuz bet joa ha levenez d'ho heul, poan hag anken n'euz ket manket d'ezhan hed he amzer.

Joa en deuz bet pa zeuaz eun Eal da rei d'ezhan anaoudeguez euz a vyster an Incarnation ; mez ar joa-ze a oa bet coustet calz a boan d'ezhan dre 'n abec ma ne ouie ket penoz e doa concevet ar Verc'hez he Mab divin. Joa ha levenez en deuz bet pa oa ganet ar Mabic-Jesus e Bethleem, pa teuaz ar bastored a vandenn d'he adori, o velet an tri Roue o tont da glasg ho Roue hag ho Doue hag o kinigua d'ezhan aour, ezanz ha mirrh ; o clevet ez oant bet renet gant eur stereden burzuduz ; mez poan hag anken en deuz bet o velet Jesus, he Zoue,

diskennet ken izel, en eur c'hraou, en dienez, var eun tam plouz. Joa en deuz bet o rei d'hor Zalver an hano a Jesus da zevez ar Circoncision ; mez poan en deuz bet o velet he voad o redeg didan countel ar Circoncision. Joa en deuz bet o clevout an traou caer a lavarjer ouz Jesus en templ ; mez anken en deuz santet o clevout e vije treuziet calon he bried zantel gant eur c'hleze a c'hlac'har. Joa en deuz bet o velet an droug-speret hag an idolou trec'het gant Jesus en Ægypt ; mez poan en deuz bet o kuitaad he vro, o velet e renkje Jesus tec'het ouz counar Herodez evit savetei he vuez, hag o clevout maro kement a vugali-gou, merzeriet dre 'n abec da Jesus.

Joa en deuz bet o clevout e tleje distrei adare d'he vro hag e c'helje beva e peoc'h e compagnunez Jesus ha Mari ; mez poan hag encrez en deuz bet en distro, o clevout lavaret

ez oa Archelaüs mestr er vro ha ne glaske, evel Herodez, nemet lacaat Jesus d'ar maro. Joa en deuz bet pa gavaz Jesus en templ, o tisput ous an Doctored : mez eun anken vraz e doa treuziet he galon, pa velaz ez oa bet dianket Jesus hag e oa chomet var ho lerc'h.

— Buez sant Joseph a zo bet eta kemesket a joa hag a dristidiguez ; a levenez hag a velconi ; a boan hag a blijadur.

Caout a reer ive e buez peb christen eun dra bennag euz ar vuez-ze ; rag Jesus na ren ket bepred he vignoned dre hent ar groaz, dre ar poaniou, dre an trubuilhou ; na ken nebeud n'ho ren ket bepred dre hent ar joa, an douster hag ar peoc'h ; mez guech dre eun hent ha guech dre eun hent al. En doare-ze en deuz tremenet sant Joseph var dro tregont vloaz gant Jesus ha Mari. O pebez santelez e tleje beza cavet gant Jesus ha Mari,

o veva gantho bemde, o comz outho beb mare, o pidi aliez assamblez gantho hag o velet ho buez zantel ! Pebez scol a zantelez evidhan ! Peguer desket e tleje beza er skianjou divin ! Ma oa eun den just, evel ma lavar an Aviel, abars he eured, peguer santel neket deuet epad keit amzer tremenet gant Jesus ha Mari ! Neket heb ræson eta e lavarer eo kent eun Eal eguet eun den. Goude an tregont vloaz-ze, implijet ker mad, e varvaz etre divrec'h Jesus ha Mari. O maro euruz ! Nag hi a zo caer ! Nag hi a zo santel buez sant Joseph ! Nag huel e tle beza brema er Baradoz ! Na braz e tle beza he c'halloud !...

O sant Joseph, pedit evidomp ; pedit evit an Ilis. Difennit ar gristenien evel oc'h euz difennet Jesus ha Mari epad m'oac'h gantho var an douar.

VERTUZIOU SANT JOSEPH

UNAN HA TREGONT KENTEL
EVIT MIS SANT JOSEPH

INDULJANSOU

Roet gant hon Tad Santel ar Pab Pii Nao
d'ar re a ra mis sant Joseph

O velet ma cressk bemde ar fizianz ho
deuz ar gristenien e scoazel sant Joseph,
pried ar Verchez Vari, evit caout digant-
han ners ha sikour, hon Tad Santel ar
Pab Pii Nao en deuz selaouet goulenn calz
a dud devot hag en deuz roet, dre eul
lizer, an daouzek a vis Gouere 1864, eun
induljanz a dri c'hant devez bemde da beb
christen mad a rai epad ar mis ar pez a
zo merket el levr skrivet e Rom ha galvet :



SANT JOSEPH, PATRON AR MARO MAD
PEDIT EVIDOMP !

Meditationou var vertuziou sant Joseph evit consacri d'exhan mis Meurs. Oc'h-penn e ro ive eun induljanz plenier da beh christen mad en devezo dalc'het bemde d'an devotion-ze epad ar mis; o cofess hâg o communia, hag oc'h ober eun nebeud pedennou evel ma c'houlenn an Tad Santel ar Pab, ec'h hell gounid an induljanz-ze an devez ma caret epad ar mis.

C'hoaz oc'hpenn, hon Tad Santel ar Pab Pii Nao, evit creski muioc'h vui an devotion d'ar patriarch santel-ma, hon difennour, hag evit ma vezo œssoc'h d'an oll ober ar pezh a c'halver *Mis sant Joseph*, en deuz bet ar vadelez da rei d'an oll gristenien vad an oll induljansou a gomer ama anezho, gant ma rint eur bedenn bennag hageun œuvr mad bennag hed ar mis, evel m'her greer epad mis Mae en enor d'ar Verchez Vari, oc'h ober ive kement a zo gourc'hemenet ama diaraog. An induljansou, hervez en deuz lavaret hon Tad Santel ar Pab, a hell bez lakeat da dalvout d'an anaon.

An induljansou-ma a zo roet evit padout da viken, heb na vezo red kaout lizer al ebet.

Roet e Rom, e ti Secretour ar Gongregation zantel euz an induljansou, ar zeiz varnugent a vis Ebrel 1865.

Fr. ANTON M. Card. PANEBIANCO.

L. † S. A. COLOMBA, Secretour.

MIS SANT JOSEPH

**An induljansou e c'heller gounid oc'h ober
mis Sant Joseph**

Ar zeiz varnugent a vis Ebrel 1865, hon Tad Santel ar Pab Pii Nao en deuz roet da c'hounid d'an oll gristenien fidel ar memez induljansou a c'hounezeur oc'h ober mis Mari. Kent-se piou bennag, epad mis Meurs, a rai bemdez pe eur beden, pe a lenno eul levr mad bennag en enor da zant Joseph, en he bard he-unan pe gant ar re al, a hello gounid bemdez tri c'hant

devez induljanz, hag oc'hpenn, mar d'eo bet aketuz da ober bemdez eur beden pe da lenn eun dra bennag en enor da zant Joseph, e c'hell c'hoaz gounid eun induljanz leun pe plenier en deiz ma caro etz ar mis, gant ma ialo da goffez, da gommunia ha ma pedo hervez intantion hon Tad Santel ar Pab.

An induljansou-ma a c'hell beza gounezet ive evit an anaoun.

EUR GUER BENNAG

DIVAR BENN MIS SANT JOSEPH

Petra eo ar pezh a c'halver Mis sant Joseph? Mis Meurs a zo kemeret evit enori sant Joseph evel ma'z eo bet choazet mis Mae evit renta d'ar Verc'hez Vari peb gloar ha peb meuleudi; dre-ze mis Mae a zo galvet mis Mari. Piou na oar ket petra eo mis Mari? Piou na oar ket ez eo pedet, ez eo enoret ar Verc'hez Santel epad ar mis-ze hag e caner canticou caer evit he

meuli? Mis Meurs ive a zo galvet mis sant Joseph, rag an naounteg euz ar miz-ze e c'harru he c'houel.

Epad ar mis-ze ar gristenien devot a zeu da enori sant Joseph hervez ho galloud ha da guinig d'ezhan ho fedennou. Bemdez ho deuz sonj anezhan; lenn a reont kement ha ma c'hellont eun dra bennag euz he vuez, o studia he vertuziou hag e reont bep mare eun œuvr a garantez bennag en he enor. Neket diæz ober mis sant Joseph: hen ober e c'hellit en ho pard ho-unan pe gant tud ho ti. Neket diæz lavaret bemdez eur bedenn bennagen enor d'ar patriarch santel-ma, ha ne ve ken nemet eur *Bater* hag eun *Ave Maria*; pe lenn, mar guellit, eun dra bennag divar benn he vertuziou, pe cana eur c'hantik bennag evit hen enori,

Oc'h ober kement-se bemdez e c'hounezit tri c'hant devez induljanz bep devez hag eun induljanz plenier pe leun, en devez ma kerot euz ar mis, gant ma zeot da goffez, da gommunia, ha ma pedot hervez m'her goulenn hon Tad Santel ar Pab.

Guelet a rit, neket diæz ober kement-se ; nebeud eo ar pezh a c'houlenner diganeoc'h, an nebeud-ze couscoude en devezo eun dalvoudeiguez vraz evidhoc'h hag evit an Iliz ; rag ho pedennou hag ho carantez evit sant Joseph a lakeo ar gliz, ar grasou euz an envada ziskenn var hoc'h ene ha var ar gristenien. Ar beden hag an œuvrou a garantez a blij da Zoue hag ho deuz eun ners hag eur galloud braz. Neket heb ræson, eme hon Tad Santel ar Pab Pii Nao, nag heb gounid evit ar bed, en deuz an Aotrou Doue sonjet hirio an deiz lacaat ar gristenien fidel da garout muioc'h ar beden. Pidi a reer muioc'h, emezhan, ha gant mui a garantez eguet eun amzer a zo bet. Mari ha Joseph, pere a harp'an Iliz evit miret na gouezo, an-counac'heet guechal, a zo brema enoret gant an oll, ha drezho ar bed a vezo salvet.

Perag a rejeur brema mis sant Joseph ? Guechal ne oa ket ano euz an traou-se : guir eo ; mez guechal an traou a oa evel guechal ha ne oant ket evel brema.

Neket var vuelaat e za ar bed, abaoe

nevez zo. Ah ! sellit en dro d'ehoc'h ha guelit : nag a zizurz, nag a dorfejou, nag a draou scrijuz ! D'ar c'hlevejou braz e renker caout remejou kre. Ar bed a guemer adare pleg ha costezen d'ar baganeach.

Pa teuaz hor Zalver var an douar, ar bed a ioa païen ; ar guir Doue a ioa nebeud anavezet, caret ha servichet ; beteg ar Jusevien zoken ho devoa evel hen dilezet. Deut da glasg ar Mabig-Jesus, an tri Roue, oc'h arruout e Jerusalem, a c'houlenné e peleac'h ez oa ar roue nevez ganet. An oll, paour ha pinvidig, a oa sebeziet oc'h ho c'hlevout. Den na sonje en ezhan. An Doctored hag an dud desket var al lezen a lavare e tleje guenel e Bethlehem ; mez nicun anezho na brizaz mont d'he glasg na d'he velet. Na gavent ket e tleje kement-se talvout ar boan ; n'ho devoa ket amzer ; traou al ho devoa da ober. Herodez heb ken a lavaraz d'an tri Roue : It d'he glasg ha pa ho pezo her c'havet distroit drez ama d'he lavarit d'in evit ma z'in ive d'her guelet. — Ia, e deun he

galon ar fallacr-ze a lavare : Ha me a ouezo petra da ober anezhan.

Setu petra a c'hoarvezaz da c'henevelez hor Zalver ; setu petra a zo bet e pebamzer a c'houdevez calz pe nebeud hag a veler, siouaz ! hirio an deiz dreist-oll. An dud pinvidik, an dud desket a red var lerc'h traou ar bed ha ken bouzaret ez int e creiz an trouz, ma na glevont ket mouez ar c'hraz ; n'ho deuz ket amzer da adori Doue, da vont da glasg ar Mabig-Jesus, da vont da Vethlehem. Goab a reont aliez euz ar re a red var lerc'h Jesus : euruz zoken pa ne d'int ket henvel oc'h Herodez !

Mez neket, siouaz ! ar re binvidik heb-ken hag a zilez Doue hag ar Famil Santel ; nag a dud paour, nag a dud a bep stad a gaver en amzer-ma e peb leac'h hag a vev evel pa ne vent dleour netra da Zoue ; a dremen ho amzer heb sonjal e Doue, evel pa ne vent ket bet badezet ! Labourad a reont dalc'h mad ; pres ho deuz ; tenn eo var nezho, hag evit petra ? Evit caout peadra da zibri ha da eva, evit dastum

danvez, evit berna pri : netra evit Doue, netra evit ho ene. Var ho meno, n'ho deuz ket amzer, labour ho deuz. Tud keiz, evit petra ez oc'h-hu crouet gant Doue ha lakeet er bed ?...

Ar gristenien vad na reont ket evel-se. Ho gulet a reomp e peb stad, paour ha pinvidik o tremen ho amzer er beden hag el labour, o pedi hag o enori ar Zoent. Gouzout a reont petra ez int dleour da Zoue evit ar vadelez en deuz bet d'ho la-caat er bed, da rei d'ezho, goude an Oelez, ar reng kenta etouez an oll grouadurien ; trugarecaat a reont ho c'hrouer euz he oll vadelezou ha dre eno e reont ho dever. Gouzout a reont ive petra ez int dleour d'ar Famil Zantel, da Jesus, da Vari ha da Joseph. Jesus en deuz hor prenet dre an dienez hag an diouer a bep tra e craou Bethlehem : dre ar beden, dre al labour epad he vuez ; dre an anken en he bas-sion ha dre he varo var ar groaz. Craou Bethlehem ha menez Calvar a lavar da bep christen bep mare pegument ez eo dleour

da Jesus ha peguer braz eo he garantez evit an dud.

Mari e deuz roet Jesus d'ar bed, e deuz he c'hanet hag he vaguet. Hi eo mam Doue hag hor mam, pa e deuz roet he mab evit hor prena ha pa ezomp bet roet d'ezhi evit he bugale gant Jesus en he dremenvan. Oh ! na dleour omp-ni d'ar Verc'hez Vari !

Sant Joseph en deuz bet an enor da veza Pried d'ar Verc'hez Santel ha Tad maguer da Jesus. Ho maguet en deuz gant ar c'houezen euz he dal ; ho difennet en deuz eneb counar Herodez.

Ar gristenien vad a anav an oll guirionezou-ma ; gouzout a reont c'hoaz peguer braz ez eo ezomou an den var an douar, peguen diners eo, pegusement a blegou fall a zo er galon, pegusement en deuz da stourm ouz he voaldechou, ous ar bed gant he skueriou miliguet, ouz an droug-speret gant he bechou stignet a bep tu. O santout an tan euz ar goal dechou o virvi en ho izili hag ho ners o vancout e creiz ar boan hag an drubuill, e taolont

ho fizianz e Doue hag na eanont da hirvoudi var zu an env. Redeg a reont a speret gant ar bastored da Vethlehem, en em starda a reont en dro d'ar Famil Zantel. En em zerc'hel a reont gant feiz ha carantez e hars treid Jesus, Mari ha Joseph. En em guza a reont e calon Jesus ha Mari eneb fallagriez ar bed hag an ifern. Eno ez int cre, eno netra na c'hell noazout d'ezho ; eno ive e tanvont eur joa, eur blijadur ha neket ana-vezet er paleziou alaouret. Eun dudi ez eo evit-ho beza gant ar Famil Zantel ; berr e cavont eno ho amzer ; discuiza a reont euz ho foaniou, euz ho labour hag euz ho oll drubuillou... Neket eun devez pe zaou e carfent chom gant-ho, mez hed ho buez. Dre-ze eta ho gueler o kemer eur mis penn da benn evit enori peb hini anezho : mis Meurs evit enori sant Joseph ; mis Mae evit enori ar Verc'hez Vari, ha mis Even evit enori ar galon sacr a Jesus.

Epad ar misiou-ze, nag a bedennou, nag a hirvoudou a zav a bep tu e trezeg an env evel eun ezanz a c'hoez vad hag a laca

ar gliz euz ar grasou da goueza druz ha puill var an eniou ha var an Iliz. Ar pedennou, ar c'hommunionou hag ann oll œuvrou mad a reer neuze a zic'haou an Aotrou Doue euz an dismeganz en deuz a berz ar bec'herien hag a zalc'h ar bed en he za. Panefe-se piou oar hag hen ne vije ket bet dismantret pell zo, scuis ma tle beza an Aotrou Doue o velet kement a fallagriez e touez an dud ha beteg e touez ar gristenien.

Evel hor pedennou hag hon œuvrou mad a zo nebeud a dra anezho ho unan, e teuomp d'ho harpa var pedennou ha santelez ar Famil Santel. Epad mis Meurs ec'h enoromp sant Joseph Tad ar Famil Santel ; her pedomp da rei deomp ners ha graz da vale calouneg en hent euz ar zilvidiguez.

Credi a reomp gant hon Tad Santel ar Pab Pii Nao e vezimp difennet gant ar Patriarch santel-ma, evel m'en deuz guechall difennet ar Mabig-Jesus oc'h counar Herodez.

Ann nao a vis Even, er bloavez 1863, en em gave er gær a Rom eun niver braz a eskibien euz a bevar c'horn ar bed, diredet da guemer pers er gouel caer greet en abeg da ganonisation a leiz a Zœnt.

Hon Tad Santel ar Pab, en eur brezeguen a reaz d'an eskibien, a lavaraz d'ezho caout fisianz e sant Joseph evel e patron an Iliz en he fez. Evel en devoa sant Joseph guech al, emezhan, miret oc'h Herodez da lacaat ar Mabig-Jesus d'ar maro, hen a viro c'hoaz oc'h Satan hag ar re a zo a du ganthan da laza Jesus e calon ar gristenien.

Setu eta perag e reer ar pezh a c'halver Mis sant Joseph : eun dra vad eo. Hon Tad Santel ar Pab, o rei induljansou braz da c'hounid epad ar mis-ze, a zescouez d'eomp sclear ez eo mad ha talvoudec ober mis sant Joseph.



AN DEVEZ DIVEZA A VIS C'HUEVRER
EVIT DIGUERI MIS SANT JOSEPH

*ALI ; Mad e ve lenn aman ar peñ a zo bet lavaret
eun tamig araog divar benn mis sant Joseph.*

Galloud Sant Joseph en Env

Ar peñ a lavaran ama a zo tennet euz
a Vuez santez Thereza.

« Ma am euz sonch mad, eme santez
Thereza, em euz bet digant sant Joseph
kement tra am euz lavaret d'ezhan gou-
len digant Doue evidoun. Souezet e
vezet ma lavarfen an oll c'hassou am
euz bet digant Doue dre zant Joseph hag
an oll zanjerou, ken evit ar c'horv ken
evit an ene, euz a bere en deuz va zen-
net. Lavaret e ve en defe roet an Otrou
Doue d'ar Zœnt al ar galloud d'hor
zicour en hon oll ezomou, darn en
dra-ma, darn en dra-hont ; var a veler,
sant Joseph en deuz ar gallout d'hor
zicour en hon oll ezomou, hag hor
Zalver a fell d'ezhan dre eno rei deomp
da anaout a zent ounthan en env evel
en deuz great var an douar. Ar re al,
pere am boa aliet d'en em erbidi d'ezhan,
ho deuz santet ive kement-se coulz ha
me. Grassou braz en deuz ar Zant-ma
digant Doue, her gouzout a ran dre ar
peñ en deuz great evidoun, ha dre-ze e

c'halian a galon vad an oll da veza devo d'ezhan. Kement hini am euz anavezet hag en deuz bet eur guir zevotion da zant Joseph, a zo deuet e berr amzer da gaout eur zantelez vraz. Abaoe meur a vloavez zo e c'houlennan diganthan eur c'hraz bennag da zevez he c'houel, ha bep tro am euz hi bet. Neb n'her c'hred ket, me her ped, en hanv Doue, da ober eun cessa var guement-ma. Evidoun-me, n'ouzoun ket penoz ec'h heller sonjal e Rouanez an Elez hag er zoursi e deuz bet ouz Jesus en he vugaleach, heb trugarecaat sant Joseph euz ar pez en deuz great hed an amzer-ze evit ar Vam hag he Mab. »

AR C'HENTA DEVEZ A VIS MEURS

Guerc'hded Mari ha Joseph er stad a briedelez

« Er guer a C'halile, hanvet Nazareth (1), ez oa eur verc'hez demezet da eun den euz a famil David, hanvet Joseph, ha Mari oa hano er verc'hez-ze. » Ar Speret-Santel he unan a ziscouez deomp ama sclear priedelez Mari ha Joseph. Pebez enor evit sant Joseph da veza bet choazet gant Doue evit eur reng ken huel! Doue en deuz lakeat etre he zaouarn he gaera tenzor : Jesus ha Mari. Didan ar skeud euz ar briedelez e felle da Zoue cuza an tenzor-ze ha Joseph a zo carguet d'he viret. Calz eo eta caret gant Doue, pa en deuz fiziet enhan ar guella tra en doa hag a oufet da gaout. Ia, an Itron Varia a zo fiziet e Joseph da zevez he eured evit m'en dije miret

(1) Luc. 1. 27.

he guerc'hded, cuzet didan ar stad a briedelez. Peguer pur ha santel e dleje beza neuze sant Joseph! Oh nan! glanded an Ælez na oa ket re d'ezhan da gaout evit beva e servich he bried zantel. — Ar guerc'hded a oa red da gaout evit digass Jesus-Christ var an douar; rag Mab-Doue en doa choazet a oll viscoazeur verc'hez evit mam, pa vije deuet d'en em ober den.

Setu perag ar prophet Isai a lavar e vije deuet eur verc'hez da c'henel eur mab. Hon Tadou coz er feiz ho deuz bevet en esperanz-ze hag an Aviel a ziscouez deomp ar virionez a guement-ze. Ar guerc'hded a zo eun dra ker caer ma plij da Zoue; bez en deuz enhan eur vertuz ker cre ma hen digass var an douar.

E guirionez petra eo ar guerc'hded? Hervez an Tadou Santel euz an Iliz, ar guerc'hded a zo eun dra bennag

euz a vuez an Ælez; lacaat a ra an dud huelloc'h eguet ar c'horvou dre an disprijanz euz oll blijadurezou ar c'horv ha sevel a ra ar c'horv, en eur fœsson bennag, beteg ar glanded euz ar spe-rejou. Selaouomp ama petra a lavar sant Augustin: Ar guerc'hez, emezhan, pe an dud guerc'h, ho deuz er c'horv eun dra bennag ha neket mui euz ar c'horv, mez ho rent henvel kentoc'h ouz an Eal eguet ouz an den. Ar guerc'hded a zalc'h eur reng e creiz tre ar sperejou hag ar c'horvou, hag a ra deomp tostaat ouc'h natur an Ælez.

Ac'hano neket diez guelet peguement a dlee ar guerc'hded hasta myster an Incarnation; rag petra eo myster an Incarnation? Mab Doue en em c'hreat den: an union ar vrassa, an tosta euz a Zoue gant an den. *Verbum caro factum est.* Pebez myster!

Ha na gav ket d'ehoc'h ez oa re a

guem etre Doue hag an den, etre he c'hened, he zantelez heb he far hag hor c'horvou, leun a vreinadurez hag a louz-toni ; hag evit-se na gav ket d'ehoc'h e oa re bell etre natur Doue ha natur an den evit m'ho dije gallet mont assamblez ? Setu perag ar guerc'hded en em laca etrezho evit ho zostaad an eil ouc'h eben dre he c'hened hag he zantelez. Dre-ze eta ar guerc'hded santel a zo enhan eun dra bennag euz purete an Elez en deuz prepart eur c'horv evit he union gant Doue.

Mez gant aoun ne gredfac'h e lavaran kement-se ac'hanoun va unan, selaouit sant Gregor a Nyss ; setu ama he gomzou : « Ar guerc'hded a laca an Aotrou Doue da zont da chom gant an dud ; ar guerc'hded a ro d'an dud eskel evit nijal etrezeg an env hag en deuz an ners da lacaad ar peoc'h hag ar garantez etre Doue hag an dud

a oa dre natur ken pell an eil dioc'h eguile. »

Ha na velit ket aze peguen huel eo savet Mari ha Joseph he fried ? Ia Mari a zo savet huel, rag he guerc'hded a zo bet choazet a viscoaz evit rei Jesus-Christ d'ar bed ; ha Joseph ive a zo savet huel dre ma'z eo bet carguet da viret ar guerc'hded-ze, eun dra ker precius d'ar bed oll.

Ar guerc'hded a dleje eta digass Jesus-Christ var an douar ; rak mab Doue, o tont er bed, a felle d'ezhan caout eur Verc'hez evit mam hag ar Verc'hez Vari eo ar vam burzuduz-ze, choazet gant an Tad-Eternel evit rei deomp he Vab. Mez Doue na felle ket d'ezhan e vije anavezet myster an Incarnation ken na vije deuet ar mare d'hen diskleria d'an dud. Red ez oa eta cuza guerc'hded Mari hag ar myster braz-ze tre ken e vije deuet an amzer merket. Red ez oa ive oc'hpenn miret

enor ar Verc'hez zantel, eun dra ker precius dirag Doue ha dirag an dud, ma en deuz cavet Jesus-Christ guelloc'h e vije chomet eun darn dud heb credi e oa Mab Doue eguet ho guëlet o caout an distera douetanz var enor he vam, evel ma lavar sant Ambroaz. Mez penoz ober kement-se ? C'hui, sant Joseph, her grei dre ho priedelez. Ia, er stad a briedelez Mari a guzo he guerc'hded, a viro hec'h enor ha myster an Incarnation na vezo anavezet nemet d'he vare. Epad tregont vloaz Jesus Mab unig an Tad-Eternel, a dremeno evit mab Joseph.

O priedelez burzuduz Mari ha Joseph, penoz ho rei da anaout ? Piou da guemer evit hor ren en eur poent ken diez ? N'oufemp ket caout, eme Bossuet (1), den guelloc'h eguet sant Augustin, en deuz comzet ker mad

(1) Bossuet, *Panégirique de saint Joseph*.

euz ar myster-ma : Heuillomp-hen. Tri zra, emezhan, a zo en eun dimizi : Da guenta ar c'hontrat dre behini an daou bried en em ro an eil d'eguile ; d'an eil, ar g'arantez etre an daou bried ; d'an drede, ar vugale, pere a laca ar garantez da greski etre ar priedjou. An tri zra-ze, eme sant Augustin, en em gav e priedelez Mari ha Joseph, ha pep tra a zervich enhan evit miret arguerc'hded. Caout a reer ama ar c'hontrat santel dre behini ez int en em roet an eil d'eguile, rag Mari a zo da Joseph ha Joseph a zo da Vari ker mad ma'z eo ho friedelez guirion pa z'int en em roet an eil d'eguile. Mez penoz ez int-hi en em roet an eil d'eguile ? O guerc'hded santel, setu ama ho victor hag ho triumph ! Roet ho deuz ho guerc'hded an eil d'eguile gant guir d'he viret : ia, evit hen dioual, evit he viret, ha netra ken. Ia, Mari e deuz guir da

viret guerc'hded Joseph, ha Joseph ive en deuz guir da viret guerc'hded Mari ; nag an eil nag eguile na hell he rei da zen ; ho daou a dleont he viret bepred. An oll lealdet euz ar briedelez burzuduz-ze eo miret ar guerc'hded. Setu ar promessaou ho deuz great ; setu ar c'hontrat a zo etrezho ha dre behini ez int unanet.

Evel diou stereden, o vesca ho sclerijen, na reont mui evit hon daou lagad nemet unan, guerc'hded Mari ha Joseph a zo ive en em unanet evit en em viret alao dre ar garantez santel ha celestiel, ha seul zanteloc'h eo ho fromessaou, seul velloc'h ho miront.

Setu aze promessaou Mari ha Joseph en ho eured ; divezatoc'h e velimp ho c'harantez. Setu petra eo bet Joseph e kenver Mari. Doue en deuz cavet enhan an den a glaske, eun den hervez he galon ; enhan en deuz fiziet, Mari da c'hortoz ma fizio ive Jesus,

he Vap. O santelez sant Joseph ! O cuittaad ar madou hag an oll c'hrouadurien evit beva er baourentez hag er guerc'hded, sant Joseph en deuz cavet Jesus ha Mari, ar pezh a zo mil guech caeroc'h eguet oll fortuneiou ar bed.

Sant Joseph, pried ar Verc'hez Vari, pedit evidomp.

AN EIL DEVEZ A VIS MEURS

Carantez Mari ha Joseph er stad a briedelez

Piou a hello biken lavaret peguer braz eo bet carantez an daou bried santel-ma an eil evit eguile ? Biscoaz n'ez euz bet cavet etre daou bried eur garantez ker braz ha ker santel ; rag Doue he-unan a lakeaz ar garantez-ze en ho c'halonou : euz an env e teue. En ho c'harantez na glaskent an eil hag eguile nemet ar guerc'hded, na garent nemet ar guerc'hded ;

ho oll evez oa he viret. Seul vui en em garent, seul vui a greske ho guerc'h-ded, ha seul vui ive e creske ho zantelez.

Var lein an arc'h a allianz ez 'oa daou Cherubin pe daou Eal, ho eskel digor gantho uc'h ar golo euz an arc'h-ze great en aour fin hag a zerviche evel da gador da Zoue : cador an drugarez. Divar an daol-ze en em blije an Aotrou Doue o comz d'an dud hag o selaou ho fedenou.

Arias Montanus (1) a lavar unan euz an daou Cherubin-ze en doa figur eur plac'h iaouang hag eguile figur eur goaz. En em gaout a reent unan e peb penn d'an arc'h a allianz hag ho daou e oent troet an eil ouz eguile gant ho fennou stouet eun tamig hag ho daoulagad a bare bepred var an daol aour fin-ze, a luc'he evel eur mellezour.

(1) Arias Montanus, *Antiquités judaïques*.

Er mellezour aour-ze en em velent bepred an eil eguile heb sevel ho fenn. An daol aour-ze, galvet ar Propitiator pe Cador an drugarez, oa ar figur euz Jesus-Christ. Ia, hor Zalver Jesus eo e guirionez Cador an drugarez ; hen en deuz lakeat an Aotrou Doue da zellet a druez ouz an dud ha da veza trugarezuz e kenver he vugale en draonien-ma a zaelou ; hen a laca he Dad-Eternel da selaou hor pedenou, da bardoni hor pec'hejou ha da rei deomp he c'hrassou : enhan heb ken e cavomp oll trugarez digant Doue. Mari ha Joseph, unanet dre ho frie-delez santel, a zo evel an daou Cherubin-ze, gantho ho eskel digor hag astennet uc'h Cador an drugarez. Ho daou ho deuz ho divrec'h digor evit diguemer Jesus, evit he zioual, evit he gass hag he zigass ; rei e reont an dorn an eil d'eguile evit he vaga, he vuisca hag evit he zouguen epad he

vugaleach. Lacaat a reont ho oll evez da viret nec'h arruo droug ebet ganthan. Ho fenn a oa ato stouet da zellet ouz Jesus ; n'ho devoa daoulagad nemet evit guelet Jesus, eur galon nemet evit caret Jesus. Heb sellet an eil ouz eguile, en em velent bepred e divinite Jesus-Christ, e pehini an Tad-Eternel en em vel gant plijadur a oll-viscoaz hag e pehini an oll sperejou euruz en em vel, en em anav hag en em gar e guirionez. Er mellezour burzuduz-ze euz ar garantez divin, Joseph ha Mari en em vele hag en em gare dre eur garantez celestiel hag a oa estlamet o velet ar vajeste a Zoue en em izeleet dre garantez evit an dud (1).

Oh nan ! Biscoaz ne deuz bet cavet kement a garantez etre daou bried evel ma oa e priedelez Mari ha Joseph ; rag ho c'harantez an eil evit

(1) Dargentan.

eguile a oa celestiel. Ia, sant Joseph en doa eur guir garantez evit Mari he bried, ha neket evit he guened he c'hare, mez evit he vertus hag he zantelez, dre ma oa pur, dre ma oa guerc'hez. Seul vui en em garent, seul vui e oant pur ha santel. Ia, peb tra en ho friedelez burzuduz a greske ho zantelez.

Pebez scouer evit ar priejou ! Pebez kentel evidho d'en em garet an eil eguile e Doue, da veva e doujanz Doue, ha d'en em zicour evel m'ho deuz great Mari ha Joseph epad ho friedelez var an douar. Oh ! ia, ma vije etre ar priejou eun draic bennag euz ar garantez ho deuz bet Mari ha Joseph an eil evit eguile, ho buez a vije euruz var an douar ; Doue a vije guelloc'h servichet ; ar vugale a vefe guelloc'h scoueriou hag a rafe guelloc'h christenien. Ho zieguez a vije neuze evel eur skeud euz hini Mari

ha Joseph e Nazareth. Priejou, studiet priedelez Mari ha Joseph, hag ho fedit da santelaat ho priedelez.

Mari ha Joseph, pedit evido.

AN DREDE DEVEZ A VIS MEURS

Sant Joseph Tad da Jesus

Sant Joseph a zo bet galvet Tad Jesus, hag epad ar penn kenta euz buez Jesus-Christ e tremene evit Tad hor Zalver, evel m'her gueler e meur a leac'h euz an Aviel. Sant Lucas (1) o comz euz Jesus-Christ, a lavar : « Evel ma tremene evit map Joseph. » Sant Vaze a lavar ive (2) : Ha neket hema eo map ar c'halvez ? » Sant Ian (3) : « Ha neket hema eo map Joseph ? » Neket heb ken, eme sant Augustin, ar re na

(1) Sant Lucas, chab. 3.

(2) Sant Vaze, chab. II. 9.

(3) Sant Ian, 6.

ouient ket e oa Jesus-Christ Doue ha na anavezent ket he gonception burzuduz hag a c'halve sant Joseph Tad Jesus ; mez an Aviel hag ar Verc'hez Vari he unan a roe d'ezhan an hano a dad. E Aviel sant Lucas, an Itron Varia a lavar : « Ho tad ha me glac'haret ho claske. » E leach al euz an Aviel e lennomp : « He dad hag he vam a oa estlammet gant ar pezh a glevet lavaret divar he bouez. » — « Eaz eo neuze, eme Suarez, guelet neket heb eun urz a berz Doue eo bet roet da sant Joseph an hano a Dad ; rag an Itron Varia ha sant Lucas n'ho deuz comzet en doare-ze nemet dre ma oant aliet gant ar Speret Santel d'en ober. » Ne deuz netra scleroc'h eo galvet sant Joseph Tad Jesus : bez' ez eo eta Tad da Jesus, pa z'eo guir an Itron Varia hag ar Speret Santel a ro d'ezhan en Aviel an hano-ze.

Couscoude e guirionez Jesus evel den

n'en deuz tad ebet nemet Doue, hag evel Doue n'en deuz mam ebet. Jesus-Christ Doue ha den assamblez n'en deuz ken tad nemet Doue na ken mam nemet ar Verc'hez Vari : setu aze myster an Incarnation. Sant Joseph n'en deuz bet perz ebet e guenevelez Jesus-Christ ; neket tad naturel d'ezhan, eur blasphem e ve hel lavaret ; ne d'eo ken nemet Tad maguer d'hor Zalver. Couscoude, eme sant Frances a Sales (1), goude ar Verc'hez Vari, den n'en deuz kement a berz e Jesus-Christ eguet sant Joseph, pa z'eo guir eo euz he famil, hag eo map d'he bried, pehini a oa d'ezhan. Ma teufe, eme sant Frances a Sales, eur goulm da zouguen en he beg had eur vezen balmez ha d'he lezel da goueza en eur jardin, ha ne larfac'h ket e ve ar vezen deuet euz an ha-

(1) Entretien 19.

den-ze da berc'hen ar jardin ? Ma eo eta guir kement-ze, piou na gredo ket e vezo Jesus da Joseph, pa z'eo guir ar Speret Santel, evel eur goulm, en deuz lezet an haden divin-ze da goueza en Itron Varia, pehini oa evel eur jardin glos ha stanket. Hoguen ar jardin-ze, da lavaret eo, ar Verc'hez santel, a oa da Joseph he fried ; dre-ze, ar vezen a zo d'ezhan. Ar pezh a zeu en douar pe a zo savet varnezhan a zo da berc'hen an douar. Kent-se, eme Suarez (1), ma zav dre viracl eur feunteun e jardin eur re bennag, ar feunteun-ze a zo da neb eo ar jardin d'ezhan. Evel hor Zalver a zo bet concevet gant ar Verc'hez Vari, dre vertuz ar Speret Santel, ar frouez e deuz douguet a zo da Joseph, dre ma eo d'ezhan Mari he bried. Rag, dre ho friedelez, ar priejou na

(1) Suarez Disputad. viii. Sect. 1.

reont mui evel nemet unan ; n'ho deuz mui ho daou nemet ar memez calon hag ar memez bolonte. Dre-ze, ar pezh a zo da unan a zo ive d'eguile. Mari o veza mam da Jesus-Christ, Joseph he fried na c'hell ket mancout da gaout eur perz bennag en hano a dad. Evelato, neket tad naturel ha guirion, dre ma eo bet chomet Mari bepred guerc'hez. »

« O pebez union divin etre an Itron Varia ha sant Joseph, eme c'hoaz sant Frances a Sales ! union hag a ree ma oa hor Zalver, mad an oll vadou eternal, da zant Joseph, evel ma oa d'an Itron Varia ; nan, emezhan, dre natur an den en devoa kemeret e intraillo hor mestrez gloriuz, natur furmet gant ar Speret Santel euz pura goad ar Verc'hez ; mez dre ar c'hraz, pehini a ree d'ezhan caout lod e ol vadou he bried zantel. » Sant Joseph neket tad da Jesus dre ar c'hig, mez

dre ar speret, dre an allianz pur ha zantel en deuz bet gant ar Verc'hez mam Doue, ha dre ar garantez en deuz bet evidhan hag ar zoursi en deuz kemeret anezhan. « Jesus, eme sant Fulgenz, a zo ar frouez, ar guened, an enor, ar priz euz ar guerc'hded santel. » Ia, Jesus eo ar boket caer savet var guerc'hded Mari, ar frouezen divin e deuz douguet ar Verc'hez beniguet. Ha neket dre he guerc'hded e deuz plijet Mari d'an Tad-Eternal ? Ha neket he guerc'hded en deuz lakeat ar Speret Santel da ziskenn enhi evit he renta mam da Zoue en em c'hreat den ? Dre-ze eta ne c'hellomp-ni ket lavaret eo he guerc'hded hag en deuz he rentet mam ? Mez ma eo he guerc'hded en deuz he rentet mam, e c'hellomp, eme Bossuet (1), lavaret en deuz ive sant

(1) Bossuet, *Panegyrique de saint Joseph.*

Joseph perz er burzud braz-ze ; rag mar d'eo ar guerc'hded, ar glanded zantel-ze tra Mari, sant Joseph oa carguet d'he viret, enhan ez oa fiziet gant Doue, hag he viret en deuz.

Mez sant Joseph, oc'hpenn ma oa carguet da viret guerc'hdet Mari, en doa guir var he glanded zantel ; rag er briedelez peb tra a zo d'an daou bried, coulz d'an eil evel d'eguile. O guerc'hded burzuduz en deuz roet Jesus d'ar bed ! Mar d'oc'h tra Mari, bez' ez oc'h ive tra Joseph. Mari e deuz he vouestlet da Zoue, Joseph en deuz he viret, hag ho daou ho deuz he guiniguët d'an Tad-Eternel evel eun dra preciuz hag a oa d'ezho ha miret gant ho. Kent-se Joseph, pa en deuz bet kement a berz e guerc'hded Mari, en deuz ive eul loden er frouez a zoug. Dre-ze e c'heller lavaret e guirionez eo Jesus mab da Joseph, nan evit guir dre ar c'horv, mez dre ar speret,

abalamour d'he verc'hded en he briedelez gant mam Doue. Mari ha Joseph, eme sant Augustin, ho deuz meritet beza galvet tad ha mam da Jesus-Christ, dre ma ho deuz great ho dever e stad a briedelez. O glandet burzuduz ! O sclerijen a zantelez a luguern a bep tu e priedelez Mari ha Joseph !

Pegument e tlemp-ni eta estimout ha caret ar vertuz gaer euz ar burete, pa z'eo guir ar guerc'hded en deuz roet deomp eur Zalver ; en deuz rentet an Itron Varia mam da Zoue ha great da zant Joseph caout an enor da veza galvet tad da Jesus ! Peb christen a dle caout eur respet braz evit he gorr ha corvou ar re al, o sonjal en deuz Map Doue kemeret eur c'horv henvel ouz hor re-ni. Corv an den a oa sotret dre ar pec'het, ne oa ken nemet loustoni ha breinadurez ; mez abaoe en deuz bet Jesus-Christ ar vadelez da guemer eur c'horv hag

eun ene assamblez gant he zivinite, corv an den a zo eun dra gaer meurbet, ha dreist peb tra corv eur c'hristen, dre ma eo bet gouelc'het, neteet ha santeleet en dour burzuduz euz ar vadiziant ha dre c'hraz ar Speret Santel. Corv eur c'hristen a zo eun dra zantel, eun dra zacr dirag Doue. Dre-ze an Abostol sant Paul na hean ket da bedi ar gristenien da enori ha da respeti ho c'horv.

Sant Joseph, tad maquer da Jesus, pedit evidomp.

AR BEVARE DEVEZ A VIS MEURS

Sant Joseph en deuz bet digant Doue eur galon a dad

Neket aoalc'h d'an Tad-Eternel fiziout e sant Joseph guerc'hded an Itron Varia, fallout a ra d'ezhan rei d'ar patriarch santel-ma an oll vercou euz he garantez, euz he vadelez : la-

caat a ra Jesus-Christ etre he zaouarn hag he garga a ra d'en em emellout outhan, d'he vaga ha da viret he vuez.

Mez diskenomp er goeled eur ar myster braz-ma, hag e cavimp traou ken enoruz evit sant Joseph ma ne c'hel-
limp morse ho c'hompren. Guelit : Jesus, fiziet e sant Joseph, a zo var an douar evel eur c'hrouadur ha n'en deuz tad ebet ; rag evel den n'en deuz tad ebet, sant Paul hel lavar : *sine patre*, heb tad ebet. Bez' en deuz evit guir eun tad en env, he Dad-Eternel ; mez abaoe ma z'eo en em c'hreet den, he Dad a ra van d'hen dilezel evel pa n'hen anavfe mui.

Ia, an Tad-Eternel a laca he Vap muia caret etre daouarn Joseph, eun den paour, eur mecherour, mez eun den just. Rei a ra d'ezhan an emell outha ; d'ezhan brema d'he vaga, d'he zioual, da viret ne c'harruo droug ebet

ganthan, en eur guer, da bourvei d'he oll ezomou. Setu ar fizianz en deuz an Aotrou Doue e Joseph ; ha sant Joseph, petra a rei brema ? Oh ! piou a ouffe lavaret gant pebez joa eo diguemeret ar Mabic-Jesus gant an den santel-ma ? Gant pebez carantez en em guinik da dalvout da dad d'ar c'hrouadur divin-ze, emzivad var an douar ! Adaleg neuze ne vev mui nemet evit Jesus-Christ ; he oll encrez a zo enhan. Kemer a ra evit he Zoue en em c'hreat den eur galon a dad ha dont a ra da veza dre garantez ar pezh ne oa ket dre natur.

An Aotrou Doue, eme sant Ian Chrysostom, en doa roet da zant Joseph kement a zere ouz eun tad, heb blensa ar guerc'hded. En Aviel e velomp ato sant Joseph o caout ar reng kenta. Hen a ro an hano da Jesus evel m'her gree an tadou d'ho bugale en amzer-ze ; d'he gaout e teue an Eal, d'ezhan

e vije lavaret petra da ober. D'ezhan e oa lavaret gant an Eal : Kemerit ar c'hrouadur hag he vam hag it d'an Ægypt ; d'ezhan c'hoaz e oa lavaret pe da vare distrei en dro. Hen eo an tad a famil, ganthan eme an emell, ha Jesus ha Mari a zent outhan.

Ia, Jesus-Christ, o tont er bed, a felle d'ezhan beza henvel ouzomp e peb tra ; eur vam en deuz bet evel d'omp, mez eur vam guerc'hez ; n'en deuz ket eun den evit tad, dre ma dle guenel euz eur verc'hez : ar guerc'hed a vir ouz sant Joseph da veza tad guirion da Jesus. Mez a hend all sant Joseph en doa kement a zere ouz eun tad. An Aotrou Doue en doa roet d'ezhan eur galon a dad, eur garantez a dad, ha caret a ree Jesus Map unig an Tad-Eternel muioc'h eguet na gar an Tadou ho bugale ; rag Doue en doa chenjet he galon, lakeat enhi eur fulen euz ar garantez divin en deuz a

viscoaz evit he vap muia caret. Dre-ze sant Joseph a zante en he greiz eur galon a dad, eur galon nevez, deuet d'ezhan euz a zorn an Aotrou Doue. Gouzout a ree e c'houre'hemene an Aotrou Doue d'ezhan implij he c'halloud hag he garg a dad ha credi a ree commandi d'he vestr, d'he grouer ha d'he Zoue.

Nag huel eo savet sant Joseph, pa eo roet d'ezhan an emell var Jesus, pa eo carguet gant an Tad-Eternel da zerc'hel he leac'h a dad var an douar ; da c'houarn Jesus ha Mari ha da gommandi d'ezho ! Pebez galloud ! pe leac'h caout eur galloud par da c'halloud sant Joseph, pa eo lakeat etre he zaouarn galloud an Tad-Eternel.

Enoromp eta sant Joseph, pa eo bet ken enoret gant an Drindet santel. Respetomp sant Joseph, pa eo bet ker respetet gant Jesus ha Mari, bete senti outhan epad tregont vloaz. Caromp

sant Joseph, ker caret gant Jesus ha Mari. Oh ! ma her greomp, nag a fizianz a dleomp da gaout er patriarch santel-ma, tad hor Zalver, pried Mari Mam Doue.

Sant Joseph, tad carantezuz, pedit evidomp.

AR BEMPET DEVEZ A VIS MEURS

An enor da veza tad da Jesus a goustaz ker da zant Joseph

An tadou ho deuz poan o vaga hag o sevel ho bugale, dreist peb tra pa n'ho deuz ket a zanvez, pa n'ho deuz nemet poan ho divrec'h evit pourvei d'ho oll ezomou. Red eo d'ezho poania, labourad, redeg du-ma du-hont evit gounid eun draic bennag ; evit caout peadra da vaga, da visca ha da loja ar vugale. Poan ho deuz gantho en noz hag en deiz ; poan ho deuz gantho en ho iec'hed hag en ho

c'hlenvejou, bep mare. Ia, buez eun tad hag eur vam a zo eur vuez poaniuz meurbed.

Ne deuz tad ebet couscoude hag en dese bet kement a boan evel en deuz bet sant Joseph. Oh ! nag a boan, nag a encrez en deuz bet da heul Jesus ha Mari ! Nag a vech eo bet rannet he galon o velet trubuil hor Zalver ! Evit beza ervad da Jesus e ranket gouzaon calz a boan : pa teu Jesus daved eur re bennag, e teu gant he groaz. Ia, he groaz a zo d'he heul abaoe ma eo deuet er bed ; he groaz hag he gurunen spenn a guinig d'he vignoned var an douar.

Joseph ha Mari ne oant ket pinvidik ; mez eun ti bihan ho devoa da loja e Nazareth. Mez pa teu Jesus er bed, na gaver ti ebet, na bihan na braz, d'he ziguemer ; n'eus lojeis ebet evidhan e neb leac'h ; da eur c'hraou e rank mont, ha sant Joseph d'he

heul. Bete neuze e oant paour evit guir ; mez euruz ez oant en ho faourentez ; didrouz e vevent etouez ho c'herent hag ho mignonet ; den na lavare guer d'ezho. Meñ pa z'eo ganet Jesus, eo red d'ezho pellaat dioc'h ho bro, dioc'h ho c'herent ha dioc'h ho anaoudeguez ; rag Herodez a glask an dro da lacaat ho map d'ar maro. Mar ho doa bet eur joa vraz o velet ar bastoret hag an tri roue o tont da adori ar Mabic-Jesus e Bethleem, pebez calonad evidho cleved e oa Herodez counaret eneb d'ezhan, o clask hel laza ! Petra rei neuze sant Joseph, eur mecherour paour, heb madou, n'en deuz nemet poan he zivrec'h evit en em vaga ; petra rei ? Kuitaat he vro e creiz an noz ; na c'hortozo ket an deiz.

Petra rai ? Mont d'an Egypt ha chom eno ken a zeuffet da lavaret d'ezhan distrei. Ha perag ? Abalamour

da Jesus ; evit savetei he vuez da Jesus. Ha c'hui gaf d'ehoc'h Joseph en em glemo en he boan ? Na rei ket. Euruz en em gaf, dre ma c'houzanv gant Jesus hag evit Jesus. Ar pezh a ra he anken eo dre ma eo trubuillet Jesus, caret gant mui eguet en em gar he unan. Mez marteze en deuz fizianz e achuo he drubuil heb dale ? N'en deuz ket : clevet en deuz bet en templ an den santel Simeon o lavaret da Vari he bried : « Hema a zo lakeat evit coll hag evit silvidiguez calz a dud e Israel, hag evit beza eur merg a gontroliez ; hag ho calon ive a vezo treuziet gant eur c'hleze, evit ma vezo dizoloet ar zonzou a zo e goeled calz a golonou. »

Hag aalc'h eo kement-se evit he galon a dad ? Oh ! nan : Jesus he unan a zeu da leunia ar galon-ze a c'hla-c'har. Mari ha Joseph a ia d'an templ gant Jesus ; mez pa oent o tistrei d'ar

gugar, Jesus a zo dianket, a zo collet. Epad tri deiz pebez anken evit sant Joseph ! Guelit he zaelou, he c'hla-c'har, ha comprenit peguer braz eo he boan, peguen doun eo toullet he galon a dad ! Mari neket evit miret da rebech da Jesus da veza greet kement a c'hla-c'har da Joseph ha d'ezhi he-unan : « Va map, emezhi, perag oc'h euz-hu greet kement-se ? Setu ho tad ha me glac'haret ho claske. »

Setu dre he seurt poaniou a fell da Jesus anaout hag hen eo caret gant he vignonet. Setu penoz a fell da Jesus beza var an douar gant he vignonet : e creiz ar boan hag er brassa poaniou. Jesus a zo deuet da glask ar boan hag a fell d'ezhan he ranna gant he vrassa mignonet. Ar Mabik-Jesus n'en em blij ket gant ar re na glascont nemet ar blijadur, mez avad gant ar re a gar ar baourentez, ar boan, ar groaz : ar re-ze eo he vrassa

mignonet, gant ar re-ze ema enn he blijadur. Er boan hag er glac'har ho deuz cavet Mari ha Joseph ar Mabic-Jesus en templ. Ni ive, mar fell deomp caout Jesus, na glascomp ket anezhan er'joa, er blijadur ; mez er binijen, er boan, er groaz. Eno er c'havimp ; eno e chomo ganeomp, abalamour eno e roimp d'ezhan mercou euz hor c'harantez.

Jesus, Mari, Joseph, roit d'eomp ar c'hraz da garet ar groaz.

AR C'HUEC'HVET DEVEZ A VIS MEURS

Sant Joseph en deuz bet eur vuez cuzet

Diou loden a zo e buez Jesus-Christ. Er penn kenta euz he vuez, Jesus a zo bet cuzet ouz daoulagad an dud, ne oa anavezet nemet gant Doue ha gant eun nebeudig tud santel, evel Mari ha Joseph. An tregont vloaz kenta euz buez Jesus-Christ a zo

tremenet didrous ; tano tano e oant ar re a ouie piou oa. Kemeret e oa evit eun den evel ar re al, ha credi a rejer e oa map da Joseph, ha netra ken.

Er penn diveza, epad an tri vloaz diveza euz he vuez, Jesus en em ziscouezaz d'an dud, a brezegaz he Aviel, a reaz da anaout bep da nebeud piou oa, euz a beleac'h hag evit petra oa deuet var an douar. Dre he gomzou ha dre he oberou e reaz sclear da anaout e oa Doue en em c'hreat den, e oa ar Zalver promettet gant Doue abaoe pell a oa.

An Ebestel a zo bet choazet ha carguet da ziscouez Jesus d'ar bed, da brezeg he Aviel ; Mari ha Joseph oa carguet d'he guza. Joseph dreist an oll en doa ar garg-ze : dre-ze en deuz bevet cuzet er penn kenta euz buez Jesus. Ia, Joseph a oa evel eur goumoulen, digasset gant Doue da guza an heol a justis hag a zantelez ;

evit miret na vije anavezet gant an dud gloar Map Doue, en em c'hreat den, tre ken na zeuje an heur, ar mare.

Ar c'houmoul a dremen var an heol, ho deuz daou du ; eun tu troet ouz an heol hag eun tu al troet ouz an douar, ha seul denvaloc'h eo an tu troet ouz an douar, seul scleroc'h ha seul gaeroc'h eo an tu troet ouz an heol. Doue eo an heol a justis hag a zantelez, leun a c'hened hag a c'hloar, ha sant Joseph eo ar goumoulen burzudus-ze, carguet da guza he c'hened hag he c'hloar. Mar d'eo tenval an tu troet ouz an douar, ouz daou lagad an dud, na caer, na skeduz na dle ket beza an tu troet ouz an env, ouz Doue, ouz Jesus hag ouz an Elez ! Oh ! piou a lavaro biken ar gloar, ar sklerijen divin a bare var ene sant Joseph, a sklerae he speret, a dome he galon hag a ree

d'ezhi birvi gant an tan euz carantez ann env ? Piou a ouffe lavaret ar joa, ar blijadur a gargue he speret, he galon hag he oll ene e creiz ar mysteriou caer euz hor zilvidiguez ? Kent se eo euruz meurbed en he labour, en he boan hag en he drubuil. Oh ! nan, n'en dije ket troket he stad ouz hini an dud pinvidik, nag ouz hini ar rouaned var an tron.

Ia, tu ar goumoulen-ze, troet ouz an douar, oa, evit guir, du ha tenval ; cuza a ree sclerijen an env, mysteriou an Aotrou Doue ; cuza a ree ive ar grassou a dremene e ene sant Joseph. Dirag an dud, sant Joseph a oa nebeud a dra ; eun den dister, eur paour keaz mecherour, eun tamig calvez hag a ia bemde du-ma du-hont da c'hounid he zavez, pa n'en dije ket labour er gucer ; mez na caer e oa dirag Doue ! na caer e oa ouz tu an env !

Bez' ez oa evel eur skeud euz an Tad-Eternel ; senti a ree evel ma sent eur skeud. Ar skeud a ia hag a zeu da heul eun den pe eun dra ; pa finv an den, he skeud a finv ive ; pa c'hom heb flach, ar skeud a jom harp. Sant Joseph a oa evel ar skeud-ze ; mez eur skeud beo e oa, hag eur skeud leun a skiand. Senti a ree evel ar skeud, mez gant he volonte vad ha dre garantez.

An Itron Varia a oa cuzet didan ar skeud pe ar goumoulen burzuduz-ze : he friedelez gant sant Joseph a vire na oa anavezet gant an dud evel guerc'hez ha mam Doue en em c'hreat den.

Ar Spered Santel en em gave cuzet didan skeud sant Joseph. Hervez hor feiz, diazezet var an Aviel, ar Verc'hez Vari a zo Mam d'hor Zalver Jesus-Christ, dre vertuz, dre c'halloud ar Spered Santel ; mez sant Joseph he

fried, a vire na oa anavezet gloar ha galloud ar Spered Santel e myster an Incarnation.

Jesus-Christ he unan, map Doue en em c'hreat den, ha neket cuzet ive en denvalijen euz a zant Joseph, beteg beza galvet map Joseph, map ar c'halvez ?

Beteg an Tad-Eternel zoken a zo cuzet gant Joseph, ker mad ma teu he unan da c'houlen he vap unig, o lavaret da zevez badiziant Jesus-Christ : « Hema eo va Map muia caret, enhan am euz lakeat va brassa plijadur. »

An eil ferson euz an Drindet, o tont var an douar, oc'h en em ober den, a felle d'ezhan savetei an dud dre he varo var ar groaz. Ia, dre ar groaz a felle d'ezhan trec'hi an ifern hag ar bed, discar orgouil ar rouaned hag an dud pinvidik, hag hor c'hass d'he heul, paour ha pinvidik, bihan
6*

ha braz. Mez penoz en dije gallet ober ar burzud braz-ze, en amzer merket gant Doue, ma vije bet anavezet myster an Incarnation araog ar mare ; ma ho dije gouezet an dud e oa concevet dre vertuz ar Speret Santel ha ganet gant eur vam guerc'hez ? Rag an Abostol sant Paul a lavar(1) ma ho dije princet, mistri ar bed anavezet furnez an Aotrou Doue (cuzet e myster an Incarnation), n'ho dije ket crucifiet Jesus-Christ, roue ar c'hloar.

O velet he dad hag he vam e stad ar briedelez, an oll her c'hemere evit map Joseph hag evit eun den evel ar re al : netra ken. Dre eno Doue a oa cuzet.

En doare ze Jesus-Christ a zeu didrouz da ober he vurzudou didan ar skeud euz sant Joseph, pehini a dre-

(1) I Corinth. 2. v. 8.

mene evit he dad. Joseph a vir dre eno na oe anavezet Jesus evit ar pezh ma z'oa, ken a zeuaz ar mare merket ganthan evit discouez he c'halloud hag he zivinite, o resùssita hag o pignad en env goude he varo var ar groaz.

Dre he varo, dre he groaz en deuz trec'het ar bed, en deuz gounezet ar victor ; mez sant Joseph en deuz he guzet bete ken a zeuaz an amzer merket.

Sant Joseph, tad ar Famil-Zantel, pedit evidomp.

AR SEISVET DEVEZ A VIS MEURS

Sant Joseph en deuz miret secrejou an Aotrou Doue

An Aotrou Doue en doa choazet sant Joseph evit miret he secrejou, evit cuza ar mysteriou braz euz hor zilvidiguez. Sant Joseph en deuz bet eun anaoudeguez vras euz secrejou

an Aotrou Doue; hep mare e vije roet dezhan gourc'hemenou nevez euz an env gant eun Eal euz he bers. Gouzout a ree e oa Mari he bried guerc'hez, hag he devoa concevet he map dre vertuz 'ar Speret Santel. Goude Mari hen eo an test kenta euz a c'henevelez ar Mabik-Jesus e craou Bethleem. Mari ha Joseph eo an daou genta ho deuz adoret hor Zalver o tont er bed.

Guelet a ra ar bastoret o tont joauz da adori ar Mabik Jesus. Eur pennad goude, ann tri roue, daoulinet e craou Bethleem, a guinigaz aour, ezanz ha myrh d'ar roue nevez-c'hanet. Sant Joseph ho c'hlevaz o comz euz ho beach hag euz ar stereden burzuduz e doa ho rened hed an hent.

Da zevez ar Circoncision, sant Joseph a velas goad ar Mabik-Jesus o redeg evit ar vech kenta evit silvidiguez ar bed; dastum a ra ar goad

preciuz-ze gant eur respet braz; rei a ra d'hor Zalver beniguet en deiz-ze an hano santel a Jesus: hano deuet euz an env, ar c'haera a ouffet da gaout. Hen douguen a ra goude d'an templ; offri a ra e sacrifis diou goulmik ven; clevet a ra eno prophessi an den santel Simeon.

Eun Eal a lavar d'ezhan kemer ar c'hrouadur hag ar vam evit tec'het ouz counar ar roue Herodez. Sevel a ra e creiz an noz hag e kemer ractal hent an Egypt. He galon a zo glac'haret o clevet ar vuntrerez en doa great Herodez mil-liguet var bugaligou Bethleem ha tro var dro; eun druez oa clevet hirvoudou, clemou ha gouelvan ar mamou keaz ho doa collet ho bugale, lazet abalamour da Jesus. Chom a reaz cuzet en Egypt gant Jesus ha Mari ken a zeuas an Eal da zigas d'ezhan kelou a berz Doue da zistrei d'he vro. Distrei a ra ractal ha mont

a ra da Nazareth, d'al leac'h merket d'ezhan. Chom a ra eno gant Jesus ha Mari beteg he varo. Bep mare ez ee d'an templ evit heulia lezen Doue. D'an oad a zaouzeg vloaz, Jesus a ieaz ganthan ha gant Mari d'an templ; o tistrei d'ar guc'er, Jesus en em guzaz outho; Jesus a zo collet. Mari ha Joseph he glasg e pep leac'h gant eur glac'har braz. Jesus a zo cavet en templ. Joseph he vel hag he glev o tisput oc'h an Doctoret estlmet gant he skiant hag he furnez. Distrei a ra d'ar guc'er gant he guerent.

Jesus ha Mari a zente ouz Joseph, pehini a oa tad ar Famil-Zantel. Jesus a zente outhan ker mad ma oa galvet map Joseph, map ar c'halvez. Didan an hano-ze oa anavezet gant an dud, evel m'her gueler en Aviel. Sant Joseph a vagaz Jesus ha Mari gant he labour epad tregont vloaz. Sant Joseph en deuz bevet var dro tregont vloaz gant Jesus ha Mari.

Hed an amzer-ze nag a draou caer a glevaz gantho! Nag a sekrejou a lavaraz Jesus dezhan! Nag a vysteriou oa disoloet dirazhan! Guelet a reomp eta'eo bet sant Joseph test euz eul loden vraz euz mysteriou hor Zalver, heb konta an oll secrejou al en deuz anavezet hag euz a bere ar Scritur-Zantel na lavar guer ebet. Oh! nan, an Aotrou Doue n'en deuz bet netra cuzet evit sant Joseph; rag cavet en doa enhan eun den just, eur mignon mad, hag eur zervicher leal. Doue a c'helle fiziout peb tra enhan heb aoun ebet da veza discuillet. Sant Joseph a ouie ar pezh a c'houlenne Doue digant-han; gouzout a ree e oa carget da viret he secrejou.

Dre-ze ne veler ket e neb leac'h euz an Aviel en defe lavaret netra. Ar reng kenta en deuz couscoude; en Aviel her gueler hanvet da genta; ar Verc'hez Vari en em laka var he lerc'h : ne lavar couscoude netra. —

Mari, en despet d'he humilite, a gomz evidhan : Setu ho tad ha me, emezhi d'he map, ho claske gant glac'har.

Pa zo eun dra bennag a vraz da ober, an Eal a ia bepred da g'out sant Joseph ; d'ezhan e roer an urz da c'houarn ar Famil-Zantel. Sant Joseph a zent dioc'h-tu, heb clasg digare ebet, heb lavaret guer. Senti a ra didrouz hag heb discuill morse netra euz ar pez en deuz guelet pe clevet.

Pebez feiz ! Pebez relijion en doa ar patriarch santel-ma, pa chom tregont vloaz cuzet, en devalijen, heb lavaret da zen piou oa ha pe seurt tenzor oa etre he zaouarn. Guelloc'h oe gant-han beza dianavezet gant an dud, beza en eur reng izel, ha miret secrejou an Aotrou Doue. Avoalc'he cave beza anavezet gant Doue ; euruz en em gave oc'h heulia sioul buez Jesus ha Mari var an douar.

O pebez kentel evidomp, coz ha

iaouang, paour ha pinvidik ! Oh ! ia, ni a ve euruz e creiz trubuillou ar vuez-ma, ma rafemp evel en deuz great sant Joseph. Na santel e ve hor buez, na ber e cafemp hon amzer, ma vefemp didrouz, oc'h heulia en ho labour, en hon dever, buez Jesus ha Mari, evel ma ree sant Joseph !

Sant Joseph, leun a furnez, pedit evidomp.

AN EISVET DEVEZ A VIS MEURS

Gloar ha merit sant Joseph er vuez cuzet

Eur vech ma en deuz sant Joseph anavezet ar pris euz ar vuez cuzet, en deuz he c'haret hag he c'hasket gant mui a vall eguet na glasg tud ar bed an danvez hag an enoriou. Tec'het a ra muia ma c'hell dioc'h trouz ar bed, en em guza a ra ouz daoulagad an du l ; ne fell ket d'ezhan beza anavezet nemet gant Doue heb ken. Kemer a ra ar vicher a galvez evit gounid he

voed didrouz, evit en em lacaat e reng ar vicherourien, evit ma vezo dianavezet var an douar. En he briedelez gant Mari, e cavaz eun exempl caer euz ar vuez cuzet; rag piou en deuz caret muioc'h ha heuliet guelloc'h ar vuez zantel-ze eguet an Itron Varia.

Mez pa velas hor Zalver beniguet, o tont er bed hag o choaz ar vuez cuzet, ah! neuze en deuz santet o creski en he galon an disprijanz evit ar bed hag an istim evit ar vertuziou cuzet e Doue.

Myster an Incarnation a reaz da zant Joseph anaout guelloc'h ar pris euz ar vuez en doa kemeret. Eun Doue en em izeleet, en em c'hreet den, diskenet en eur c'hraou, gourvezet var eun tamig plouz, petra a c'helle guelloc'h ober d'ezhan anaout peguement a blij da Zoue ar vuez cuzet? Petra a c'helle guelloc'h hel lacaat da zisprijout ar bed gant he enoriou?

Adaleg neuze sant Joseph en em roaz a zevri da zervich Jesus hag a fellaz d'ezhan beza he gompagnon fidel epad he vuez, hag en noz hag en deiz.]

Tud ar bed en em gav enoret e servich ar brincet hag ar rouaned: eun enor eo beza e gouard ar roue pe an impalaer. Mez brassoc'h enor eo c'hoaz dibri ouz ho zaol. Petra eo ar brincet euz an douar, ar rouaned, e scoaz Jesus-Christ? Petra eo an den e scoaz an Aotrou Doue? Mar d'eo eun enor servicha ar rouaned, brassoc'h enor eo servicha Jesus-Christ, roue ar c'hloar. Sant Joseph en deuz servichet Jesus mab unig an Tad Eternel; var dro tregont vloaz en deuz tremenet e gouard roue an env hag an douar. Neket en he zervich heb ken en deuz tremenet tregont vloaz; mez er memez ti ganthan, o tibri bemde ouz he daol, oc'h he velet hag oc'h he glevet bep mare. Pebez enor! Pebez gloar! mez

ivez pebez merit ha pebez recompanz ! Ar re a zervich mad ar brincet hag ar rouaned, ho deuz digantho pae mad ha recompanz braz, cargou caer, danvez hag enoriou. Sant Joseph ive en deuz bet digant Jesus grassou braz hag eur recompanz caer, dreist peb tra er Baradoz : an enor en deuz bet da veva gant Jesus ha Mari hag ar c'hraz da vervel etre ho divrec'h.

Ac'hano e velomp e c'heller beza savet huel var an douar heb beza enoret ha meulet gant an dud ; caout eur c'hloar vraz heb beza brudet nemeur, ha beza euruz heb ober calz a drouz. Neket ar c'hargou huel, an enoriou braz, istim an dud hag an trouz a reer er bed eo a ra gloar eur c'hristen ; mes senti ouz Doue, heulia he c'hourc'hemenou er stad hag er garg ez omp lakeet, daoust peguen izel e ouffent beza.

Ar bec'herien a ra peurvuia mui a

drouz eguet an dud santel ; an dud a zizurz eo hag a zench tu da beb tra er bed ; mad int da ober reuz, da zismantra an traou ; nag a vrezeliou, nag a freuz a reont e peb leac'h ! Dre-ze na gomzer nemet anezho. An dud vad a gar ar peoc'h ; n'euz guer var ho fouez ; ne d'int ket anavezet, dre ma reont peb tra dirag daoulagad an Aotrou Doue, ha nan evit beza guelet gant an dud nag evit beza enoret. Setu penoz e veve sant Joseph, an den just. Guelet a ree Jesus-Christ ha na lavare guer ; tanva a ree an douster euz he vuez ha na ie ket d'hel lavaret da re al. Doue heb ken a oa aoalc'h evidhan heb ranna he c'hloar gant istim an dud. Sant Joseph a oa var an douar evit servicha Jesus hag evit hen heulia en he vuez cuzet : setu he garg, hag euruz en em gave oc'h ober he zever.

Mez perag en deuz Jesus-Christ cuzet he c'hloar epad tregont vloaz ? Evit ober

pinijen euz hor pec'hejou, evit paea hon dle da justis Doue hag evit discar ourgouil an dud. Guelit peguen dallet eo an dud var an douar gant an ourgouil, gant an enoriou, gant istim ar bed, ha na vezo ket diez deoc'h gouzout perag e teu Jesus-Christ d'en em guza. Ar iouankizou na glascont nemet bragal ha redek d'an ebatou evit plijout da zaoulagad an dud : enor ha gloar ar bed, ne c'houlennont ken ; ne reont fors gant gloar Doue hag ho zilvidiguez.

Darn all na glascont nemet danvez ; beza pinvidik. Pa ho deuz eur guer, e fell d'ezho caout eun diou pe deir ; n'ho deuz morse aoalc'h. Mez neket aoalc'h caout danvez ; enoriou a ranker ive caout da heul. Istimet a rankint beza, var ho meno, dre ma zint pinvidik, daoust d'ho buez a hend all.

Guelit eta an droug a ra an ourgouil var an douar ; mouga a ra ar vertuziou

er c'halonou, o lacaat an dud da ober evit ar bed ar pezh e tlefent ober evit Doue, evit an env. Jesus-Christ a vel an droug-ze hag en em guz evit discouez deomp disprijout ar bed gant he c'hloar hag he enoriou.

Oh ! na preciuz eo eta dirag Doue ar vuez cuzet ; na talvoudeg eo d'ar bed ! Nag a c'hrassou hag a vadoberou e deuz tennet var an douar ! Sant Joseph a ouie mad ar virionez-ze, desket ganthan e scol Jesus-Christ. Setu perag en deuz en em zalc'het bepred cuzet gant Jesus ha Mari.

Caromp eta ar vuez cuzet, evel en deuz greet zant Joseph hag ar Famil-Zantel ; pellaomp dioc'h trouz ha trevel ar bed, muia ma c'hellimp, ha greomp sioul hol labour evit Doue, heb clasg plijout d'an dud. Lezomp tud ar bed da lavaret ha da ober evel ma keront, hag en em guzomp gant sant Joseph e calon Jesus ha Mari.

Neket var an douar e tleomp clasg an enoriou, an istim hag ar c'hloar ; mes en env, da fin ar bed, pa teuo Jesus en he c'hloar da baea peb hini euz he labour. Oh ! pebez enor neuze, o clevet Jesus oc'h hor meuli dirag ar Zœnt hag an Ælez, dirag ar bed oll ha dirag he Dad-Eternel ! En deiz-se e velimp peguer burzuduz eo bet buez sant Joseph ; peguer caer ha peguer preciuz eo ar pez en deuz greet var an douar. Na skeduz e vezo he c'hloar, dre m'en deus bevet e Doue hag en em guzet ouz daoulagad an dud !

Sant Joseph, skuer ar vuez cuzet, pedit evidomp.

AN NAVET DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Joseph den just

Ar Speret Santel a lavar, er Scritur zacr, e oa sant Joseph eun den just, da lavaret eo, eme sant Ian Chryso-

tom, en doa an oll vertuziou. Setu perag en deuz bet an enor da veza meulet gant Doue he unan, pehini a vel goeled ar galon hag a oar guelloc'h evit an oll peira eo an den ha petra a dall. A viscoaz an den a zo bet barnet gant ar re al hervez ar pez a veler a ziavez. An ners, ar galloud, eur speret bras, an traou burzuduz a ra ebarz ar bed, setu ar pez a blij d'an dud hag a zo meulet gantho ; beteg ar zantelez zoken, var a veler, e deuz ezom da luguerni dirag ho daoulagad abarz caout perz en ho meuleudi. Ar vertuziou cuzet, evel ar batiantet, an doujanz, an douster, an humilite, a zo traou rezister evit beza meulet gant tud ar bed. Eur Zant, evit ar re-ze, a dle beza brudet dre he viraclou ; mez na daolont evez ebet er garantez a ra ma eo ar Zœnt mignoned da Zoue. Couscoude ar miraclou hag an traou

burzuduz na grescont ket santelez an den. Ar vertuziou cuzet a blij muioc'h da Zoue hag a dall guelloc'h dirazhan eguet an traou brudet-ze hag a ra calz a drouz.

Ober mad an deveriou euz he stad, en em zizober ouz he dechou fall, plega he skianjou naturel da lezen Doue, caout he speret troet varzu an env hag he galon e Doue, bale en hent mad gant eur goustianz eeun ha net ; en eur guer, heulia he c'hourc'hemenou : setu petra a c'houlenn an Aotrou Doue digant an den evit ober outhan eur Zant.

Sant Joseph, Pried Mari ha Tad maguer da Jesus, n'euz ket greet nemeur a drouz var an douar, n'euz ket clasket an traou burzuduz ken meulet ha ken istimet gant an dud. Neket bet guelet, evel Moysez ha Josue, o rei lezennou d'an dud, o lacaat ar rouaned da grenna var ho zron, o

treuzi ar mor dizec'het didan he dreid, o terc'hel an heol heb flach, o ren eur bobl dre ar miraclou. Neket bet guelet, evel an Ebestel, o caout galloud an Aotrou Doue, o rei ar guel d'ar re zall, ar c'hlevet d'ar re vouzar, ar iec'hed d'ar re glan, ar vuez d'ar re varo.

Eun dra burzuduz eo e ve bet cho-met an heol hag al loar heb flach, harpet gant eur gomz euz a c'hinou Josue ; mez sant Joseph en deuz greet eur burzud mil guech brassoc'h, caeroc'h c'hoaz, petra bennag ma na la-keer evez ebet outhan. Crouer an heol hag ar stered, mestr ar bed oll en deuz epad tregont vloaz sentet ouz sant Joseph. Nan, Jesus na ie nag a zeue nemet evel ma felle da Joseph. Joseph a c'hourc'hemen ha Jesus a zent : setu aze eun dra burzuduz heb he bar ; setu aze miracl an oll viraclou.

An Aviel a ziscouez deomp sant Joseph evel eun den just, oc'h ober peb tra hervez bolonte Doue. Ober bolonte Doue : setu petra eo ar zantelez, hag an hini her gra ar guella eo ar zantela. E bolonte Doue ema an oll deveriou evit peb oad hag evit peb stad : eno ema an hent euz hor zilvidiguez. Ober bolonte Doue eo ar merk euz a zantelez an den. Pa zent an den ouz Doue, e ra he zever. Neuze ema en hent mad ; neuze e car he nessa hag e ra vad d'ezhan ; rag neb a gar Doue hag a zent outhan, a gar ive he nessa. Setu petra en deuz greet sant Joseph : o senti ouz Doue eo deuet da veza eur scouer a zantelez dre ar garantez en deuz bet evit ar stad e pehini e oa lakeet, dre an obeissanz da c'hourc'hemenou an env ha dre he garantez evit Jesus ha Mari.

An eil ferson euz an Drinded a zo

deuet er bed evit ober bolonte he Dad Eternel ha n'en deuz greet netra ken hed he vuez. He oll blijadur hag he vadurez zoken oa, evel m'hel lavar, ober ar volonte divin-ze ; he heuliet en deuz beteg ar penn diveza : bete mervel var ar groaz. Dre-ze Jesus a lavare : « Neb a rei bolonte va Zad a zo en env, henez a vezo va breur, va c'hoar ha va mam. » Sant Joseph en doa desket mad ar virionez-ze e scol Jesus ha Mari. He oll studi a zo bet, epad he vuez, anaout ar peza a c'houlenne Doue diganthen hag hen ober ar prima, ar pisa hag ar guella ma c'helle. N'euz fors peguer tenn ha peguer poanius oa ar peza a c'houlenner diganthen, hen ober a reeractal, heb sellet petra e vije arruet ganthen nag heb clasq perag e roer an urz-ze d'ezhan.

Oc'h ober evel se bolonte Doue e peb tra hag e peb oad, en deuz bet

sant Joseph eur merit braz hag eo arruet en eur zantelez ken huel ma en deuz bet an enor da veza meulet gant ar Speret-Santel ha da veza galvet eun den just.

Ia, just ha santel e oa en he vugaleach hag en he iaouankiz dre ma veve er zantelez hag er guerc'hded. Just ha santel e oa en he briedelez gant ar Verc'hez Vari, dre ma viraz bepred ar glanded er stad-ze ha dre ma zave euz an eil vertuz d'eben, e servich he bried zantel, epad he vuez celestiel. Just ha santel e oa, pa z'eo guir e oa fiziet enhan ar c'haera tenzor, Jesus ha Mari, ha dre ma oa lakeet da c'houarn Jesus heol ar justis hag ar zantelez, ha Mari mellezour ar justis hag ar zantelez. Just e oa, eme sant Ambroaz, dre m'en doa miret caer ha dinam templ ar Speret-Santel, o lezel he guerc'hded gant Mari Mam Doue. Just e oa, eme Orijen, en he zon-

jou, en he gomzou hag en he oberou, dre ma heulie piz gourc'hemenou Doue. Just e oa, eme sant Perr Chrysolog, dre ma oa madelezuz e kenver an oll, dreist peb tra e kenver Mari. Just e oa, eme sant Ian Chrysostom, dre ma en doa an oll vertuziou.

An Aotrou Doue a roaz da zant Joseph ar grassou hag ar zantelez a zere caout evit ober an deveriou euz he garg hag en em zerc'hel ervad er reng huel en em gave. Hogen biscoaz den n'en deuz bet na carg na reng huelloc'h eguet en deuz bet sant Joseph Tad maguer da Jesus ha Pried d'ar Verc'hez Vari. Dreze ive e c'hellomp lavaret, goude Mari, den n'en euz bet muioc'h a c'hassou na muioc'h a zantelez eguet sant Joseph. Goude Jesus ha Mari, na velan den var an douar hag a ve bet santeloc'h eguet sant Joseph.

Sant Joseph, den just, pedit evidomp.

AN DECVET DEVEZ A VIS MEURS

Carantez an Itron Varia evit sant Joseph

An Itron Varia e deuz bet evit sant Joseph he fried eur garantez calz bras-soc'h eguet an oll garantez ho deuz an dud an eil evit eguile. An Aotrou Doue a c'hourc'hemene d'ezhi, evel ma ra d'an oll, caret he nessa ; mez etouez he nessa sant Joseph en doa al loden vrassa en he c'harantez, dre ma oa he fried choazet d'ezhi gant Doue. Evel pried da zant Joseph, ar Verc'hez e devoa eun dever al a berz Doue da garet ar patriarch santel-ma ; rag Doue a ra d'ar priejou eun dever d'en em garet. Piou a gredfe lavaret e ve bet ar Verc'hez santel, ker sentuz e peb tra, manket da ober he dever e kenver he fried ? Oh ! nan, neket manket da gaout evit he fried eur garantez a gostez hag eur garantez dreist vuzul.

Penoz n'he dije ket caret sant Joseph muioc'h eguet an oll dud al, pa z'eo guir ez oa eun dever evithi hen ober ha pa z'eo guir sant Joseph a oa ive ker mad outhi hag ouz he map ? Peb tra a ree evitho ha na refuze netra d'ezho. Implija a ree he amzer, he iec'hed hag he ners evit ho maga hag evit pourvei d'ho ezomou a hendal. Lakeat en doa he oll evez da viret he enor, pa zeuaz da veza mam da Zoue, bete zoken ma felle d'ezhan tec'het diouthi heb noazout d'ezhi. Miret ha cuzet en deuz he guerc'hded epad tregont vloaz. Abaoe en doa an eür da anaout an Itron Varia, sant Joseph a reaz evithi kement ha ma oa en he c'halloud.

Dre-ze e c'hellomp credi e deuz bet ar Verc'hez zantel evit sant Joseph eur garantez heb he far. Goude an Drinded santel ha Jesus, sant Joseph en doa ar reng kenta e calon Mari.

An Itron Varia e deuz rentet da

zant Joseph an enor, ar respet, ar garantez hag an doujanz a dle peb pried d'he fried. Ia, enoret e deuz he fried ar muia ma c'helle ; roet e deuz d'ezhan an hano a dad da Jesus : « Setu ho tad ha me, emezhi da Jesus, ho claske gant glac'har. » Dre eno ar Verc'hez e deuz enoret sant Joseph ar muia ma c'helle. N'euz fors pegement a draou caer hag enoruz a c'heller lavaret divar benn sant Joseph, netra na dostao biken ouz an enor-ze da veza galved Tad da Jesus Map Doue en em c'hreat den.

Oc'hpenn c'hoaz, Mari e deuz enoret sant Joseph, pa e deuz bet ar vadelez d'her c'hemer da bried. Oh ! ia, ar c'haera enor en deuz bet sant Joseph eo beza pried d'ar Verc'hez Vari ha Tad maguer da Jesus. An daou dra-ze heb ken ho deuz he denet a vesg ar grouadurien al hag hel lakeet en eur reng a goztez etouez

an oll dud. An Aviel, evit meuli hag enori sant Joseph, n'en deuz lavaret netra ken ; ha n'euz fors petra en dije lavaret a hendall, na vije ket tosteet ouz an enor da veza Pried da Vari ha Tad maguer da Jesus : an enor-ze a zo dreist an oll enoriou.

An Itron Varia e deuz caret kement sant Joseph ma ne felle ket d'ezhi en em zispartia diouthan tam ebet. Pa oa deuet an urz d'an dud aberz an impalaer August da vont da rei ho hano, an Itron Varia ne oa ket red d'ezhi mont da Vethleem : sant Joseph he unan a helle ober an affer-ze ; mez kement e care he fried, ma fellaz d'ezhi mont ganthan hag hen ober a reaz, daoust d'ar boan e dije en eur veach hir ha dicez e creiz ar goan. Kement se, evit guir, oa en urz euz ar Brovidanz, evit ma he dije ganet he Map e Bethleem.

Ar Verc'hez Vari a zent ouz 'sant Joseph.

Pa zeu he fried da lavaret d'ezhi e creiz an noz kemer he map ha mont gant-han dioc'h-tu meaz ar vro, d'an Egypt, etouez paianet, e leac'h na anaveze den, heb gouzout penoz ho dije great evit beva, an Itron Varia a zavaz dioc'h-tu hag aguemeraz he Map heben em glemm. Na lavaraz ket d'he fried : Mez marteze n'hoc'h euz great nemed sorienna, n'hoc'h euz ket klevet mad ; marteze neket eun Eal hag en deuz comzet ouzoc'h.... Ma vije bet eun Eal, en dije lavaret eun dra bennag d'in-me, pa oun mam Doue.... Mez da viana, perag mont kuit e kreiz an noz?... gortozomp an deiz...

Setu petra hor bije-ni lavaret ; mez ar Verc'hez zantel a zent ractal, heb clasg digareziou.

Pebez doujanz evit he fried ha pebez fizianz e Doue !

Penoz ne dije ket sentet an Itron Varia ouz sant Joseph, pa vele Jesus he Map ha Map unig an Tad-Eternel o senti outhan ? Ha ne dije ket credet e oa evithi eun dever senti ouz he fried, ar scouer e doa bemde dirazhi e buez Jesus-Christ a oa cre aoalc'h evit he lacaat da zouja gant joa ha gant carantez da zant Joseph.

Dre-ze n'euz ket bet biscoaz den ker sentuz hag hi, hag hen ober a ree dre garantez. Ia, Mari a gare Joseph e Doue. Ar Verc'hez e deuz caret santez Elisabeth, sant Ian-Badezour, sant Lazar, an Abostol sant Ian hag ive an Ebestel ; mez sant Joseph eo ar c'henta e deuz caret hag epad tregont vloaz e deuz he garet hag he zervichet gant respet ha gant humilite : kement a istim e doa evidhan. Pidi a ree evidhan bemde : kement a anaoudeguez vad e doa evit ar pez en doa great hag a ree bep mare evithi !

Goulenn a ree ma vije cresket er zantelez. En he glenved diveza, en heur euz he varo, ar Verc'hez a oa leun a zoursi anezhan. Ili he gonsole en he boanjou, a bede evidhan hag a zave aliez he speret hag he galon varzu Doue evit creski he gurunen en envou.

Priejou, kemerit scouer dioc'h carantez Mari ha Joseph epad ho friedelez zantel. Heuliet Mari ha Joseph en ho vertuziou ha pedit-ho da c'houlenn evidoc'h ar c'hraz da veva e doujanz Doue hag en eur garantez zantel an eil evit eguile, evel m'ho deuz great epad ho friedelez.

Mari ha Joseph, pedit evidomp.

AN UNECVET DEVEZ A VIS MEURS

Carantez sant Joseph evit Jesus

Er garg huel en deuz bet digant Doue da c'houarn Jesus ha Mari, sant Joseph a dlee caout an oll vertuziou

ha dreist peb tra ar garantez, pa z'eo guir ar garantez eo rouanez an oll vertuziou.

Lavaromp ama eur guer bennag var he garantez evit Jesus. Sant Joseph a dlee caout evit Jesus eur garantez dreist vuzul, dre ma oa lakeet gant Doue da zerc'hel lec'h a dad d'hor Zalver hag abalamour ar Map divin, fiziet enhan, a zo Doue. Peb tra a ree da zant Joseph eun dever da garet Jesus : he vap oa (1), hag he Zoue oa. Dre natur, eun tad a gar he vap hag an den a zo douguet dre ar c'hraz da garet Doue.

Seul vui a furnez, a speret hag a vertuziou a vel eun tad en he grouadur ; seul vui a garantez en deuz evidhan, abalamour d'ar fizianz en deuz e vezo he vap eun dra bennag a vad hag a vraz er bed. Hloguen sant Joseph

(1) Ato pa lavarer eo sant Joseph Tad da Jesus, e tleer entend eo Tad maguer, ha netra ken.

a vele e Jesus Mab unig an Tad-Eternel, an eil ferson euz an Drinded santel, ar Furnez eternal, Roue an env hag an douar ha Salver ar bed. Penoz, e guirionez, e c'hello beva keit amzer gant Jesus, he glevet, he velet, he vega, he visca hag he zouguen ken aliez a vech etre he zivrec'h, heb santout ar garantez o firvi en he galon ?

Mari Madalen e deuz bet an enor da boca da dreid Jesus ha d'ho guelc'hi gant he daelou ; an Abostol sant Ian en deuz bet stouet he benn var galon Jesus : cavet ho deuz eno ho daou eur garantez vraz meurbed evit Jesus. Mez sant Joseph en deuz bet an eurvad da gaout bemde an enor hag ar c'hraz caer ho deuz bet Mari Madalen ha sant Ian eur vech en ho buez.

Pa oa diskennet hor Zalver var an douar, pa oa ganet ar Mabic Jesus, an Itron Varia hel lakeaz etre divrec'h sant Joseph. Ia, goude Mari, sant

Joseph eo ar c'henta en deuz he velet, ar c'henta en deuz he glevet ha touchet outhan. Oh ! gant pebez respet e keme-raz ar c'hrouadur divin-ze euz a zaouarn Mari he vam ! Gant pebez joa ha pebez carantez e pocaz d'ezhan hag her stardaz var he galon ! Peguement a soursi a guemeraz anezhan en he vugaleach ! Mall oa ganthan ober d'ezhan eun tamig cavel da c'hourvez ; truez en doa outhan, mantra a ree he galoun a dad, o velet Jesus ker paour ha ker poaniet var ar plouz. Nag a nozvez en deuz tremenet e kichen he gavel ! Nag a zaelou en deuz sec'het var he visach divin ! Rag Jesus en eur zont er bed a gommanz ractal labour hor zilvidiguez hag a vouel var hor pec'hejou. Piou a ouffe lavaret ar garantez a dremene e calon sant Joseph, azezet ken aliez a vech e kichen cavel ar Mabic-Jesus hag en noz hag en deiz.

Tad Orijen a zave en noz hag a ie da boca gant carantez da galon he vabic iaouang, e pehini e vele, gant daoulagad ar feiz, templ ar Speret Santel. Nag a vech ive, o sant beniguet, hoc'h euz stouet ho penn da boca da galon Jesus epad he gousg ! Ia, e kichen Jesus e tiskuizoc'h euz ho labour poaniuz ; ho prassa plijadur oa evesaat var he dro, rei d'ezhan da zibri ; he zouguen var ho prec'h, mont ganthan du-ma du-hont hag hel lacaat da vale pa gommanz mont he-unan. Nag euruz en em gavjac'h o lacad evez ouz he c'hened ! Jesus ive ho tic'haoue euz ho poan hag ho trevel, dre he vousec'hoarzig ha dre he lazig gant he zouarnigou divin.

Pa oa deuet brassoc'h, pebez joa evidoc'h, sant Joseph, caout Jesus oc'h taol, azezet en ho kichen, o tibri he bred ozet gant Mari he vam hag ho pried ! Na dudiuz oa evit ho tious-

couarn ar c'homzou kenta a gouezaz euz a c'hinou Jesus, oc'h he glevet o rei deoc'h an hano a dad ! Nag a joa oc'h he velet o tont d'ho saludi bemnoz ha bep mintin !

Penez n'en dije ket sant Joseph eur garantez vraz evit hor Zalver ? Jesus a oa ker mad, ken tener ha ker carantezus evit Joseph : senti a ree outhan gant kement a zoujanz, dre ma ne oa ket deuet evit ober he volonte he-unan, mez evit ober bolonte he Dad.

Eur garantez vraz en doa ive d'he dro evit sant Joseph. Pedi a ree evidhan hag assamblez ganthan an aliessa ma c'helle. He blijadur oa beza ganthan ; hen heulia a ree en he labour, ha pa oa deuet d'ezhan he ners, e laboure ganthan. Joa e oa ive gant Jesus discleria da Joseph ar mysteriou braz euz ar relijion. Oh ! nag a draou caer en deuz clevet sant Joseph gant Jesus ha Mari !

Dre-ze sant Joseph na esperne nag he ners, nag he iec'hed, nag he vuez dre garantez evit Jesus. Mercou sclear en deuz roet euz he garantez. A boan ma oa ganet hor Zalver ma counaraz ar foue Herodez eneb d'ezhan. Clasg a ra lacaat an dorn var he c'hore evit he vuntra. Eun Eal, epad an noz, a gass canad da zant Joseph da guemer an tec'h gant ar c'hrouadur hag ar vam. Joseph na chom ket da zigarezi, ractal ema en hent. Mont a ra d'an Egypt gant Jesus ha Mari, pell dioc'h he vro, e leac'h ne c'hanaveze den, e leac'h n'en doa nemet poan he zivrec'h evit maga Jesus ha Mari. Chom a ra eno epad eur zeiz pe eiz vloaz, ken e teu kelou d'ezhan da zistrei d'he vro. Tremen a ra var dro tregont vloaz e servich Jesus ha Mari : pebez carantez !

D'ar varn diveza Jesus a venigo an dud a vezo bet trugarezuz e kever honessa, o rei da zibri ha da eva d'ar

beorien. Mez da zant Joseph e c'hello lavaret e guirionez : Me am euz bet naon, ha c'hui hoc'h euz roet d'in da zibri ; me am euz bet sec'het, ha c'hui hoc'h euz roet d'in da eva ; me a zo bet en noaz, ha c'hui hoc'h euz va guisket ; n'am boa ti ebet, ha c'hui hoc'h euz va lojet.

An den santel Tobi na ouie penoz discouez he anaoudeguez vad d'an Eal en doa he renet epad he veach hag he ziframet digant eur pesg braz a oa o vont d'hen taga. Piou a c'hello neuze lavaret ar recompanz caer en deuz bet sant Joseph digant Jesus, pehini na lezo ket heb recompanz eur verened dour, roet d'ar paour en he hano ? Rag neket eur verened dour heb ken en deuz roet d'ar paour e hano Jesus-Christ ; mez he vaguet hag he visket en deuz gant he labour ha saveteet en deuz d'ezhan he vuez.

Ar Speret Santel hag an Iron Varia

a zo en em garguet da ziscouez d'eomp carantez sant Joseph evit Jesus ? Lenn a reomp en Aviel ar c'homzou-ma lavaret gant Mari d'he map cavet en Templ : « Setu ho tad ha me ho claske gant glac'har. » Ila na velomp ket aze sclear aalc'h carantez sant Joseph evit Jesus ? Euz a beleac'h e teue ar glac'har braz-ze da zant Joseph o veza collet he vap, nemet dre ma care calz Jesus ? Ia, sant Joseph a gare kement Jesus ma na oa ket evit he zioueret nag en em zispartia outhan.

Sant Joseph en deuz caret Jesus mui eguet ho deuz great an holl Zœnt assamblez. Couscoude nag a vercou ho deuz roet ar Zœnt euz ho c'harantez evit Jesus ? Test sant Paul, pehini a zifi an env hag an douar d'he zispartia dioc'h carantez Jesus-Christ ; sant Frances d'Assiz a bede mil guech bemde an Aotrou Doue da ober d'ezhan mervel dre garantez evidhan ; sant

Frances a Sales a lavare aliez : Va Doue, contant oun e ve en env Sœnt, savet huelloc'h evidoun, mez na fell ket d'in e ve nicun hag ho carfe muioc'h evid oun. Ia, braz eo bet carantez ar Zœnt evit Jesus ; mez ho oll garantez neket par da hini sant Joseph. N'euz nemet carantez Mari hag e ve bet trec'h da garantez Joseph evit Jesus. Ila ni ive, na garfemp ket Jesus ? Penoz e chomo hor c'halonou ken ien evit hor Zalver Jesus.

Sant Joseph, roit deomp eun tamig euz ho carantez evit Jesus ; lakait en hor c'halonou eur fulen euz an tan divin a ree d'ho calon birvi gant ar garantez evit Jesus ha Mari.

DAOUZECVET DEVEZ A VIS MEURS

Ar Famil-Zantel, scouer an oll vertuziou

Jesus, Mari ha Joseph e Nazareth a oa evel eur skeud euz ar Baradoz,

diskennet var an douar. An Drindet Santel ho guele gant joa ; an Elez a oa estlammet gant ho zantelez. An Aotrou Doue a felle d'ezhan rei eno ar scouer euz ar famil gaisten.

Ar vugale ho deuz e buez Jesus ar scouer euz ar respet hag euz ar garantez a dleont da gaout evit ho zad hag ho mam. Guelet a reont eun Doue, en em c'hreat den, o senti gant aked ha gant joa ouz Mari ha Joseph. Pebez kentel evidomp ! Eun Doue a zent ouz an dud, hag an dud na fell ket d'ezho senti an eil ouz eguile ; na fell ket d'ezho zoken, allas ! senti ouz Doue. Jesus en deuz roet deomp ar scouer evit diski deomp hent ar Baradoz ; rag evit mont d'ar Baradoz e ranker senti ouz Doue hag ouz an dud, abalamour da Zoue. An droug cœlez ho deuz collet ar Baradoz, dre ma neket bet fellet d'ezho senti ; Adam hag Eva ho deuz collet ar Baradoz

terrest, abalamour n'ho deuz ket sentet. Jesus a zo deuet da zigueri deomp ar Baradoz o senti ; dre-ze e lavar : N'oun ket deuet evit ober va bolonte vanañ ; mez evit ober bolonte va Zad, en deuz va digasset. Senti a ra ouz Mari ha Joseph, a lavar an Aviel : « Hag e sente outho. » Epad he vuez n'en deuz gouezet nemet senti, ha ni a fello deomp ober bepred hor bolonte ? Ma ne zentomp ket ouz neb en deuz guir da gommandi, n'omp ket mui bugale Doue ; n'omp ket mui henvel ouz Jesus ha n'euz mui leac'h ebet evidomp er Baradoz.

E Nazareth, ar priedou a gav ive ar scouer euz an oll vertuziou. Mari ha Joseph a zo leun a respet hag a garantez an eil evit eguile. An Itron Varia, evel Mam Doue, a zo savet dreist an oll grouadurien, huelloc'h eguet an oll Zœnt hag an oll Elez. Hi eo Rouanez an env hag an douar,

Rouanez an Ælez hag an dud, ha couscoude guelit Mari e compagnunez Joseph : senti a ra ouz he fried ; na ra netra nemet dre he fried. Pa renk Joseph mont da Vethleem da lacaat he hano, Mari a ia ganthan. Pa lavar Joseph d'he bried sevel e creiz an noz ha kemer ar c'hrouadur evit mont d'an Ægypt, Mari a zav, a guemer he c'hrouadur hag en em laca en hent. Pa rō Joseph d'he bried an urs en deuz bet da zistrei adare d'ar guer, Mari a zent gant joa. Oh ! pebez carantez ez oa e tre an daou bried santel-ze ha pebez urz en ho zi ! Joseph a labour e hag a bourvee gant poan he zivrec'h da oll ezomou he famil, ha Mari a zalc'he urz vad en tieguez hag a gave ato eul loden evit ar beorien.

Paour ez oant, mez ne oa netra diguempen. Peb tra en doa he vare ; eun amzer oa evit al labour, hag eun

amzer evit ar beden. Pa arrue ar goueliou, Mari ha Joseph a ie gant Jesus d'an templ. Pa arrue deiz an Aotrou Doue, ar pezh a c'halvomp ar zul, peb labour e vije lezet a gostez ha Doue adoret.

O priejou, diskite gant Mari ha Joseph en em garout e Doue, senti an eil ouz eguile, en em c'houzanv hag en em zicour da ober ho silvidiguez. Gant eun tamig bolonte vad, ho tieguez a ve evidoc'h evel eur Baradoz. Diouallit da viana da ober anezhan eun ifern.

Na caer eo eun tieguez, pa zo enhan doujanv Doue ! An tad a labour hag a bourvez da ezomou an ti ; ar vam a laca an traou da dalvoud hag a evesa var peb tra. Ar vugale ho deuz scouer vad, hag a zo desket abred da garet Doue ha da ober ho dever. Pa deu ar zul peb labour a zo lezet a gostez ha Doue a zo adoret ha servichet. Ar garantez a ren e calonou an oll hag

ar beorien ho deuz diguemer vad. An env a scuil he venoz hag he c'hrassou var an ti-ze hag ar joa a zo pintet var bisach an oll.

Labourerien, diskite gant sant Joseph carout al labour hag ar boan a zo d'he heul. Epad ho labour, meulit Doue ha sonjit er Baradoz. Doue ho kuel hag a baeo ho poan dre eun eternite a blijadur.

Tud paour, en ho tienez, sonjit e Jesus, e Mari, e Joseph e craou Bethleem, ha beniguit Providanz Doue da veza ho lakeet henvel outho var an douar. Jesus, Mari ha Joseph a zo bet paour hag ho deuz ranket labourat evit en em vaga. Beza henvel ouz Jesus a zo eur merg a zilvidiguez.

Mar doc'h disprijet gant an dud ha mar oc'h euz da c'houzantv euz ho ferz, guelit Jesus, Mari ha Joseph o tec'het araog an tyrant Herodez hag o kuitaat ho bro.

E pe stad bennag en em gavit, eur zel var ar Famil-Zantel a rei vad d'ehoc'h. En ho poaniou, eleac'h hirvidi ha tamall Doue hag an dud, it da gaout Jesus, Mari ha Joseph. Gouzout a reont petra eo ar boan, petra eo an disprijanz. Gallowd ha c'hoant ho deuz d'ho soulaji.

Tud a boan, tud a drubuil, deuit davedoun, eme Jesus, ha me ho kenerzo.

Jesus, Mari, Joseph, ho pezit truez ouzomp.

AN DRIZECVET DEVEZ A VIS MEURS

Glander pe purete sant Joseph

An eniou dinam, pur ha guerc'h a zo caret gant Doue dreist ar re al; eur reng a goztez ho deuz en env; ren a reont gant Jesus-Christ. « Heuilla a reont an Oan santel, eme sant Ian, da belec'h bennag ma za. Ar re-ze a zo

bet prenet euz a douez an dud evit kenta frouez da Zoue ha d'an Oan. Dinam, pur int dirag an Aotrou Doue ha cana a reont eno var an delen e c'hiz eur ganaouen nevez dirag an tron. »

Neket en env hebken emaint gant Doue, var an douar zoken e cavont an tanva euz a vuez an env ; rag e levr ar Furnez e lennomp : « Neb a gar ar glander a galoun en devezo ar roue evit mignon. » Jesus-Christ en deuz epad he vuez caret ha clasket ar re a zo glan pe pur a galoun : « Euruz, emezhan, ar re a zo glan a galoun, rag guelet a rint Doue. » Dre-ze o tont er bed en deuz kemeret eur verc'hez evit mam, hag ar vam burzuduz-ze a vezo a viziken galvet ar Verc'hez, ar Verc'hez Vari, rouanez ar Guerc'hez. E touez an Ebestel, sant Ian a oe an diskib muia caret, o veza ma en doa miret ar guerc'hded. Var boull he

galoun e stouaz Jesus he benn er goan diveza hag en-han e fiziaz he vam, pa guitaaz an douar evit distrei d'an env.

Oh ! ma care Jesus kement ar glander a galoun en he Vam Zantel hag en Abostol sant Ian, guelet a ree gant dudi ar vertuz gaer-man o luguerni e ene sant Joseph he dad maguer, dibabet e mesk ar re al evit beza pried d'he vam, evit he ren hag he gouarn epad keid amzer !

Ar Speret Santel, pehini en doa leuniet ar Verc'hez sacr a c'harrassou ar c'haera, na chomaz ket heb scuilla abred e ene sant Joseph ar glander a galoun a dlee da gaout en eur reng ken huel ha ken enoruz. Dre-ze he c'hlander a oa en tu al da hini ar prophet Eliaz, pehini a zo bet savet en env, o veza ma ez oa glan ; rag ar glander a dosta an den euz a Zoue ; ar glander dreist ar vertuziou al a laca

an den da veza henvel oc'h Doue, oc'h an Drinded santel.

Sant Joseph a ioa eta pur ha santel evel eun eal. Miret en deuz bepred ar guerc'hded, ar boket kaer-ze, pehini a luguern e mesk an oll vertuziou evel ar bleun e touez an deillou e beg eur vezen. Adaleg an oad an tenera en doa caret ar vertuz gaer-ze. Greet en doa bet al le pe ar vœu d'he miret hag aketuz ez eo bet d'en em ziuall dioc'h kement a c'helle ober d'ezhan he c'holl ; gant graz Doue ha bolonte vad ez eo deut abenn da viret ar promessa en doa greet. Dreze ema ar c'hiz da ziskuez sant Joseph gant eur boket lili en he zourn, evel ar merk euz he c'hlander.

Ma ez oa pur ha santel en he iaouankiz, a barz he eured, pa zeaz e compagnunez ar Verc'hez Vari, puroc'h ha santeloc'h ez oa c'hoaz goude. Ma crescaz he zantelez o veva gant Mari

he bried, petra e tleje beza eta pa ziskennaz en he di Jesus ar glander, ar zantelez memez ? Na pur, na santel e oa sant Joseph a speret, a galoun hag a gorv ! Na pur ha santel e oa an daoulagad-ze ho deuz guelet ken aliez a vech Jesus ha Mari ! Na pur ha santel e oa an discouarn-ze ho deuz clevet mouez Jesus ha Mari ken aliez a vech ! Na pur ha santel an teod-ze en deuz comzet ken aliez ouz Jesus ha Mari ! Na pur ha santel an daouarn-ze ho deuz touchet ouz Jesus ken aliez a vech ! Ia, oll izili sant Joseph a zo bet santeleet gant Jesus ha Mari ; mez piou a helfe lavaret ar guened a luc'he e caloun, e ene ar Patriarch santel-ma ? Eur mellezour sclear, an aour fin, eun diamant, eur feunteun a zour net ne d'int netra e scoaz ar guened hag ar gaerded euz ar galoun-ze. Na caer, na dudiuz e oa ar sclerijen skeduz a luguerne en ene

santel-ze evel an heol var an noab ; Doue en em blijje o velet he skeuden er mellezour burzuduz-ze ; kemesca a ree eun dra bennag euz he c'hlander gant glander he zervicher.

Ni ive e pe stad bennag e oufemp beza var an douar, coz a iaouank, paour ha pinvidik, comprenomp mad comzou hor Zalver Jesus-Christ pa lavar : « Euruz ar re a zo glan a galoun, rag ar re-ze a velo Doue. » E leac'h al c'hoaz hor mestr divin a lavar : « Netra sotret na ielo tre e rouantelez an env. » Oll a fell deomp mont d'ar baradoz, oll a fell deomp gullet Doue, oll e tleomp eta beza glan a galoun, rag netra louz n'en devezo diguemer en env. Studiomp buez sant Joseph, kemeromp-hen evit skuer ; ar Zant bras-ma en deuz caret ar glander a galoun hag he c'hasket gant calz a aked epad he vuez.

C'hui dreist-oll, eniou mad ha ner-

zuz pere a zispriz ar bed gant he joa, he blijadurezou hag he vadou evit heulia a zevri ar vertuz gaer-ma ker caret gant Jesus, Mari ha Joseph, kemerit zant Joseph evit ho skouer hag evit ho ren e hent ar glander pe ar burete ; n'oufac'h ket caout guelloc'h mestr. Pedit-hen stard bep mare da rei an dorn d'ehoc'h evit ma c'hellot dont a benn da drec'hi kement tra a stourmo ouz hoc'h ; pedit-hen da derri ar chadennou ho talc'h c'hoaz stag oc'h an douar hag a vir ne c'hellit sevel beteg hueded an Elez. E creiz ho tentationou savit ho taoulagad var zu an env ha ne eanit o lavaret da zant Joseph ho kennerza. Poan a zo, dez eo dont a ben da viret an tenzor caer-ma. An droug-speret hag ar bed ho deuz droug euz ar re a heuill ar vertuz gaer euz ar burete, hag an techou fall euz ar c'horf hag euz ar galoun na eanont da iudal en ho eneb.

Goal gaouajou a zo, meur a var amzer denn a dremen var nezho e creiz ar mor direiz euz ar vuez-ma. Stourm a ranket pe beza lounket e goeled ar vissou.

Evit miret ar burete, eme zant Iann Chrysostom, e ranker caout eur galoun gre, nerzuz ha beza leun a gaz ouz plijadurezou ar c'horf. Ne d'eo ket epad eur pennadig amzer heb ken ho pezo da stourm ; eur brezel tenn ha paduz eo ho pezo. Treuzi e tleot an tan heb beza devet, bale e rancot dre douez ar c'hlezeier heb beza goullet ; rag e guirionez an techou fall, ar siou a zo en den ha ne d'int-hi ket evel ar flammou a zev hag evel clezeier lemm ? An ene ha gounid a c'hell ar victor heb trec'hi an techou fall-ze ? Evit miret ar vertuz-ma hon euz ezom euz eur galoun gre evel an houarn, da veza bepred var evez, da gaout eur batiantet ha ne scuiz morse, ha dreist peb tra da veza

sicouret gant grassou an env ; rag ma ne d'eo ket dioualet kear gant Doue he unan, eme ar Scritur, en aner e veillont ar re a zo carguet d'he dioual.

Dre ar iun hag ar beden, eme c'hoaz sant Iann Chrysostom, e teuimp da denna varnomp gras Doue evit trec'hi an droug-spered ; arabad eo deomp lacaat hor fizianz en omp hon unan ha petra bennag e rafemp, e tleomp ato lavaret : ma ne ro Doue an dorn d'in em labour, ne dall tra kemer poan o clask sevel eun ti. Rag ne d'eo ket eneb ar c'hik nag ar goad, da lavaret eo, eneb an techou fall a zo en den, hon euz heb ken da vrezelacaat, mez eneb an droug-sperejou a ra ho mistri e creiz tavalijen ar bed, eneb ar sperejou fall-ze couezet euz an env. Noz deiz e rankomp beza var evez evit en em zifenn gant ners er brezel hon euz abers hon techou mezuz. An droug-spered a zo var aked,

gant eur scod tan en he zorn evit her bana var templ an Aotrou Doue, da lavaret eo, en ho ene, ractal ma cav an dro evit hen devi. Bezomp eta var evez : brezel hon euz da ober d'hon techou fall, par e tleomp beza d'an Ælez, stourm e tleomp oc'h an droug-sperejou. Ne d'omp a du ar c'borf nemet poultren ha ludu hag e rankomp couscoude sevel ken huel hag an Ælez a zo en env. Ne d'omp nemet tud dister, diners ha condaonet d'ar maro, hag e rankomp trec'hi an droug-Ælez, sperejou ha ne varvint morze. Dre-ze e tleomp beza ato var zao, ato var evez evit en em zifenn epad eur brezel heb ean, eur brezel a bado keit hag hor buez (1).

E creiz ar stourm poaniuz-ze, ra vezo hon daoulagad o para var ar gurunen a zalc'h Jesus-Christ en he zorn

(1) Saint Jean-Chrysostome. (*De Virginitate*, cap. 27.)

evit ar re a zo glan a galoun, var an Ælez testou euz hor poaniou ; ra vezo bepred en hor c'haloun hag en hor guinou an ano santel a Jesus hag a Vari ha ne eanomp da c'hervel sant Joseph d'hor zicour, o lavaret d'ezhan :

Sant Joseph, pedit evidomp.

AR BEVARZEC DEVEZ A VIS MEURS

Feiz sant Joseph

Santez Elisabeth a lavaraz d'an Itron Varia, deuet d'he guelet : « Euruz oc'h da veza credet, rag ar pezh en deuz lavaret an Aotrou Doue a arruo enhoc'h. »

Lavaret a c'heller ive ar memez tra euz feiz sant Joseph : Euruz oc'h da veza credet, rag ar pezh en doa c'hoant an Aotrou Doue da ober ganehoc'h, a arruo evit he c'hloar hag evit silvidiguez an dud.

Oh ! pebez feiz en deuz bet sant

Joseph ! Credet en deuz da vouez eun Eal, deuet da lavaret d'ezhan e creiz he encrez, oa Mari, he bried, guerc'hez ha mam da Zoue, dre vertuz ar Speret Santel. Ne glascaz ket gouzout penoz oa arruet kement-se ; aoalc'h eo d'ezhan clevet ar c'helou euz myster an Incarnation evit he gredi ractal, ha pa oa ganet hor Zalver, hen adoraz evel he Zoue, daoust d'he boan ha d'he baourentez e craou Bethleem.

Gant pebez feiz e taoulinaz e kichen Mari da adori Mab unig an Tad-Eternel, diskennet var an douar ha deuet da veza ho Mab ! Gant pebez carantez en em guinigaz d'he zervicha epad he vuez !

Sant Joseph a gredaz d'an Eal deuet da lavaret d'ezhan en noz, epad he gousg, sevel ha kemer ar c'hrouadur hag ar vam, ha mont d'an Ægypt. Ma n'en dije heuliet nemet he benn

he unan, nag a zigareziou en dije cavet evit chom heb ober ar peza oa gourc'hemenet d'ezhan ! Meur a hini en he blass ho dije lavaret : Mes perag mont kuit e creiz an noz ? Gortozomp an deiz ; amzer zo. Darn al ho dije lavaret d'an Eal : Penoz c'hui oc'h euz lavaret d'in oa Jesus Doue, deuet var an douar evit savetei an dud, hag a rank va c'haout evit save-tei he vuez ! Mar d'eo Doue, e pe leac'h eta ema he c'halloud. Ha ma en deuz an oll c'halloud, neket red d'ezhan caout an dud evit savetei he vuez. Herodez a glasg hel lacaat d'ar maro : mez perag ne ro ket ar maro d'an tyrant-ze ? Perag lezel an den fallacr-ze da ober kement a zroug var an douar ? Poent braz eo rei ar maro da hennez ; droug aoalc'h en deuz great ; tud aoalc'h en deuz lazet. Mez ma na fell ket da Zoue rei d'ezhan ar maro, perag na chench ket he galon, en eur rei d'ez-

han sonjou guelloc'h ; pa z'eo guir calonou ar rouaned evel calonou an oll a zo e tre he zaouarn ? Setu petra a c'halje lavaret eun den hag en dije bet nebeud a feiz. Setu ar pezh a glevet c'hoaz hirio an deiz. Mez ar zonzou hag ar c'homzouze a zo pell dioc'h speret sant Joseph. He feiz a zo cre ha sclerijennet mad. Anaout a ra guelloc'h ar mysteriou eguet na ree an Ebestel, goude m'ho doa tremenet tri bloaz e scol Jesus-Christ. Gouzout a ra eo Jesus-Christ roue, mez he rouantelez na oa ket var an douar ; ne oa ket deuet evit beza henvel ouz rouaned ar bed, evit caout enor ha gloar digant an dud, mez evit tenna an dud euz ar pec'het hag evit ho diframma digant an droug-speret. Dre ar boan, dre ar baourentez, dre an dismeganz, ha dreist peb tra dre an obeissanz a felle da Jesus-Christ ober ar burzud braz-ze.

Ar feiz a ree da zant Joseph guelet gloar ha galloud an Aotrou Doue cuzet e Jesus Mab Doue en em c'hreat den hag en em izeleet evit savetei he bopl. Joseph oa eun den just, hag an den just a vev euz ar feiz.

Na gompren ket ar mysteriou, mez ho c'hredi a ra, ha senti a ra heb clasg digareziou.

Mont a ra dre ar memez hent gant Jesus ; dre hent an obeissanz, ar boan hag ar baourentez. An Eal a lavar d'ezhan mont d'an Ægypt ha chom eno ken a zeuio kelou d'ezhan da zistrei d'he vro. Sant Joseph na c'houlent ket pegueit e ranco chom ; mez chom a ra keit ha ma fallo da Zoue.

Feiz sant Joseph a zo brassoc'h eguet feiz Abraham ; couscoude ar patriarch santel-ze a zo meulet gant Doue abalamour d'he feiz. Dre-ze an Eal na lavar ket da Joseph, evel m'oa bet lavaret da

Abraham, e vije eat d'he heul, e vije bet ganthan, evit he zifenn, evit he viret a bep droug epad an hent. He feiz n'en doa ket ezom a guement-se. Gouzout a ree en dije cavet meur a zanjer, en dije bet truibuil en he veach ; en doa eun dezert da dreuzi. N'eus fors, en em lacaat a ra en hent e creiz an noz ; na c'hortoz ket an deiz. Mont a ra d'an Ægypt, etouez tud leun a gassoni ouz ar Jusevien, e leac'h ma oa bet goal gasset he dud coz ; e leac'h ne oa nemet paianed, pere na adorent nemet bep seurt idolou ha na anavezent nemet ar vissou. Chom a ra eno keit ha ma plij gant Doue. Pa vije deuet ar mare, Doue a dlee he c'hervel d'he vro ; traoualc'h eo kement-se evit he feiz.

Pa en em dennaz ar bopl Israel euz an Ægypt, pa dreuzaz an dezert, eur goabren, tenval epad an deiz ha ske-duz epad an noz, hen henchaz ; an arc'h allianz a oa douguet e penn ar

vanden ; an dour a rede euz ar c'hereg evit terri he zec'het d'ar bopl, hag ar mann a goueze bemde euz an env evit he vaga.

Feiz sant Joseph n'en doa ket ezom ar seurt burzudou-ze. Anaout a ree Jesus, ha Jesus a oa ganthan. En eur zouguen Jesus, en doa ganthan eun tenzor caeroc'h, preciussoc'h eguet ar goabren burzuduz-ze, eguet an arc'h allianz, eguet ar mann, traou pere ne oant nemet ar figur euz Jesus-Christ. Euruz gant an tenzor a zougue, sant Joseph na c'houlenn nemet senti, nemet heulia Jesus en he baourentez, en he boaniou, ha ma vije lavaret d'ezhan ober tro ar bed ganthan, en dije her greet gant joa hag heb en em glem.

Pa teu ar c'helou da zistrei d'he vro, sant Joseph a ia da Nazareth, d'al leac'h merket d'ezhan. Nazareth a zo eur gueric disprijet : n'euz fors, di ez

euz lavaret d'ezhan mont, ha chom a rei eno ; labourad a rei eno, ha mervel a rei eno e tre divrec'h Jesus ha Mari. Pebez feiz !

Deomp neuze d'en em glem, da d'admal an Aotrou Doue hag ar re ho deuz guir da gommandi deomp. Clascomp c'hoaz digareziou, pa vezo eun dra ben-nag diouz da ober e lezen Doue pe en hon dever.

O sant Joseph, goulennit evidomp digant Jesus ha Mari eun tamig euz ho feiz.

AR BEMZECVET DEVEZ A VIS MEURS

Paourentez sant Joseph

« Euruz, eme ar Speret-Santel, an den a zo bet cavet dinam, ha n'en deuz ket redet varlerc'h an aour, na lakeet he fizianz en arc'hant nag en tenzoriou. Piou eo an den-ze ha ni her meulo ? Rag traou burzuduz en deuz greet en he vuez, »

Cavet eo an den-ze a glaske ar Speret-Santel. Sant Joseph eo an den-ze ; hen a zo bet bepred pur ha santel var an douar ; n'en deuz ket redet varlerc'h an aour na lakeet he fizianz en arc'hant, nag e tenzoriou ar bed. Dre-ze eo bet meulet gant ar Speret-Santel ; galvet eo bet ganthan eun den just, da lavaret eo, eun den leun a vertuziou. Burzuduz eo bet ive en he vuez : Pried eo bet da Vam Doue ha Tad maguer da Jesus, ar c'haera enor a ouffe eun den da gaout. Guelit eta peguer caer ha peguer precius eo ar baourentez zantel dirag Doue ! . . . Peguer meulet eo gant ar Speret-Santel ! Sant Joseph en doa comprenet abred ar pris euz ar vertuz-ze, en deuz he c'haret hag he c'hasket mui eguet na gar tud ar bed an danveziou. Couscoude nag a bres a zo var ho gorre, o redeg du-ma du-hont evit caout madou ! Peguement a zismantr'

ho ners hag ho c'horv evit dont da veza pinvidik, hag allas ! gant an draze oll, an darn vrassa a chom paour en despet d'ho foan. Ne d'int ket euruz evel an den santel ha na red ket varlerc'h an aour ha tenzoriou an douar.

Adaleg he vugaleach sant Joseph en doa caret ha clasket ar baourentez zantel ; dre-ze ive en em gave euruz enhi. Ia, ar baourentez oa he denzor ; ober a ree he joa hag he c'hloar. He c'hlasg a ree en he zillad, en he vagadurez, en he lojeis, hag e peb tra. Kement he c'hare ma ne oa ket evit dispeg diouthi. Mez mar care sant Joseph ar baourentez, Mari he c'hare muioc'h c'hoaz, dre ma ouie e plije ar vertuz gaer-ze da Zoue.

Dre-ze pa arrujont e Bethleem, na gavont den d'ho loja, o veza ma oant paour hag ez eont da dremen an noz en eur c'hraou. An tri roue ho doa

roet offransou caer ha pinvidik d'ar Mabic-Jesus ; mez Mari ha Joseph ho rannaz e tre ar beorien. Pa oa presantet Jesus d'an templ, Mari ha Joseph en em lekeaz e reng ar re baour, o rei diou goulmig, eleac'h eun danvad evel ma ree ar re binvidik. Paour ez oant ha distag oa ho c'halon dioc'h traou an douar ; mez na oant ket o clasg bara : Mari ha Joseph a laboure evit gounid ho boed. Sant Joseph a vague he famil gant poan he zivrec'h. Penoz ho dije Mari ha Joseph caret an deveziou e compagnunez Jesus en em lakeet er baourentez evit dizalla an dud, evit ho distaga dioc'h traou an douar hag evit trei ho speret hag ho c'halon varzu an env ? O velet e calon Jesus eur garantez ker braz evit ar baourentez, e c'houzanvent gant joa an dienez hag ar goaperez : loden ar beorien er bed-ma.

Ia, sant Joseph a zo bet paour en

he vuez hag a zo maro er baourentez. Mez ma ez oa paour a vadou an douar, peguer pinvidik e oa a vadou an env !

Oh ! tud paour, deuet d'en em glem euz ho paourentez ha da damal an Ao'trou Doue, o velet sant Joseph, diskennet euz a famil ar rouaned, Pried da Vam Doue ha Tad maguer d'hor Zalver, o tremen eur vuez hir er brassa paourentez, e compagnunez Jesus ha Mari. Credi a rafot en em glem, o velet Jesus, Mari ha Joseph er baourentez ?

Paour oc'h, mez it da graou Bethleem ha guelit hag hen oc'h euz mui a zienez eguet ar Famil-Zantel ; couscoude Jesus, Mari ha Joseph n'en em glemont ket ; rag Jesus en deuz lavaret : Euruz oc'h, tud paour, rag rouantelez an env a vezo d'ehoc'h.

Ha c'hui, tud pinvidik, en em zizallit, rag Jesus-Christ en deuz lavaret : Goal reuz d'an dud pinvidik.

Tud pinvidik, distaguit ho calon dioc'h ar madou ; astennit ho torn da soulaji ar beorien, mar fell d'eoc'h plijout da Jesus, da Vari ha da Joseph.

O' sant Joseph, pedit evidomp ha roit deomp eun tamig euz ho carantez evit ar baourentez.

AR C'HUEZECVET DEVEZ A VIS MEURS

Humilite sant Joseph

Neb en em izelai, eme an Aviel, a vezo hueleet. Hoguen sant Joseph a zo bet savet huel gant Doue, pa eo bet choazet evit beza Pried d'ar Verc'hez hag evit beza Tad maguer da Vab unig an Tad-Eternel. Goude Jesus ha Mari, piou a gavimp huelloc'h ? Piou en deuz bet eun enor brassoc'h hag eur reng caeroc'h var an douar ? Ac'hano e tleomp credi en deuz bet zant Joseph eun humilite vraz meurbed. Tud humbl a zo bet a viscoaz.

var an douar evel m'her gueler en histor. Abraham, en he humilite, a lavare ne oa nemet poultr ha ludu e scoaz an Aotrou Doue. Miphibozeth en em lakee e reng eur c'hi maro ha ne zere ket outhan, emezhan, dibri oc'h taol he brinz. Ar roue David en em gave evel eun amprevan dirag Doue, ha sant Paul a lavare ne oa nemet ar scubadur euz ar bed. An dud humbl-ze a blij da Zoue ; gantho en deuz greet e peb amzer he vuzudou. Seul vrasoc'h eo bet ho humilite, seul gaeroc'h eo ar pezh en deuz greet Doue gantho. An Aotrou Doue a lavar ne rei ket he c'hloar da zen ; dre-ze an dud-ze en em lakee izel ar muia ma c'hellent, a dec'he kuit evit ma vije guelet gloar, madelez ha galloud an Aotrou Doue.

Mez ma zo bet tud humbl var an douar, n'euz bet nicun par da sant Joseph. Gouzout a ree e tiskenne euz

lignez ar rouaned, couscoude en em laca da vecherour hag en em zalc'h cuzet ar muia ma c'hell. Evidhan da veza pried d'ar Verc'hez Vari, na stlap ket kuit he rabot hag he esken. Choazet da c'houarn Map unig ann Tad Eternel, derc'hel mad a ra bepred d'he vicher calvez. Gouzout a ra eo carguet da c'houarn Jesus ha Mari, da zerc'hel leac'h an Tad Eternel var an douar ; gantho ema an emell ; guelet a ra an Elez o tont bep mare d'he gaout.

Anaout a ra n'euz den savet huelloc'h evidhan var an douar, goude Jesus ha Mari ; couscoude paour eo ato en he zillad, en he vagadurez hag en he lojeis. Ne glask ket chench stad na condition. Lavaret a c'helle da Jesus ha da Vari : Pa zoun savet ken huelgant Doue var an douar, neket red d'in labourad, neket dled d'in uza va nerz ha va iec hed evel an distera euz an dud.

Setu petra ho dije sonjet ha lavaret meur a hini en he blas. Mez ar zonzou-ze a zo pell dioc'h he speret. Eleac'h caout c'hoant da veva en he eaz ha da veza enoret gant an dud, abalaimour d'he reng huel hag enoruz, sant Joseph na glaske nemet an disprijanz ha na c'houlenne nemet tremen evit eur mecherour paour, o c'hounid he voued gant ar c'houezen euz he dal. Meur a hini, e plas sant Joseph, en dije en em gollet dre an ourgouil; mez hen a oa diazezet mad var an humilite ha na heane da renta gloar da Zoue e peb tra. Euruz en em gave oc'h heulia an exemplou caer a humilite, a baourentez hag a obeissanz en doa bepred dirag he zaoulagad e buez Jesus ha Mari.

O velet Jesus, Map unig an Tad Eternel, diskennet ken izel, ha Mari, Rouanez an env hag an douar, ker leun a humilite, en dije caret diskenn

beteg an douar. Pa deue an Eal da lavaret d'ezhan rei urz da Jesus ha da Vari da vont du-ma du-hont, en em gave estlamet o sonjal peguen dister oa evit commandi d'he Zoue ha d'he Rouanez. Gant pebez carantez e comze ouz Jesus ha Mari, pa en doa eun dra bennag da lavaret d'ezho! Oh! meur a vech en dije tec'het kuit dre humilite, ma n'en dije ket bet aon da vancout d'ar pez a c'houlenne an Aotrou Doue diganthan.

Ia, o velet an Itron-Varia o senti outhan, e lavare ive evel ma ree santez Elisabeth: Euz a beleac'h e teu d'ime an enor da velet mam va Zalver o tont davedoun? O velet Jesus o senti outhan, e lavare evel sant Perr: Aotrou, tec'hit diouzin, rag ne d'oun nemet eur pec'her; pe gant ar c'habiten soudarded: Aotrou, na zere ket ouzoun e teufac'h em zi.

Sant Joseph, roit deomp eun tamig

euz ho humilite vraz; grit ma carimp ive an disprijanz hag ar baourentez. Oh ! ma zoc'h euz eur reng huel; ma zeo ho kerent pinvidik, eleac'h m'en em gavit paour hoc'h unan, diskrit gant sant Joseph carout an humilite hag ar baourentez. Meulit Doue da veza ho tiscaret euz ar reng huel hag ho lakeet izel, ha da veza tennet ho tanvez diganeoc'h; rag er reng huel-ze ha gant ho madou ho pije en em gollet; eleac'h brema emoc'h en hent mad da vont d'ar Baradoz. Doue en deuz lavaret: Malheur d'an dud pinvidik ! rag ar madou a vir ouz calz a dud da ober ho zilvidiguez. Beniguit an Aotrou Doue: eur c'hraz caer en deuz great d'ehoc'h, pa en deuz ho lakeat henvel ouz Jesus, Mari ha Joseph var an douar.

Pa viot goapeet ha disprijet gant an dud, sellit ha guelit Jesus, Mari ha Joseph: n'oc'h ket guelloc'h evitho.

Piou couscoude a zo bet izelloc'h evitho var an douar ?

Pa zantfot ho calon o c'houeza gant an qurgouil, sonjit e sant Joseph; peguer humbl, peguen izel eo bet e compagnunez Jesus ha Mari.

Sant Joseph, skuer a humilite, pedit evidomp.

AR SEITECVET DEVEZ A VIS MEURS

Fizianz sant Joseph e Doue

Mar d'eo bet braz feiz ha carantez sant Joseph, he fizianz e Doue a oa par d'ezho, evel m'her gueler er merkou anat en deuz roet epad he vuez. Anaout a reaz abred eo mad senti ouz an Aotrou Doue, lacaad he oll fizianz enhan hag en em lezel da veza renet ganthan e pep tra; rag Doue a zo eun tad mad ha na glasg nemed eurusded he vugale.

Pa fell da Zoue gouzout hag hen eo

caret ganeomp, hen a daol eun denvalijen mysteriuz var ar pezh a c'houlenn euz hor perzh, ha pa vel hon euz fizianz enhan ha ne c'houlennomp ket guelloc'h eguet senti outhan, en em hast da zigas ar sclerijen ha da rei deomp an dorn.

Setu ar pezh a veler e buez sant Joseph. Pa oa galvet gant Doue da veza pried d'an Itron-Varia, Joseph na revuz ket ar choaz e oa greet anezhan, petra ben-nag en dije caret chom hep dimizi.

Mez o velet e felle da Zoue he gaout e stad ar briedelez, ne zaleaz ket da zenti. Ne oa ket en em faziet : clevet a reaz euz a c'hinou Mari e doa en em vouestlet da Zoue corv hag ene hag e tleje chom bepred guerc'hez. Ober a rejont vœu da veva an eil gant eguile evel daou Eal epad ho buez.

Pa c'herruaz myster an Incarnation, Joseph en em gavaz nec'het braz o

velet he bried brazez. Ne ouie ket penoz e oa arruet kement-se. Gouzout a ree ez oa he bried leun a furnez hag a zantelez; couscoude red e oa d'ezhan credi ar pezh a vele dirag he zaoulagad. Ne ouie ket petra da ober : ne felle ket d'ezhan dizenori Mari oc'h he discleria hag oc'h he c'has kuit. Aoun en doa da veza tamalet gant Doue o chom ganthi; rag eun den just e oa, eme an Aviel. Petra rei eta Joseph en he encrez ? Ober he zonch da dec'het kuit heb gouzout dare da zen, heb lavaret guer. He fizianz a zo e Doue; lezel a ra an affer etre he zaouarn. Ne fell ket d'ezhan en em emellout : guelloc'h e cav en em denn kuit ha beza divlam.

An Aotrou Doue na zaleaz ket da zont d'he denna a boan; digas a ra eun Eal da lavaret d'ezhan : « Joseph, map da Zavid, n'ho pezit ket aon da viret Mari ho pried; rag ar map e

deuz concevet a zo furmet dre vertuz ar Speret Santel. Ia, lacaad a rei er bed eur map da behini e reot an hano a Jesus, rag hen a zaveteo he bopl euz he bec'hejou. »

Evit heulia gourc'hemen an Impalaer August e oa red d'ezhan mont euz a Nazareth da Vethleem, ha Mari a ieaz ganthan.

Eur pennad goude e oa lavaret d'ezhan mont dioc'h-tu d'an Egypt ha chom eno ken e vije digaset kelou d'ezhan da zont en dro. A benn eun nebeud bloaveziou goude, e teuz canad d'ezhan da zistrei adare d'ar Jude. C'hui gav d'eoc'h Joseph en em jalo o clasg gouzout penoz e rei he veach, piou he vago hed an hent ha penoz e cavo peadra da vaga Jesus ha Mari, pell dioc'h he vro ha dioc'h he anaoudeguez? Oh ! n'her grei ket. Marteze e cav d'ehoc'h e lavaro eo paour, eo tenn an amzer, eo hir an hent, eo

dister ar c'hrouadur ha neket eaz d'ar Verc'hez Vari bale keit-se? N'he lavaro ket ken nebeut. Aoalc'h eo evit Joseph clevet urz an Aotrou Doue, ha setu hen en hent. He fizianz a zo e Doue. Gouzout a ra pa c'houlenn Doue an traou-ze diganthan, hen en em garg euz he oll ezomou. Gouzout a ra en deuz affer ouz eun tad mad, hag he Brovidanz a daolo evez enhan.

Pebez fizianz ! Peguen nebeud a dud, allas ! en em diol ken dibreder e tre divrec'h madelez an Aotrou Doue !

Sant Joseph a c'hello talvout da scouer d'an oll e peb amzer. Gouzout a ra e piou en deuz lakeet he fizianz : an hini en doa lavaret da Abraham en em lacaad en hent, heb lavaret d'ezhan pegueit e vije padet he veach, a dleje ive beza d'he heul e pep leac'h. Credi a ree an hini a ra eur viscant ker caer d'ar bokedou, en dije dalc'het dillad d'ezhan ; an hini a vag al

labouset euz an ear, n'en dije ket hel lezet heb tam. N'en deuz aon ebet na raog ar boan, na raog an drubuil, na raog an dienez. Anaout a ra madelez ha galloud an Aotrou Doue ; fizianz en deuz enhan, abalamour ganthan ez eo casset ; evidhan ez a e pep leac'h ha dre garantez evidhan. Jesus ha Mari a zo ganthan : piou a helfe noazout d'ezhan ?

Oh ! ni a ve euruz ma hor befe ive eun tamig muioc'h a fizianz e madelez an Aotrou Doue. Ar peoc'h a ve en hor speret hag ar joa en hor c'halon, o c'houzout emomp bepred didan daoulagad hon Tad ; e labouromp evit Doue ; e sentomp oc'h Doue, hag e reomp ar pez a c'houlenn diganeomp.

Sant Joseph, goulennit evidomp digant Jesus ha Mari eun tamig euz ho fizianz e Doue.

AN TRIVAC'HVET DEVEZ A VIS MEURS

Santelez sant Joseph

Sant Joseph en deuz bet grassou brâz digant Doue. Ar c'hraz hag ar virionez, eme an Abostol sant Ian, a zeu digant Jesus-Christ ; oll hon euz bet grassou euz he leunder, euz he larguntez. Mez evelato, muioc'h en deuz an eil eguet eguile, ha nicun ac'hanomp n'en deuz leac'h da glem na da damal an Aotrou Doue, pa ro deomp muioc'h eguet na zo dled. Evit madou an douar, Doue n'en deuz ket roet kement d'an eil evel d'eguile ; evit madou ar c'hraz ken nebeud. Petra bennag e punsomp oll euz ar memez mamen, da lavaret eo euz leunder Jesus-Christ, an dour a vuez hag a zilvidiguez, ar re couscoude a zo an tosta d'ezhan, her gra gant mui a larguntez. Ar re a chom bepred e palez

ar rouaned hag a zo bep mare e servich ar roue, ho deuz ar muia perz en he vadelez, en he vadou hag en he enoriou. Seul vui ive en em gavit dirag an heol, seul vui a sclerijen oc'h euz ; seul dostoc'h en em lakeer d'an tan, seul vui a zanter an domder.

Ene Jesus-Christ, eme sant Thomas, en doa calz mui a c'hrassou eguet an oll grouadurien al, dre ma oa unanet ar guella, an tosta, ar starta gant divinite Mab Doue, digant pehini e teu an oll c'hrassou.

Gouzout a reomp petra eo bet sant Joseph var an douar. Tremenet en deuz var dro tregont vloaz gant Jesus, er memez ti ganthan, oc'h he servicha. Roet en deuz lojeiz d'ezhan ; he vaguet hag he visket en deuz ; he zouguet en deuz ha saveteet en deuz bet d'ezhan he vuez. An enor en deuz bet da zouguen beteg an hano caer a Dad

da Jesus ha d'he c'houarn : Jesus en deuz sentet outhan.

Ansaout a dleomp eta en deuz bet digant Jesus mui a c'hrassou eguet nicun euz an oll dud santel a zo bet var an douar. N'euz nemet Mari he bried hag e ve bet trec'h d'ezhan. Sant Joseph, eme sant Isidor, o veva gant Jesus, a oa bepred e tal ar feunteun euz a c'hrassou an Aotrou Doue. Goude Mari, hen a zo bet an tosta da Jesus hag a zo bet unanet ganthan ar muia, ar guella ma c'heller dre he reng a Dad maguer hag a c'houarnour.

Piou a gredfe lavaret n'en defe ket great Jesus-Christ evit sant Joseph ar pez a ra ar rouaned evit tud ho falez. Piou a gredfe lavaret e ve bet manket Jesus a vadelez, a anaoudeguez vad hag a garantez evit sant Joseph he Dad maguer ? Hen pehini eo ar garantez memez hag ar vadelez heb fin ; hen pehini en

deuz caret an holl dud, he vourevien zoken, bete mervel evitho var eur groaz ; hen pehini na lez ket heb recompanz eur verenad dour, roet d'ar paour en he hano!! Oh! ia, he garantez evit an dud hag he anaoudeguez vad evit madelez sant Joseph a oa aolc'h evit lacaat Jesus da rei d'ar patriarch santel-ma an dibab euz a c'hrassou an env ; mez eun dever oa evit Jesus santelaad he Dad maguer.

An eil ferson euz an Drinded, o tont var an douar, a guemeraz sant Joseph evit he dad, evit he c'houarn, evit ma vije bet henvel ouz peb hini ac'hanomp e peb tra, nemet er pec'het. En eur lacaat sant Joseph er reng huel a dad hag a vestr varnezhan, Jesus a guemeraz an oll zeveriou ho deuz ar vugale e kenver ho zad. Hoguen ar vugale a dle enori ho zadou, ober vad d'ezho, pedi evitho. Jesus ive en deuz greet an deveriou-ze e kenver sant

Joseph, he Dad mager, hag her great en deuz gant eur zantelez heb he far. An Aviel a zo en em garguet d'hen diskouez deomp, pa lavar en eur gomz euz Jesus : « Hag a sente outho, » da lavaret eo, ouz Mari ha Joseph.

Oh! piou a c'hello neuze lavaret ar grassou en deuz bet sant Joseph dre bedennou Jesus ? Pebez santelez en deuz lakeet e ene he Dad maguer!

Oc'hpenn, sant Joseph oa pried d'ar Verc'hez Vari, da Vam an oll c'hrassou. Dever eur pried eo pedi evit he fried. Oh! Mari a anave he oll deveriou, ha neket bet manket d'ho ober penn-dabenn. Ia, pedet en deuz evit Joseph he fried, hag hen ober a ree gant joa ha gant ar brassa plijadur. Oh! nag a c'hrassou a ziskenne bemde var ene sant Joseph!

Mez ma ez oa braz hag evel heb niver ar grassou a ziskenne var ene sant Joseph evel ar gliz euz an env, dre

bedennou Jesus ha Mari, ne d'int ket couezet etouez an drez hag ar spern, na var ar c'herec, na var an hent meur. En douar mad e couejont, ha douguet ho deuz frouez a zantelez, frouez a vuez, druz ha puill. Sant Joseph a ouie ho la-caat da dalvout evit gloar Doue hag he zilvidiguez.

E scol Jesus ha Mari, ne oa ket evit mancout da greski bemde er zantelez ha da vont euz an eil vertuz d'eben beteg an huella perfection. Jesus ha Mari a lakee ho joa hag ho flijadur o carga ene sant Joseph a bep seurt fleur a vertuz hag a zantelez; rag gloar hag enor Jesus oa caout ar zantela euz an oll dadou, hag evit Mari ive, he gloar hag he enor oa caout ar zantela euz an oll briejou.

Neket eta eun dra zouezuz ma cle-vomp calz a dud santel, calz a zoctored gouizieg o lavaret en deuz bet sant Joseph eur zantelez heb he far : goude

Jesus ha Mari, n'euz ket bet var an douar den santeloc'h evidhan. Sant Ian Badezour a zo meulet gant Jesus evit he zantelez, evel m'her gueler en Aviel. Sant Ian Badezour ne oa nemet eur mignon da Jesus, eleac'h sant Joseph a zo he Dad maguer. Oh ! nag a guemm e tre eun tad hag eur mignon ! Sant Ian oa casset da gomez an hent da Jesus, eleac'h sant Joseph a zo carguet d'he zouguen, d'he c'houarn, d'he vaga, d'he ziframa euz a gounar Herodez ; en eur guer, da zerc'hel leac'h a dad da Jesus.

Sant Paul a lavar, en he lizer d'ar gristenien a Gorinth, en deuz an Aotrou Doue lakeet an Ebestel er reng kenta en Ilis. Etouez ar gristenien n'euz ket huelloc'h evitho.

Mes sant Joseph a zo en eur reng a gostez. Evel Pried d'ar Verc'hez Vari ha Tad maguer da Jesus-Christ, ar patriarch santel-ma en em gav evel

dibabet, dispartiet a vesg an oll dud ha savet en eur fœson bennag, en urz caer euz a vyster braz an Incarnation.

Mont a reer zoken beteg lavaret ez eo bet santeloc'h eguet an Elez ; rag pehini euz an Elez, daoust d'ho zantelez, en deuz bet urz da gommandi da Jesus ha da Vari, d'ho Roue ha d'ho Rouanez, evel en deuz bet sant Joseph. Pehini euz an Elez en deuz gallet morse lavaret da Jesus : C'hui eo va Mab ? N'euz ken nemet an Tad-Eternel, ar Verc'hez Vari ha sant Joseph ho deuz bet an enor-ze, enor dreist an oll enoriou.

Sant Joseph, pedit evidomp.

AN NAONTECVET DEVEZ A VIS MEURS

Maro sant Joseph

Jesus-Christ, en eur zont var an douar, a felle d'ezhan hor zavetei dre ar boan ; dre-ze en deuz bevet e creiz

ar boan hag ez eo maro var ar groaz. Roet en deuz deomp ar scouer e peb tra. Hen a fell d'ezhan ez afemp dre ar me-
mez hent : dre ar boan, dre ar groaz.
« Neb a fell d'ezhan dont d'am heul, eme Jesus, a dle renonz d'ezhan he unan, kemer he groaz, he douguen bemde bemde ha bale var va lerc'h. » Ne espern den euz ar boan, na just na pec'her : kement hini a zo eet d'ar Baradoz, a zo eet dre an hent-ze, dre ar boan, dre ar groaz, daoust d'he zantelez. He vrassa migoned ho deuz ar brassa loden en he groaz. An Ebestel, ar Verserien, ar Confessorred, ar Guerc'hezed, oll int eet dre an hent-ze, hag ar re ho deuz bet ar brassa poaniou hag ho gouzanvet ar guella, ho deuz ar c'haera curunen. Ar Verc'hez Vari ha sant Joseph, daoust d'ho zantelez, ne d'int ket bet espernet.

Sant Joseph en deuz bet he lod euz a drevel hag, euz a boaniou ar vuez-

ma. Disprijet eo bet, poan ha dienez en deuz bet da heul Jesus ha Mari var an douar. Red ez eo bet d'ezhan ive tremen dre ar maro evel oll vugale Adam. Uzet dre ar boan, dre al labour ha dreist peb tra dre an tan euz ar garantez vraz en doa evit an Drinded santel, evit Jesus ha Mari, e kuitaaz ar vuez hirr ha poaniu a dremenaz var an douar. Eur zant hag en doa caret kement epad he vuez, eme sant Frances a Sales, na c'helle mervel nemet dre ar garantez.

Epad he vuez, sant Joseph a oa bet leun a vadelez hag a garantez evit Jesus ha Mari. Ne esperne nag he iec'hed nag he ners evit caout peadra evit ho ezomou. Ne esperne netra evit ober plijadur d'ezho. Jesus ha Mari d'ho zro a ziscouezaz d'ezhan ho anaoudeguez vad hag he bae dre ho c'harantez. Epad he glenved, Jesus ha Mari na refuzent d'ezhan netra euz a

guement a c'helle ober vad d'ezhan ; he zervicha a reent gant eun aked hag eur vadelez da estlami an *CElez*. Madelez Jesus ha Mari evidhan a ree muioc'h a blijadur d'ezhan eguet an oll draou crouet ; ho mouez hag ho c'homzou a oa doussoc'h d'he ziouscouarn eguet can melodiuz an *CElez*. Ho c'homzou a ie doun en he galon hag a zistane he boan hag he anken.

An Itron Varia na eane oc'h he gonforti hag oc'h he frealzi ; pidi a ree da amzer a amzer an Aotrou Doue da zistana he boaniou hag hel lacaat a ree da ober actou euz ar c'haera vertuziou, evit creski he recompanz.

A hendall, Jesus a oa leun a vadelez evit sant Joseph ; lacaat a ree en he galon ar joa, ar peoc'h hag eur fizianz leun a zousder ; rei a ree d'ezhan grassou var c'hrassou gant larguentez hag heb muzul ; ha creski a ree he nerz hag he gourach da c'hou-

zanvi he boaniou evit gloar Doue.

Beilla a reent en dro d'ezhan hag en noz hag en deiz; dre ma tostae an heur diveza, ne guiteent ket he vele a boan. An eil pe eguile en em gave bepred en he guichen. Sant Joseph ho zrugarecae aliez euz ho madelez; mez santout a ree eur boan vraz oc'h en em zispartia dioc'h Jesus ha Mari: kement ho c'hare. Ho fidi a reaz d'he veniga abars kuitaad an douar, ha goude en doa bet ho benoz, e rentaz he ene santel d'he grouer: mervel a reaz e tre divrec'h Jesus ha Mari.

O maro santel! maro euruz ha precuz! Mervel e tre divrec'h Jesus ha Mari! Ar c'haera graz a ouffet da gaout. Ar c'hraz-ze a zere ouz sant Joseph, hen pehini en doa bevet oll e Doue hag evit Doue.

O sonjal e maro euruz sant Joseph, o caout en he guichen Jesus ha Mari, sant Bernardin a Sienn na ouie penoz

comz euz ar joa, euz an dousder hag euz ar sclerijen dudiuz a leunie an ene-ze, beniguet dreist an oll.]

Evit meuli sant Joseph, eun den devot a lavar ar c'homzou-ma: « An Elez a reaz d'ezhan eur gurunen gant bokedou lys, evel d'ar pried guerc'h; eur gurunen gant bokedou roz, evel d'ar c'henta euz ar Confessorer; eur gurunen aour, evel da Dad maguer hor Zalver; eur gurunen arc'hant, evel da Bried hor Rouanez; eur gurunen hag eur vantel steredennuz, evel da eur Zant heb he bar dre he vertuziou hag he zantelez. »

An Elez a oa carguet gant Doue da ren he ene santel d'al leac'h en em gave eneo ar Batriarched santel hag an oll dud just, maro e graz Doue abaoe ar penn kenta euz ar bed.

O pebez joa ha pebez levenez a oa el leac'h-ze, etouez an eneo mad-ze, pa c'herruaz sant Joseph da lavaret

d'ezho en doa bevet tregont vloaz gant Jesus hag he vam zantel ; e oa tost ho amzer da achui el leac'h-ze ; e vije heb dale digor doriou ho frizon hag e eanje ho hirvoudou ; hag e vije deuet Jesus-Christ d'ho c'herc'hat ha d'ho c'hass ganthan d'ar Baradoz da velet Doue, d'he veuli ha d'he garet !

Sant Joseph, petit evidomp brema ha en heur euz hor maro. Consolit an eneoù keaz a zo c'hoaz hirio an deiz er Purcalor.

UGUENTVET DEVEZ A VIS MEURS

Sant Joseph en he dremenvan. Miret eo bet ous tromplerez an droug-speret

An eneoù, en ho zremenvan, en em gav en eur gombat tenn meur-bed, hag eun danger braz a zo evitho en heur spontuz-ze. Tenn eo en em zistaga euz ar vuez, euz a draou an douar, ha dicez eo en em zizober euz

teichou fall ar galon. Ia, ar maro a zo scrijuz evit an den ; ar sacrifis diveza a zo c'houero hag ar poaniou a zo garo. Peb tra a stourm neuze euz an den keaz : he galon gant he zeichou fall, ar bed gant he dromplerez hag an droug-spered gant he oll finessaou.

Bez a zo neuze eur proces braz, euz a behini e tepant ar vuez pe ar maro. Neuze e vezo douguet ar zetans diveza evid ar vuez eternal pe evid ar maro eternal ; evid an euruzded pe evid ar malheur eternal.

Pa en em gav eur re bennag en he glenved diveza, pa dosta ar maro out-han, Satan, gant he zroug-perejou, o velet n'euz ket amzer da goll, en em zastum en dro d'ezhan hag e implijont ho foan hag ho oll ijin evit her c'holl. En em glevout a raint oll evit dont a benn anezhan ; na eanint da rodal var he dro evel eur vanden

bleizi. Studia a reont ar stad e pehini en em gav ene ar c'hlanvour; clasg a reont anaout he dechou fall, da be seurt pec'hejou eo douguet, dre he du e vezo an cessa dont d'he goll, ha pa ho deuz her c'havet, e saillont en dro dezhan gant droug ha counar.

Lavaret a raint d'ar re a zo stag oc'h ar vuez, n'euz danger ebet evitho, n'e-maint ket o vont da vervel, ho deuz amzer aoalc'h d'en em brepari, hag ober a raint peb tra evit miret ne vezint difaziet hag evit ma varvint heb ho sacramanchou.

D'ar re zo lizereg da dostaad ouz ar zakramanchou e lavarint : Neket red caout an traou-ze, na viot ket guelloc'h; pe ho sponta a raint, o rei d'ezho da gredi ne vezint ket evit ober ho c'honfession; ho lacaat a raint da gaout mez oc'h ansaout ho fec'hejou ha d'ho nac'h.

Setu eun den hag en deuz dastumet

madou, mez dre eun hent fall int deuet : an droug-speret a glasco an dro da ober d'ezhan nac'h he laeronsiou ha da chom heb ho renta d'ho ferc'hen. Eun den ourgouilluz a vezo aliet gant-han da lavaret d'he guerent ober d'ezhan, goude he varo, eun interamant caer, eur bez pinvidik ha calz a draou al; mez netra evit he ene, netra evit ar beorien, netra evit gloar Doue. An den-ze, ma na gar dioual, a varvo gant leiz he galoun a orgouil. Setu eun den piz : lavaret a raint d'ezhan : Dalc'h peg d'ho madou, hag an den-ze n'en devezo ken zonzj nemet euz he arc'hant. Mervel a rei marteze gant he ialc'h didan he benn vele.

An den lubrik a gavo bepred he speret, leun a zonzjou louz ha mezuz, ha ma na gar dioual, e varvo gant he galon stag outho.

An traou en deuz caret ha clasket peb hini epad he vuez, a zervich d'an

droug-speret evit coll an eneoù en heureuz ar maro. An techou fall en deuz bet an den a zo ken aliez a zor evit an droug-speret da vont tre en he ene, evit he zotra hag evit he garga a denvalijen. Dre eno e teu a benn da goll an ene, oc'h ober d'ezhan disprijout grassou Doue hag o viret diouthan caout keuz d'he bec'hejou.

Eun dra a zo dreist an traou al hag a zervich calz d'an droug-speret evit coll an eneoù : rei da gredi d'ar c'hlan-vour n'ema ket o vont da vervel, en deuz amzer aoalc'h da lacaat urz vad en he goustianz hag e vezo abred aoalc'h d'hen ober pa vezo pare.

An dud lizereg da dostad ouz ar zacramanchou en ho iec'hed ho deuz leac'h da grena ; rag Doue, en he justis, a revus aliez d'ar re-ze ar c'hraz da gaout ar zacramanchou en heur diveza, ha c'hoaz mar ho deuz ar c'hraz-ze, a zo danjer evitho n'ho recevint ket evel

m'eo dled. Epad ho iec'hed ho deuz disprijet grassou Doue ; Doue ive d'he dro a c'hell ho disprijout ha revuz d'ezho, en heur diveza, ar pezh ho deuz disprijet en ho iec'hed.

Neket ar bec'herien hebken hag ho deuz da stourm oc'h an droug-speret en ho zremenvan ; ar re zantela ho deuz ive traou aoalc'h da ober evit dont a benn anezhan. Ar brassa Sœnt ho deuz da c'hourenn er mare-ze.

Sant Joseph, en he dremenvan, a zo bet espernet gant an droug-speret. Penoz en dije credet tostaad oc'h sant Joseph ? Jesus ha Mari oa bep mare en he guichen ha maro eo e tre ho divrec'h. Ho galloud a zo trec'h d'he c'halloud. An hano santel a Jesus hag a Vari a zo cre aoalc'h evit ober d'ezhan kemer an tec'h. Jesus ha Mari ho devoa re a garantez evit sant Joseph evit lezel an droug-speret da nozout d'ezhan.

An Aotrou Doue en deuz roet da zant Joseph ar c'hraz hag ar galloud da zifenn eneb an droug-speret ar re her ped en ho heur diveza. He hano santel en deuz an nerz da sponta ar sperejou mil-
liguet-ze.

Ar re zaonet ho devezo eur c'heuz braz da veza manket da c'houlenn sicour digant sant Joseph en ho zremenvan ; rag ma ho dije her great, ho dije cavet ho zilvidiguez er sicour euz he bedennou. He c'halloud a zo cre : Jesus ha Mari n'ho deuz netra da revuz da zant Joseph. Sant Joseph na c'houlenn ket guelloc'h eguet astenn an dorn da neb her ped a vir galon ; rag he vrassa plijadur eo sicour an oll da ober ho zilvidiguez ha da vont da c'hloar Doue.

Sant Joseph, pedit evidomp hag en heur euz hor maro hon difennit eneb an droug-speret.

AN UNAN VARN'UGUENT A VIS MEURS

Sant Joseph resuscitet

Na caer ez oa evit sant Joseph an devez ma tiskennaz Jesus el limbou, el leac'h ma oa eneo an dud just, na braz ez oa ive he joa ! Selaouit ar c'homzou a laca sant Frances a Sales e guinou sant Joseph d'an ampoent ma cavaz Jesus : « Pa ziskennaz Jesus-Christ el limbou, eme sant Frances, sant Joseph a lavaraz d'ezhan : Ho ped sonch, Aotrou, me ho ped, pa teuac'h euz an env var an douar, me ho tiguemeraz ebars em zi hag em famil, ha kerkent ma oac'h ganet, me ho kemeraz e tre va divrec'h : brema pa zistroit d'an env, va c'hassit ganehoc'h ; me ho tiguemeraz em famil, diguemerit ac'hanoun en hoc'h hini ; ho touget am euz e tre va divrec'h, brema kemerit ac'hanoun en ho re ;

va renit d'ar vuez eternal evel am euz ho renet epad ho puez var an douar. »

Sant Joseph, dioc'h ma creder peurvuia ha ma lavarer, a zo unan euz ar re a resuscitaz gant Jesus-Christ d'ar zul Fask. Calz a Zœnt a resuscitaz en deizze, evel m'hel lavar sant Vaze en Aviel: « Ar beziou a zigoraz, emezhan, calz corvou Scënt, hag a oa e cousg ar maro, a resuscitaz ; hag o veza savet euz ho beziou goude resurrection hor Zalver, a ziredaz d'ar guc'er zantel, e leac'h ez int bet guelet gant calz tud. »

Penez credi e ve chomet etouez ludu ha poultren ar maro an divrec'h-ze ho deuz douguet ken aliez hag epad keit amzer hor Zalver benignet ? Penez credi n'en defe ket Jesus-Christ casset ganthan d'an envou ar c'horv santel en deuz he zifennet hag he zioualet, pa oa guech all var an douar.

Da zevez ar Iaou-Bask, pa zavaz

Jesus-Christ d'an env, sant Joseph a oa, leun a c'hloar, e penn ar vanden euz an eneou santel en em gave en dro d'hor Zalver, ha Jesus, pa azezaz evit ato en tu deou d'he Dad-Eternal, a gurunaz he Dad maguer hag hel lakeaz da azeza, eme sant Bernardin a Sienn, var an tron kenta goude an hini a vire d'he Vam zantel.

Eur greden zantel eo, eme sant Bernardin, en deuz ive Jesus, Mab Doue, resuscitet sant Joseph da zul Fask, evel m'en deuz diguemeret en env he vam zantel gant he c'horv hag hec'h ene, leun a c'hloar.

Credi a c'hellomp eta gant sant Bernardin, gant sant Frances a Sales ha gant calz a re al, ema brema sant Joseph en env, corv hag ene ; rag ar greden-ze neket condaonet gant an Ilis.

Mar d'eo bet sant Joseph cuzet var an douar, mar d'eo bet izel, ma en deuz bet

nebeud a enor hag a c'hloar digant an dud en he vuez ; brema eo savet huel, eo leun a c'hloar hag a enor. Azezet eo e kichen ar Verc'hez Vari, he bried, var eun tron caer ha skeduz.

Ma ne vije ket bet ressuscitet sant Joseph, e vije cavet, me a gred ervat, he relegou en eun tu bennag ; rag an Ilis zantel e deuz bet a viscoaz eur respet braz evit relegou ar Zoent hag ho miret a ra evel he c'haera tenzor. Eun dra souezuz eo e ve cavet ha miret relegou santez Anna, sant Ian-Badezour, an Ebestel ha calz a re al ; eleac'h relegou sant Joseph ne d'int cavet neb leac'h.

Caout a reer eun darn euz ar pezh a zo bet servichet d'ezhan ; mez ne gaver neb leac'h an distera tra euz he gorr santel.

An Tad Jacquinot a lavar e oa en he amzer en eur chapel e Chambery, eur vaz hag a oa bet servichet da zant

Joseph, hag e veljer ive, en ilis Sant-Laurenz e Joinvill, he c'houriz, goarnisset gant eur blouk carn olifant. Ar gourizze oa deuet euz an Douar Santel gant ar Prinz Joinvill, pa oa bet er vro-ze gant sant Lois, roue a Franz. Miret a reer c'hoaz e Rom, en ilis an Itron-Varia, cavel ar Mabic-Jesus, great gant sant Joseph, hag e ilis Santez-Anastasia, e viret ive eun tam euz he vantel. En eur gœr hanvet Perouz, en Toscan, e veler ive ar bizou a zervichaz da sant Joseph, pa eureujaz d'an Itron-Varia : ne d'eo nag aour nag arc'hant, mez great eo euz eur meen ha n'ouzer ket he hano.

O sant Joseph beniguet, c'hui pehini hoc'h euz bevet keit amzer gant Jesus ha Mari ; c'hui pehini a zo maro e tre ho divrec'h hag a zo brema gantho en env e creiz ar joa, azezet var eun tron caer, oh ! en han Doue, pedit evidomp. Sicourit ac'hanomp e

creiz hor poaniou hag oll drubuillou ar bed. Difennit ho pugale, ho mignonet eneb oll fallagriez ar bed ha counar an droug-speret, ne eanont da ober brezel deomp, o clasg hon tenna divar an hent mad hag hor sleja d'an ifern. Ah! euz a lein an env, euz ar Baradoz, grit, m'ho ped, eur zell a druez var an Ilis gatholic, astennit an dorn deomp. Roit deomp ar feiz, an nerz hag ar c'hraz da drec'hi hon enebourien ha da arruout ive er Baradoz e penn hor beach poaniuz.

AN EIL VARN'UGUENT A VIS MEURS

Gloar sant Joseph er Baradoz

Neket deomp-ni eo, evit guir, da verca he reng da bep hini e rouantelez an envou : da Zoue hep ken oa da boeza ar sperejou, evel ma lavar ar Scritur Sacr. Couscoude pa sonjomp eo sant Joseph Pried Mari ha Tad ma-

guer da Jesus ; en deuz ho gouarnet, ho renet, roet an urz d'ezho hag ho deuz sentet outhan epad keit amzer ; ne d'omp ket evit miret da gredi en deuz eur reng huel meurbed er Baradoz.

Lavaret a reer ouz peb hini euz ar Zænt : « N'euz ket bet he bar da viret lezen Doue. » Mez sant Joseph, neket lezen Doue heb ken en deuz miret, neket zoken an Doue en doa roet al lezen, en deuz miret ; mez roet en deuz oc'hpenn al lezen d'ezhan : commandet en deuz da Jesus ha Jesus a zente outhan. An enor da c'hourc'hemen da Jesus ha da Vari a zo dreist an oll enoriou. Goude an enor da veza Mam da Zoue, na velan ket eun enor al brassoc'h evid ar grouadurien.

Pa en deuz bet sant Joseph var an douar eur reng ken huel hag eun enor ker braz, e tleomp credi eo savet huel meurbed er Baradoz. Sant Paul, savet bete gorre an envou, a lavar : Lagad

an den n'en deuz morse guelet, nag he scouarn clevet, nag he galon santet netra hag a dostafe oc'h an euruzded en deuz prepalet an Aotrou Doue evit an distera euz he Zœnt. Mez mar d'eo ker braz ha ker caer recompanz peb hini euz ar Zœnt, petra a vezo eta recompanz sant Joseph, ker caret gant Jesus ha Mari? Piou a c'hello neuze lavaret gloar ar Patriarch santel-ma er Baradoz? Dre-ze ive sant Bernardin a Sienn n'en deuz ket aoun o lavaret en deuz sant Joseph en env ar reng kenta goude Mari. « E leac'h ma vezin, eme hor Zalver, e vezo ive va zervicher. » Credi a dleomp eta, eme Gerson, an hini a zo bet, goude Mari, an tosta da Jesus var an douar, a dle beza an tosta d'ezhan en env. Goude Doue, d'an Itron Varia a dleomp, eme Cornelius a Lapide, ar brassa enor, ha goude Mari, sant Joseph a dleomp enori ar muia.

« Na dleomp ket discredi, eme sant Bernard, en defe Jesus-Christ refuzet da zant Joseph en env ar mercou euz he zoujans hag euz he garantez, goude m'en devoa roet d'ezhan eur reng ken huel var an douar ha bet evidhan ar respet braz hag ar garantez a dle eur c'hrouadur da gaout evid he dad. Oh! nan; en eneb an doujanz hag ar garantez-ze en doa Jesus evit Joseph, n'ho deuz great nemet creski en env. »

An den a zo bet leal, eme ar Speret-Santel, a vezo meulet meurbet; hag an hini a zo mirer he Aotrou a vezo carguet a c'hloar. Sant Joseph a zo bet leal e peb tra; miret ha diouallet en deuz he Aotrou, Jesus fiziet enhan. Dre-ze 'ta eo meulet en env ha carguet a c'hloar.

« Piou eo ar zervicher leal ha fur, eme Jesus en Aviel, a oa carguet gant he vestr da c'houarn tud he di ha da rei d'ezho ar vagadurez e mare? »

Eurus ar zervicher-ze a vezo cavet gant he vestr, en distro, oc'h ober evel-ze. E guirionez hel lavaret a rann d'ehoc'h, lacaat a rai e tre he zaouarn an emell euz he oll vadou. » Sant Joseph a zo bet henvel oc'h ar zervicher leal ha fur-ze, carguet gant Doue, he vestr, da c'houarn tud he di ha da rei da Jesus ha da Vari ar vagadurez d'ar mare. Carguet eo bet da c'houarn Jesus ha Mari. Cavet en deuz dre he boan hag he labour peadra d'ho maga, ha ne deuz ket manket boed d'ezho e mare ebet. Cavet eo bet gant Doue, he vestr, oc'h ober kement-ze; rag n'en deuz ket kuitteet epad he vuez Jesus ha Mari hag e tre ho divrec'h en deuz rentet he ene santel d'he grouer. Jesus eta, he vestr mad, neket manket d'he c'her : hel lakeet en deuz da emellout var he vadou.

Jesus a lavar ive, e Aviel sant Lucas ; « Roit hag e vezo roet d'ehoc'h ;

roet e vezo d'ehoc'h muzul mad, mac'het hag heijet, bete ken a fenno dreist ar bord ; rag muzulet e viot gantar memez muzul ho pezo muzulet ar re al. » Sant Joseph n'en deuz refuzet netra da Jesus na da Vari. Roet en deuz d'ezho he boan, he amzer, he iec'hed, he nerz hag he vuez. Muzul mad en deuz roet, ha Doue ive d'he dro en deuz roet d'ezhan muzul mad, leun ken a fenn.

Da zant Joseph, dreist an oll, en deuz lavaret an Aotrou Doue ar c'homzouma euz an Aviel : « Mad, mad, servicher mad ha leal, dre ma oud bet leal en traou dister fiziet en oud, me da lacai da emellout var traou braz : deuz tre e joausded da Aotrou. »

Braz eo, evit guir, ar grassou en doa bet sant Joseph ; braz eo he garg da c'houarn Jesus ha Mari ; braz eo ar joa en deuz bet o veva gantho, daoust d'he boan ha d'he encrez ; mez

kement-se oll a zo dister e scoaz gloar ar Baradoz, madou an env hag he reng huel ar bed al.

Jesus a lavar en Aviel : « Neb ho ti-guemer, va diguemer ; neb va diguemer, a ziguemer an hini en deuz va digasset. Neb a ziguemer eur prophet, evel eur prophet, en devezo recompanz ar prophet, ha neb a ziguemer eun den just, evel eun den just, en devezo recompanz an den just. Neb a roi heb ken eur verened dour ien da eva da unan euz ar rezistera euz va Diskibien, na chomo ket heb he recompanz. » Neket eur verened dour ien en deuz roet sant Joseph da unan euz a Ziskibien Jesus-Christ ; mez roet en deuz da Jesus he-unan kement tra en deuz gallet. Neket da eun den just na da eur prophet en deuz roet diguemer, mez da Jesus, ar justis memez ha Doue ar bropheted. Pebez recompanz eta en deuz brema en env !

Da fin ar bed, eme an Aviel, Jesus a lavaro d'ar Zœnt : « Deuit, tud beniguet gant va Zad, deuit da guemer perz er rouantelez preparet evidhoc'h, abaoe er penñ kenta euz ar bed. Rag me am euz bet naon, ha c'hui hoc'h euz roet d'in da zibri ; me am euz bet sec'hed, ha c'hui hoc'h euz roet d'in da eva ; n'em boa ti ebet da loja, ha c'hui hoc'h euz va diguemeret ; en noaz oun bet, ha c'hui hoc'h euz va guisket ; clan oun bet, ha c'hui a zo deuet d'am guelet ; er prison oun bet, ha c'hui a zo deuet davedoun. »

Da zant Joseph e c'hell hor Zalver Jesus lavaret e guirionez ar c'homzou-ze euz an Aviel : Deuit, va Zad maguer, c'hui a zo beniguet gant va Zad ; deuit da guemer ho reng enorus er rouantelez, preparet evidhoc'h abaoe ar penn kenta euz ar bed ; rag c'hui hoc'h euz va lojet, va maguet, va guisket, va difennet ; deuit brema

da azeza var eun tron caer e kichen Mari, va Mam hag ho Pried.

An den santel Tobi a c'houlenne digant he vab: « Petra e c'hellimp-ni rei d'an den santel-ma a zo deuet ganehoc'h ? Hag hema a lavaraz d'he dad : Va zad, pebez recompanz a roimp-ni d'ezhan ? Pe guelloc'h petra e c'helfemp-ni rei d'ezhan hag a zerefe outhan evit ar vad en deuz great deomp ? Va c'hasset ha va digasset en deuz em beach ; eat eo bet da guerc'hat an arc'hant a oa gant Gabelus ; cavet en deuz d'in eur pried de-read, he zennet en deuz euz a c'halloud an droug-speret, joa en deveuz great d'he c'herent, miret en deuz ne zoun bet taguet gant eur pesk ; d'ehoc'h ive en deuz roet ar gueled hag hor rentet en deuz pinvidik a bep seurt madou. Pe seurt recompanz e c'hellomp-ni rei d'ezhan evit kement-se oll ? Pedit-hen, va zad, da gaout ar vadelez da guemer an

hanter euz an oll vadou a zo deuet ganeomp. » An den santel Tobi hag he vab a sonje d'ezho n'ho devoa affer nemet ouz eun den, ha pa dal d'an Eal Rafael ez oant dliour euz an oll zervichou mad a oa bet rentet d'ezho.

Sant Joseph a zo bet evit Jesus ha Mari evel an Eal Rafael evit Tobi hag he vab.

Dre-ze pa c'herruaz ar patriarch santel-ma en env, e penn he veach hira poaniuz, an Tad-Eternel a zeblant goulenn digant Jesus he Vab : Petra a roimp-ni d'an den santel-ma a zo deuet ganeoc'h ? Ha Jesus a c'helle ive lavaret, evel Tobi d'he Dad : Va Zad, pe seurt recompanz a roimp-ni d'ezhan ? Rag va diguemeret en deuz en he di, va maguet ha va guisket en deuz, va c'hasset ha va digasset en deuz epad va beach var an douar, saveteat en deuz va buez, oc'h va diframma euz counar Herodez, va c'huzet en deuz

en Ægypt ; eur vadelez hag eur garantez a dad en deuz bet evidoun ; eur pried mad ha carantezuz eo bet e kenver Mari va Mam. Pe seurt recompanz e c'helfemp rei d'ezhan ?.. Mad, mat, eme an Aotrou Doue, deuit, servicher mad ha leal, deuit tre e joa ho Aotrou : hag an Aotrou Doue hel lakeaz da azeza var eun tron caer, en eur lavaret evel ar roue Assuerus : Evelse e vezo enoret an hini a blij gant ar roue enori.

O sant Joseph, mil guech euruz ! Brema e velit an dizhenvelediguez a zo e tre ar bed hag an env, e tre Jesus var an douar ha Jesus er Baradoz, e tre Jesus izelet hag Jesus glorifiet. Her guelet hoc'h euz er baourentez, var ar plouz ; brema her guelit e gorre an Envou, azezet en tu deou da Zoue he Dad, leun a c'hloar hag o ren var ar bed oll gant he oll c'halloud.

Sant Joseph, goulennit evidomp digant

Jesus ha Mari ar c'hraz da heulia ho vertuziou evit ma hor bezo perz er joa hag er gloar hoc'h euz brema gant Jesus ha Mari.

AN DREDE VARN'UGENT A VIS MEURS

Galloud sant Joseph

Ar patriarch Joseph, mab da Jacob, a zo bet eur skeuden euz Jesus-Christ, evel ma lavar an Tadou Santel euz an Ilis ; mez oc'hpenn bez ez oa ar skeuden euz eur Joseph al santeloc'h evidhan, euz sant Joseph, Tad maguer hor Zalver, evel m'he lavar sant Bernard.

« Ar patriarch Joseph, eme sant Bernard, guerez gant he vreudeur ha casset d'an Ægypt, a zo eur skeuden euz Jesus-Christ, guerez gant unan euz he zisbikien ; sant Joseph o tec'het araog counar Herodez a zougaz Jesus-Christ d'an Ægypt. Ar patriarch Joseph, fidel d'he vestr, na fellaz ket d'ezhan disenori greg

he vestr; sant Joseph, o chom bepred guerc'h, a viraz guerc'hded he vestrez, Mam he Aotrou; ar patriarch Joseph en deuz bet sclerijen var ar secrejou euz so-rienou ar roue; sant Joseph en deuz bet anaoudeguez euz mysteriou an env ha perz enho. Joseph a c'hrignoliaz ed evit ar bopl; sant Joseph en deuz bet ar garg da viret evidhan hag evit ar bed oll Jesus-Christ, ar bara beo diskennet euz an env.»

Ar patriarch Joseph, tennet euz he brizon ha casset da balez Pharaon, a lavaraz da roue an Egypt e tleje ar-ruout seiz bloavez larguentez ha seiz bloavez kernez er vro, hag a aliaz ar roue da lacaat e penn ar rouantelez eun den fur ha gouzieg, evit m'en dije carguet tud da c'hrignolia e peb leac'h ar bemped euz an ed a vije bet epad seiz vloaz, evit galloud maga ar bopl epad ar guernez. An ali-ze a blijaz d'ar roue ha da dud he balez,

hag ar roue a lavaraz: E pe leac'h e cavimp eun den guelloc'h eguet hema, ker leun a speret Doue? Hag e lavaraz neuze da Joseph: Pa hoc'h euz bet digant Doue ar sclerijen var ar pezh hoc'h euz lavaret, e pe leac'h e cavin-me eun al guelloc'h evidhoc'h pe par d'ehoc'h? C'hui ho pezo eta an emell var va zi: ar bopl a heulio ho mouez hag a raio ar pezh a lavarrot. Me n'am bezo huellloc'h evidhoc'h nemet va zron ha va hano a roue.

Pharaon a lavaraz c'hoaz da Joseph: Ho lacaat a rann hirio da c'houarn an Egypt en he fez. Tenna a ra ar bizou divar he viz evit he lacaat var biz Joseph; ober a reaz guisca d'ezhan eur zae lien lin moan ha lacaat e ker-c'hen he c'houzoug eur c'harlantez aour. Ober a reaz d'ezhan pignad en unan euz he garziou, an eil goude he hini. Gourc'hemeni a reaz da unan euz he offisserien bale en he raog en eur

grial d'an oll stoui ar c'hlin dirazhan, ha m'ho dije ann oll anavezet e oa roet d'ezhan an emell var an Ægypt en he fez. Ar roue a lavaraz c'hoaz da Joseph : Me eo Pharaon hag hen touet a rann, den na finvo na troad na dorn en Ægypt nemet dre ho urz hag ho courc'hemen. Chench a reaz d'ezhan he hano hag hen galvaz, e langach ar vro, Salver ar bed.

Mez n'euz fors peguen huel eo savet ar patriarch Joseph, petra eo couscoude e scoaz sant Joseph, pried Mari ha Tad maguer da Jesus? Ne oa nemed ar skeud euz a zant Joseph calz santelloc'h evidhan ha savet huelloc'h evidhan. Rag petra eo rouaned hag oll rouanteziou an douar e scoaz Jesus-Christ ha rouantelez an envou?

Ma en deuz bet Joseph an emell var balez ha var rouantelez Pharaon, sant Joseph en deuz bet an emell var Jesus ha Mari ; ma en deuz miret

ouz roue an Ægypt hag he bopl da vervel gant an dienez, sant Joseph gant he labour en deuz maguet Jesus ha Mari hag ho miret dioc'h an dienez. Mar d'eo bet galvet Salver ar bed, sant Joseph en deuz saveteed he vuez da vuir Zalver ar bed ; mar d'eo bet ar c'henta goude ar roue, sant Joseph oa ar c'henta goude Jesus ha Mari, hag an enor en deuz bet zoken da gommandi d'ezho. Mar d'eo bet guisket caer, caeroc'h oa c'hoaz sant Joseph dre he zantelez ; mar stoue an oll ar c'hlin dirazhan, an Ælez a zalude sant Joseph gant doujan. Ma en deuz lakeat calz arc'hant e bang ar roue, sant Joseph dre he vertuziou en deuz dastumet madou preciusoc'h hag ho lakeat e tenzor roue an envou. Ma en deuz bet eun tron e palez ar roue, sant Joseph en deuz eun tron skeduz er Baradoz. Ma lavare ar Roue Pharaon d'he bopl en dienez : It daved Joseph

ha grit kement ma lavar d'ehoc'h, an Aotrou Doue a lavar brema deomp-nive en hon ezomou : It daved Joseph.

Oh ! ia, deomp daved Joseph en hor poaniou, en hon dienez, en hon tentationou ; pedomp sant Joseph gant fizianzen hon oll ezomou ha credomp mad e vezimp selaouet.

Truez en devezo ouzomp ; rag gouzout a ra petra eo ar boan, tanveet en deuz trubuil ar bed. C'hoant en deuz da zicour an dud ; rag eur galon vad en deuz bet digant Doue ; carantezuz eo dreist an oll.

Neket Jesus ha Mari heb ken en deuz caret var an douar ; mad eo bet oc'h an oll. Caret en deuz meurbet an oll dud he vreudeur, ha vad a ree d'ezho ar muia ma c'helle. He garantez evit he nessa ne deuz great nemet creski en env : hor c'haret a ra eno e Jesus hag e Mari, dre ma zomp ho bugale ha ne c'houlenn ket guel eguet

hor zicour da viret lezen Doue. Oc'h-penn en deuz c'hoant da ober vad deomp, galloud en deuz ive d'hen ober ; rag he c'halloud a zo braz meurbed er Baradoz.

Pa en denz bet var an douar eur reng huelloc'h eguet an hini en doa ar patriarch Joseph e palez roue an Egypt ; pa en deuz bet an enor hag ar galloud da c'houarn Jesus ha Mari, he c'halloud a dle beza braz en env ; pa ho deuz Jesus ha Mari sentet out-han var an douar, na refuzint ket selaou oc'h he bedenn ar Baradoz. Penoz e c'helle Jesus refuz d'he Dad maguer ar pezh en deuz promettet ober evit an distera euz ar gristenien hag e ve eur pec'her braz ; rag lavaret a ra en Aviel : Kement tra e c'houlennot digant va Zad em hano, e vezo roet d'ehoc'h ? Ha Jesus a refuzo neuze eun dra ben-nag da zant Joseph, he Dad maguer ? Kement-se ne oufe ket beza guir.

Oh ! deomp eta gant fizianz da gaout sant Joseph ; pedomp-hen ; bezomp devot d'ezhan ; en em lakeomp mad didan he c'houard, hag hen hor zelaouo, hor zicouro, hor reno dre an hent mad d'ar zantelez. Oh ! mar d'eo braz hor zempladurez ; mar couezomp ken aliez er pec'het ; ma hon euz ken nebeud a ver-tuziou, ne dleomp tamal nemet hon nebeud a zevotion da Jesus, da Vari ha da Joseph. Ma na gredomp ket abalamour d'hor pec'hejou tostaad oc'h Doue, ah ! deomp da gaout Joseph. Pedomp sant Joseph da c'houlenn evidomp : hen ne vezo ket refuzet ; Jesus ha Mari ho deuz ato sentet outhan var an douar, ha brema n'ho deuz netra da refus d'an hini n'en deuz morse refuzet netra d'ezho.

Sant Joseph, galloudeg en env, pedit evidomp.

AR DEVARE VARN'UGUENT A VIS MEURS

An Devotion da zant Joseph

Jesus ha Mari a zo bet ar re guenta ho deuz anavezet santelez sant Joseph hag ive ar re guenta ho deuz enoret, doujet, caret ha servichet ar zant braz-ma. Ar Speret-Santel en Aviel a zo bet ar c'henta en deuz he veulet ha discuillet he zantelez d'ar bed oll. An Aviel na lavar nemet nebeud a dra divar benn buez ha brazderiou ar Verc'hez, Mam Doue ; ne lavar ken nebeud nemeur a dra divar bouez sant Joseph, he fried santel. Mez an nebeudig comzou-ze a zo evel eur veingleuz, leun a denzoriou spirituel.

N'euz fors peguer berr eo ar c'homzou-ze, neb a anavfe mad an oll vysteriou a zo cuzet enho, a velfe traoucaer meurbed, pa'z eo guir sant Gregor a Nazianz a lavar : « An Aotrou Doue en deuz lakeat e sant Joseph,

evel en heol, an oll sclerijen a zo en oll Zœnt al. » Ar stered, a luguern var an noab, a zo disterig aoalc'h evit lagad an den, ha couscoude, hervez ma lavar an dud a skiand, ez int, an darn vuia anezho, ken aliez a heol braz meurbed.

Ar Verc'hez Vari ive a zo en em garguet da veuli sant Joseph ha da ziskuil santelez he fried, evel m'her gueler e revelationou santez Berc'het. Setu ar pezh a lavaraz an Itron Varia d'ar zantez-ma :

« Credit mad, eme ar Verc'hez, penoz sant Joseph en doa clevet gant ar Speret-Santel, abars ma oan eureujet d'ezhan, em boa goestlet va guerc'hded da Zoue hag ez oan dinam dirazhan em zontjou, em c'homzou hag em oberou. Oc'h anaout kement-se, ne zemezaz d'in nemet evit beza va difennour ha va zervicher evel he rouanez. A hendall, me ive a ouie dre ar Speret-Santel em bije miret

bepred va guerc'hded, dre c'hraz Doue, e stad ar briedelez. Joseph, va fried, na zroucjonzaz ket an distera ac'hanoun, pa anavezaz e oan, dre vertuz ar Speret-Santel, douguerez.

» Pell a guement-se : sonch e teuaz d'ezhan neuze ho doa lavaret ar Brophetet e tleje Mab Doue guenel ouz eur Verc'hez hag e credaz ne zeree ket outhan beza e servich mam Doue ; ha dizez braz oa he speret, o clasg gouzout petra da ober, pe mont kuit pe chom gan-en. Ha setu Eal an Aotrou Doue a zeuaz d'he gaout hag a lavaraz d'ezhan : Na guitteit ket ar verc'hezze, fiziet enhoc'h. Kement hoc'h euz sonjet euz he santelez a zo guir. Conceived e deuz dre c'halloud ar Speret-Santel hag ar mab a lakeio er bed a vezo Salver an dud. Adaleg neuze Joseph va zervichaz evel he vuir rouanez, ha me euz va zu a rente d'ezhan

oll deveriou eur zervicherez. Joseph en em akuite ker mad euz an oll zervichou a rente d'in, ma ne oa morse huelloc'h an eil comz evit eben; morse n'en em jale nag ne golle patientet. Laouenn ez oa en he baourentez; labourad a ree dalc'hmad; carantezuz ez oa e kenver an oll, bete zoken e kenver ar re a noaze d'ezhan; va zervicha a ree gant eun doujanz hag eur garantez vraz. Leun a evez ez oa bepred da zifenn va guerc'hded; bez ez oa, en eur guer, ar guella test euz ar burzudou braz en deuz great Doue en-oun. Oc'hpenn, maro ez oa d'ar c'hig ha d'ar bed; ne veve mui nemet evit traou an env. Eur fizianz ker cre en doa e promessaou an Aotrou Doue ma lavare bepred ar c'homzou-ma: Ah! ra vevin heb ken evit guelet bolonte Doue heuillet. Dibao a vech ez ee etouez ar re al, rag ne glaske nemet anaout hag ober bolonte

Doue, ha setu perag eo ker braz he c'hloar en env. »

Setu aze ar pezh a lavaraz an Itron Varia da zantez Berc'het divar benn buez sant Joseph, he fried. Nebeud e deuz lavaret; mez he c'homzou a zo caer ha preciaz, evel ar perlez hag an diamant, mein precius, pere, evitho da veza dister, ho deuz eun dalvoudeguez vraz.

An darn vuia euz an Doctoret hag euz an Tadou Santel euz an Ilis ho deuz comzet euz sant Joseph hag ho deuz meulet en ho scridou caer he vertuziou, he zantelez hag ar reng huel en deuz bet.

Petra bennag an oll gristenien a anevez santelez sant Joseph hag ez int bet leun a respet evidhan, evel m'her gueler e scridou an Tadou Santel euz an Ilis; couscoude er penn kenta euz an Ilis n'euz ket bet great nemeur a stad anezhan; ne oa ket goueliou en

he enor evel ma zo brema. Perag-se? Doue, pehini a ra peb tra gant pouez ha muzul, a ra ive peb tra d'he vare. Plijet eo bet ganthan lezel sant Joseph cuzet er penn kenta euz an Ilis hag epad pell amzer heb hen enori kement ha meur a Zant hag a Zantez, eun tam mad disteroc'h evidhan.

Mez mar d'eo chomet pell amzer cuzet en eur goumoulen denval, evel ma c'hoarvez aliez gant an heol e creiz an deiz, dont a ra couscoude ar mare da zant Joseph d'en em denn euz an denvalijen-ze hag e luc'h gant seul vui a c'hloar, er bed christen, ma'z eo bet pell cuzet, evel ma ra an heol var an noab.

Ma n'euz ket bet rentet da zant Joseph er penn kenta euz an Ilis kement a enor hag a c'hloar evel ma reer brema, eo, eme Mathiaz Naveo, abalamour eun darn heretiked, evel an heresiark Cerinth, a felle d'ezho rei da gredi ez

oa sant Joseph tad naturel da Jesus-Christ, eleac'h ar feiz a zezg deomp sclear n'ez eo nemet Tad maguer heb ken. Falz creden an dud difeiz-ze a ziscare ar feiz gatholic, o vont eneb myster an Incarnation. Tenna a ree divar benn ar Verc'hez, Mam Doue, he c'haera curunen, he guerc'hded, ha digant Jesus-Christ unan euz he gaera privilajou, he Gonception dinam ha divin, he Gonception dre vertuz ar Speret-Santel. Evit moug a ar falz creden-ze, a c'helle noazout calz d'ar feiz, en amzer-ze, an Ilis en em viraz da greski an devotion da zant Joseph, ken tre ma vije diazezet mad feiz ar gristenien var ar mysteriou euz hor relijion. A viscoaz an droug-spered, ar gaouiat coz-ze, en deuz skignet er bed bep seurt falz credennou evit moug a ar virionez, evit distrei an dud divar an hent mad hag evit ho c'holl. Mez ar gaou na bad nemet eun nebeud

amzer : abred pe zivead ar virionez e deuz he zro. An Ilis, renet ha sclerijennet gant ar Speret-Santel, na vangmorse da anaout ha da viret ar virionez, ha da c'houennad al louzeier fall euz parg an tad a famil.

Urz Carmez, eme Bollandus, en deuz dihunet en Europ an devotion da zant Joseph. Ar relijiuzed euz an urz-ze ho devoa eun devotion vraz da zant Joseph. Crisder an Turked a reaz d'ezho tec'het diouz an Douar-Santel hag e teujont er broiou Cuz-Heol.

An devotion da zant Joseph, evel eur blantennig iaouang, a greske hag a astenne bep da nebeud, « hag e pebleac'h er broiou Cuz-Heol, eme Isidor Izolano, ar Speret-Santel en doa c'houezet e calonou an dud ar zonch da renta enoriou braz da zant Joseph ha credi a reomp, emezhan, an devotion-ze, re-companset dre bedennou nerzuz ar

Zant-ma, a bellai ar goualennou divar an Ilis hag a denno grassou braz var ar gristenien. »

Hag e guirionez, ezom e oa, en amzer-ze, a c'hrassou braz digant Doue : ar goualennou na dec'hent ket divar ar gristenien er broiou Cuz-Heol ; stad an Ilis gatholic a oa reuzeudic meurbed. Daou Bab ez oa e penn an Ilis ; ar rouaned, an dud a ilis ha beteg ar relijiuzet zoken n'en em glevant mui : darn oa evit hema, ha darn evit eguile. Ar feiz hag an urz vad a dec'he kuit e creiz ar reuz-ze.

Eur C'honsil braz a oa assamblet er guer a Gonstanz evit cessaat dont a benn da lacaat ar peoc'h. Gerson, eun doctor braz a Baris, en em gavaz eno, hag o veza bet pedet da ober eur brezeguen dirag an Tadou euz ar C'honsil, e lavaraz d'ezho : Eur voyen vad da lacaat ar peoc'h en Ilis gatholic hag an urz vad etouez ar griste-

nien eo pidi sant Joseph, an Eal a beoc'h, hag astenn an devotion en he enor e peb leac'h etouez ar gristenien. Credi a ree en dije sant Joseph difennet an Ilis evel en doa difennet ar Mabic-Jesus. Prezeg a reaz gant kement a ners hag a furnez euz a c'halloud hag euz a c'hloar sant Joseph, ma oa selaouet gant plijadur ha meulet gant an oll. An devotion da zant Joseph a zo eat abaoe bepred var gresq. An oll ho deuz santet galloud sant Joseph eneb an hereziou, evit dere'hel ar peoc'h en Ilis gatholic, hag evit creski ar feiz hag ar vertuziou etouez ar gristenien.

Sant Joseph, difennit bepred an Ilis gatholic ha creshit ar feiz en hon touez.

AR BEMPET VARN'UGUENT A VIS MEURS

Sant Joseph, mignon ar rugale

« Tud ar bed, ar brinsed hag ar rouaned, eme sant Frances a Sales, ho deuz soursi da lacaat ho bugale e tre daouarn mistri fur ha gouzieg evit ho gouarn, ho diski hag ho c'hellen. An Aotrou Doue a c'helle ive choaz, evit gouarn he Vab unig roue en env hag an douar, ar fura, ar zantela hag ar guella den a oe var an douar; ha c'hui gav d'ehoc'h n'en deuz ket her greet en eur guemer sant Joseph evit ar garg vraz-ze? Credi e tleomp eta, heb aoun ebet d'en em fazia, en doa sant Joseph ar furnez, ar zantelez hag an oll c'harrassou a c'houlenne ar garg-ze, roet d'ezhan gant an Tad-Eternel da c'houarn Jesus-Christ hag ar Famil-Zantel. Ne oant nemet tri: Jesus, Mari ha Joseph, hag ez oant var an

douar evel eun imach pe ar skeuden euz an Drinded santel a zo en env. »

An Aotrou Doue, o lacaat sant Joseph da c'houarn he Vab, en deuz roet d'ezhan eur galoun a dad ; en deuz roet d'ezhan ar furnez, ar garantez hag ar zantelez a dle eun tad da gaout evit gouarn mad he vugale ha dreist peb tra evit gouarn mad Mab unig an Tad-Eternel, en em c'hreat den, evit rei deomp ar scouer euz an oll vertuziou hag evit hor zavetei.

Sant Joseph en deuz great mad an oll zeveuriou euz he garg. An Tad-Eternel a zo bet contant anezhan ; Jesus a zo bet en em gavet mad didan he c'houard, ha Mari, he bried, a zo bet euruz en he gompagnunez. Achuet eo ganthan he labour ; euruz eo brema e gorre an envou, azezet e kichen Mari, he bried, e creiz ar joa hag ar c'hloar. Mez ar galoun a dad en doa

bet digant Doue, pa oa var an douar, a zo chomet ganthan er Baradoz, ha ne c'houlenn ket guelloc'h eguet ober vad da vugale Doue, d'an oll gristenien ha dreist peb tra d'ar vugaligou iaouang, a zo c'hoaz e graz ar Speret-Santel. An eneou mad-ze na anavezont ket c'hoaz an danjeriou a zo oc'h ho gortoz e creiz ar bed. An droug-spered a zo var evez : stignet en deuz he bechou en dro d'ezho, du-ma, duhont, evit ho c'holl ar c'henta ma c'hello. Droug a zo enhan, o velet ar grassou caer en deuz lakeet ar Speret-Santel en eneou-ze da zevez ho badiziant. Mall eo ganthan distrei a-dare en eneou euz a bere eo bet casset kuit ; mall eo ganthan sotra al leac'h santel-ze, o lacaat ar vugaligou-ze da goueza e bep seurt pec'hejou, evit ma c'hello ho zenna digant Jesus, ho c'holl hag ho stleja ganthan d'an ifern.

Pebez danjer a zo evit ar vugale dre ma teu d'ezho ho ræson hag ho skiant ! Tadou ha mamou, pebez dever evidhoc'h d'ho miret ouz an droug, ouz ar scoueriou fall !

Gant pebez aket e tleit beilla var ar vugale-ze ! Pebez tenzor a zo e tre ho taouarn, a zo fiziet enhoc'h gant Doue, heb gouzout dare d'ehoc'h marleze ! Diouallit na zafe an tenzor-ze gant al laer, da lavaret eo, gant an droug spere. Hastit da ober ho calloud evit ma cresco graz Doue enho, dre ma cressint en oad. Lakeit abred ho pugale didan gouard Jesus, Mari ha Joseph.

An tadou hag ar mamou na vancout ket peurvuia da ziski eur vecher bennag d'ho bugale, d'ho lacaat e taill da c'hounid ho boued ; mad a reont, rag eun dever eo evitho. Mez neket aoalc'h soursial euz ar c'horv ; red eo ive sonjal en ene. Ne d'oc'h ket, tadou

ha mamou, ne d'oc'h ket peurvuia evit caout d'ho pugale mistri desket ha gouizieg, evel m'ho deuz an dud pinvidik ; ezom oc'h euz marleze abred euz ho pugale. Ne d'oc'h ket evit ho c'hass d'ar scoliou braz ; roet d'ezho eun tamig deskadurez ha lakeit-ho abred didan gouard sant Joseph.

Roit d'ho pugale anaoudeguez euz a vuez ar zant braz-ma ha ma'z int devot d'ezhan, bezit sur ho devezo eur mestr mad, eur mestr gouizieg e peb tra.

Sant Joseph a gar ar vugale, dre ma'z eo bet carguet euz ar Mabig-Jesus en he vugaleach, hag ive dre ma oar eo Jesus mignon ar vugale. Ia, Jesus en deuz bet bepred eur garantez vraz evit ar vugale, ha sant Joseph en deuz desket ganthan ho c'haret. Dre-ze eta n'oufac'h ket caout d'ho pugale guelloc'h mestr eguet sant Joseph. Ma roit d'ezhan abred an

emell anezho, hen ho miro oc'h an dangerou ken evit ar c'horv, ken evit an ene; hen a rei anezho bugale fur, bugale christen. Ho ren a rei en hent euz ar vertuziou, ha ma c'hoarvez gantho fazia var an hent mad, hen a gavo tu pe du d'ho digas en dro.

Ha c'hui, bugaligou, pere a lenno pe a glevo lenn kement-ma, m'ho ped en han Doue, da gaout eur guir zevotion da zant Joseph. Kemerit sant Joseph evit ho patron, pedit hen aliez, ha dreist peb tra pa viot tentet gant an droug-spered. Lavarit neuze ar bedenn-ma : Sant Joseph, pedit evidomp, hag ar spered miliguet-ze a glaske ho fazia var an hent mad, a guemero ractall an tec'h. C'hui a vezo laouen neuze o velet oc'h euz en em viret dioc'h an droug.

Me oar ervad e carit Jesus ha Mari : penoz neuze mancout da gaout eur garantez dener evit sant Joseph, a zo

bet ker mad ouz Jesus ha Mari ? Da zeiz Nedelec, pa teufot da velet ar Mabig-Jesus, pedit Jesus, Mari ha Joseph.

Pedit ar Famil-Zantel da scuilla he c'hrassou varnoc'h ha var ho kerent.

AR C'HUEC'HVET VARN'UGUENT A VIS MEURS
Sant Joseph, patron al Labourerien

Studiomp mad buez sant Joseph hag e cavimp er vuez burzuduz-ze peadra d'hor scoueria bep mare en hor buez. Paour ha pinvidik, coz hag iaouank, e pe stad bennag e oufemp beza, deomp oll da scol gant Tad ar Famil-Zantel, descomp ganthan caret al labour hag en em zantelaat er boan a zo d'he heul.

Sant Joseph eo patron al labourerien ; caret en deuz al labour ; azaleg ar penn kenta euz he vuez beteg ar penn diveza en deuz tremenet he amzer o labourat.

Jesus, o tont er bed evit rei deomp ar skouer euz an oll vertuziou, a zo diskennet en he di, en deuz bevet ganthan, hag en deuz labouret en he stal. Hor Zalver n'euz ket cavet e'tiskenne re izel oc'h en em rei d'al labour; debret en deuz ive he vara gant ar c'houezen euz he dal, evel pa vije bet an distera euz an dud. Lavaret a rea : N'oun ket deut da zispenn al lezen ; he boaniou ho deuz enoret ha santeleet al labour.

Ma tiskennaz Jesus e ti sant Joseph, ma en deuz labouret ganthan en he stal, neket o veza ma en doa ezom da veza scoliet ganthan, nag ma ezoa red d'ezhan deski he vecher ganthan. Oh ! nan, rag Jesus a zo Doue, an oll furnez hag an oll skiant a zo enhan hag a zeu diganhan.

Kement tra a zo bet greet ganthan, eme sant Ian (1) : « Ha netra euz

(1) *Evangile*, c. 1, v. 3.

a kement a zo bet greet, n'eo bet greet hebd'han. » Fallet ez eo bet d'ezhan en em lacaat henvel oc'h peb hini ac'hanomp e peb tra : labouret en deuz greet gant Joseph evit santelaat al labour, evit ober pinijen dre ar boan a zo da heul al labour hag evit discouez deomp ive caret al labour. Al labour a zo eta brema eun dra gaer ha santel abaoe ma'z eo bet santeleet dre boaniou Jesus-Christ.

Nag a dud couscoude ha na garont ket al labour, hag a zo droug enho, en dra ma rancont labourat ! Nag a hini a glever o pec'hi, o tamall Doue hag an dud o veza ma'z eo red d'ezho tremen ho amzer el labour ! Ar vugale hag an dud iaouank dreist-oll na fell ket d'ezho en em rei d'al labour ; tenn e cavont plega ho c'horf hag ho speret da ober ar peza c'houlenner digantho.

Perag neket caret al labour ? Dre

ma n'ouzer ket petra eo an den nag evit petra ez eo lakeet var an douar.

An den a zo, eme ar Scritur (*Job*, 130, v. 2), crouet gant Doue evit al labour hag al labouz evit nijal. Neb na fell ket d'ezhan labourat, eme sant Paul, na dle ket dibri (*II^e Epist. ad Thessal.*, c. III, v. 10). Gant pri ha gant fank e vezo labezet an den diek, a lavar c'hoaz ar Scritur, hag an oll a gomzo divar he benn evit he zisprizout. (N'az pet ket a gaz oc'h al labourou tenn, nag oc'h labour an douar a zo bet crouet gant Doue.)

Red mad ez eo eta d'an den labourat. Al labour a guendalc'h an den er vertuziou, a gresk he ners hag a vag he iec'hed. Guelloc'h eo eun den paour iac'h ha cre eguet eun den pinvidik diners ha gloazet gant ar c'hlenvejou. Al labour a ra euruzdel an den var an douar. An den dilabour a gav hirr he amzer. E pe stad bennag e

vezo an den, hag en defe an oll vadou gant an oll blijadurezou a zo d'ho heul, ma n'en deuz netra da ober, en em gavo heb dale inouet. An den neket evit chom bepred da eana ; evel an douar a zoug bep ploaz frouez mad pe louzeier fall, evelse ema ive an den ; ma ne ra ket ar mad, e raio an droug.

Trugarekeomp eta an Aotrou Doue, o veza ma rancomp labourat. A viscoaz Doue en deuz goulennet al labour digant an den. Er penn kenta euz ar bed, o tont euz a zourn he grouer, en dra ma luc'he c'hoaz ar c'hraz hag ar zantelez en he ene, an den en doa bet urz digant Doue da labourat ; mez abaoe he bec'het ez eo striseet an urze, hag al labour a zo deuet da veza evidhan eul lezen a binijen. Paour ha pinvidik, oll e tleomp labourat peb hini en he stad hag en he vecher : den na zo espernet.

Sant Joseph en doa anavezet mad al lezen-ze ; kent-se en em roaz abred d'al labour. Kemeret en doa ar vecher a galvez, eur vecher denn ha poaniuz. Debret en deuz e guirionez he vara gant ar c'houezen euz he dal. Ia, lavaret a c'helle : Me a zo paour hag er boan a vihanik ; rag a vihanik en em stagaz oc'h al labour, ha neket heb ken evit caout peadra evit ezomou ar c'horf ; mez ive evit caout eun tamig descadurez, evit gouzout lenn, evit m'en dije gallet anaout lezen Doue, o lenn ar Scritur zantel.

Tud iaouank ha bugale, deskit gant sant Joseph carout al labour. Ho pet sonj, neket heb poan ez eo deut a benn da gaout descadurez ha da zeski he vecher. Pedit ar zant braz-ma da rei an dorn d'ehoc'h epad ho studi ha da rei d'ehoc'h ners ha sclerijen evit ma teuot a benn euz ho labour.

Ha c'hui ive, tud vraz, tud deut var

an oad, kemerit sant Joseph evit ho patron ; kemerit scouer diouthan en ho labour. Evit m'hor bezo calon da labourat, deomp aliez a speret da Nazareth ha guelomp ar patriarch santel-ma e creiz he labour. Tosteomp oc'h he di ; it tre, n'ho pet ket aoun, diguemer mad ho pezo digant ar Famil-Zantel. Grit eur zell var an tieguez ; n'euz enhan netra pinvidik ; nag an aour nag an arc'hant na luguern en ti-ze ; mez peb tra a zo kempenn. Pebez urz er Famil-Zantel ! Mari, oc'h he zu, a zo bepred en he labour hag er beden ; Jesus a zo guech gant he vam, guech gant Joseph en he labour.

Eur zell var al labourer santel-ma en he vecher ; spiit mad anezhan. Calvez ez oa ha marechal zoken dioc'h ma leverer. Deomp tre en he stal. Grit, ma kerit, eun taol lagad var he vinviachou. Setu Joseph var gorf he roched, tronset ganthan he vanjou ; setu

ema crog en he labour. Peguen didruez e sco var he dam coat ! Ar vouc'hal a iud etre he zaouarn hag ar scolp a strink du-ma du-hont bep taol. Sellit diouthan o sacha var he eskenn pe var he rabot. Na dizamet eo euz he gorf ! An dour a ziver anezhan !

Setu penoz en deuz sant Joseph tremenet he vuez hirr var an douar : bepred er boan, heb en em glemm. Epad he labour he speret a oa e Doue. Discuiza a ree o lenn ar Scritur zantel. Pa teue mare ar pred ha pa vije achuet he zevez e cave berr he amzer en eun diviz santel gant Jesus ha Mari. He vuez a oa cuzet gant Jesus-Christ e Doue.

Greomp evel en deuz greet an den santel-ma, heb beza e poan gant ar re al a zo pinvidik ha dilabour, hag e vezimp euruz en hor mecher hag er stad ma zomp lakeet enhan gant Doue.

Mecherourien, labourerien douar, tenn e cavit ho poan, scuiz ez oc'h gant al labour. Ah ! sonjit aliez e sant Joseph, e Jesus ha Mari. Ar Famil-Zantel a labour evel ma rit ; en deuz bet poan ha diouer euz meur a dra evel m'oc'h euz. Arab eo d'eoc'h credi ema an euruzdet en ebatou, en danvezioù. Na petra a dal ar pezh a lezomp var an douar, pa ziskennomp er bez ? Ar pezh ne bad ket a zo berr, hag an hini en deuz fizians e Doue ne gav netra ziez.

Kendalc'hit d'ho mecher, evel m'en deuz greet sant Joseph ; carit al labour evel m'en deuz greet ; bevit e doujanz Doue evel ma ree. Sonjit er madou a zeuio var lerc'h al labourouze ; sonjit ne vezo ket hirr ho poaniou divar vremen, e vezo braz meurbet ho tigoll, ha neuze n'ho pezo leac'h ebet da gaout poan ; en eneb, mad e vezo kement-se oll da harpa stard

ac'hanoc'h evit gouzaon ho labourou gant joa ha gant frankiz. Ma tilezit breman a galon vad ho c'hoanteguez, ho pezo en env pep tra dioc'h ho c'hoant. Eno e kevot kement tra a garit ha kement tra a oufac'h da c'hoantaat. Eno ho pezo an oll vadou, ha n'ho pezo aoun ebet d'ho c'holl. Kement tra ho pezo c'hoant da gaout a vezo roet d'ehoc'h hag ho calon e devezo he goualc'h euz an traou-ze oll (1).

Sant Joseph, patron al labourerien, roit deomp ners ha caloun en hon labour ha goulennit evidomp ar c'hraz da labourat evit gloar Doue hag hor zilvidiguez.

(1) *Levr an Imitation.*

AR ZEISVET VARNUGUENT A VIS MEURS

Carantez sant Joseph evit ar bec'herien

Evel an tad a famil, sant Joseph en deuz eur garantez dener evit he oll vugale; neket heb ken var ar vugale vad ha sehtuz en em astenn he vadelez, mez bete var ar re dizen, bete var ar vugale prodig a guita ti ho zad hag a zispenn ho danvez, o veva oc'h ho roll. Ia, sant Joseph en deuz bet digant Doue eur galoun vad, leun a garantez. Truez en deuz ouz an oll dud paour ha dreist peb tra ouz ar becherien; hag evit guir, piou a zo paouroc'h eguet an neb en deuz collet graz Doue, ar guella euz an oll vadou, ar c'haera euz an oll denzoriou? Oh! eun ene hag en deuz tanvet peguer mad eo an Aotrou Doue, peguer caer ha peguen euruz eo beza en he c'hraz, a zo leun a druez ouz

an dud keaz ho deuz ar malheur da veva er pec'het marvel, da stleja chaden an droug-speret. N'euz ket tris-toc'h stad var an douar. Ar pec'her a zo reuzeudig e creiz an oll zanvez hag e guirionez n'en deuz plijadur ebet. Caer en deuz en em rei ar muia ma c'hell d'an oll dechou fall euz he galon ; caer en deuz redek varlerc'h ar plijadurezou euz ar bed miliguet, ne d'eo nag eaz na contant.

Neket euruz : mouez he goustianz na hean ket d'he grigna ha da grial d'ezhan : « Aoalc'h ! aoalc'h ! en han Doue, heanit ! Scuiz oun, ne c'hellan mui. » Mez an droug-spered, he vour-reo didruez, a lavar : « Ai-ta ! Baleit, baleit ! » Oh ! nan, peoc'h ebet morse.

Caer en deuz ar pec'her keaz en em deurel euz an eil pec'het en eguile, neket morse contant. Calon an den na vezo ket carguet gant traou ar bed ;

caer ho pezo teurel enhan madou, plijadurezou, goull e vezo bepred. Doue en deuz greet ar galon-ze evid-han, ha n'euz nemet-han a c'hell hel leunia. Oh ! piou eta eo an den fur ha n'hen devezo ket truez euz stad ar sclavour keaz-ze ?

Pec'herien guaz, mar fell d'ehoc'h terri ho chaden hag en em denn digant ar mestr fallac-ze, ah ! goulennit sicour digant sant Joseph, hag ar mignon mad-ze na vanco ket da astenn d'ehoc'h an dorn. Caout a rei tu pe du d'ho tiframma a zidan he c'halloud ha d'ho lacaat e graz Doue. E scol Jesus ha Mari, sant Joseph en deuz desket caret an dud ha dreist peb tra ar bec'herien. Gouzout a ra eo deuet Jesus-Christ var an douar evit savetei an dud, evit clag an denved dianket, hag a zo ebars en env mui a joa evit eur pec'her a zistro var zu Doue eguet na zo evit naountec ha pevar ugent just. Anaout a ra ar

priz euz an eneou ; test eo bet euz a boaniou Jesus en he vugaleach ; euz he baourentez hag euz he ziouer a bep tra e craou Bethleem hag e leac'h al. Guelet en deuz he ouad o redeg didan countel ar Circoncision ; meur a vech en deuz sec'het an daelou a scuille ar Mabig-Jesus var ar bec'herien, da c'hortoz an devez braz euz he Bassion hag euz he varo var menez Calvar.

Anaout a ra mad carantez Jesus evit ar bec'herien. Penoz ne vezo ket leun a druez ouz ar bec'herien, pa car peguen ker int coustet da Jesus ? He garantez evit Jesus a ra d'ezhan caret ar bec'herien, abalamour hor Zalver a zo deuet d'ho c'hlasg hag a zo maro evit ho frena. Pa vel brema peguer caer eo ar Baradoz ha pa sonj peguen heuzus eo an ifern, penoz n'en em hasto ket da astenn an dorn d'ar bec'herien evit ho zenna euz ho stad reuzeudig?

Oh ! ma ouffe ar bec'herien pegument int caret gant sant Joseph ha pegument a druez en deuz outho, en em hastfent d'en em deurel e tre he zivrec'h ha d'he bedi d'ho zicour.

Pec'herien gueaz, ma na gredit ket tostaat ouz Jesus ha Mari, oh ! da viana, it daved Joseph ! Caout a reot enhan eur mignon mad hag eun tad carantezuz. Joa e vezo ganthan ho tiguemer, ho touguen hag ho kiniga da Jesus ha da Vari. Oh ! nag a bec'herien en deuz tennet sant Joseph euz ar brassa dizurzou ! Na glever ken bemde comz nemet euz ar vad a ra d'an dud e peb leac'h hag euz ar c'honversionou burzuduz ec'h arru bep mare.

Tadou ha mamou, poan hoc'h euz marteze gant unan bennag euz ho pugale oc'h her guelet troet divar an hent mad hag oc'h en em rei d'an dizurz : pedit sant Joseph Tad ar Famil-Zantel, hag

ho pezo heb dale ar joa da velet ar c'hrouadur-ze o tistrei ouz Doue.

Priejou, poan hoc'h euz marteze gant ho pried ; ne c'heuil ket lezenn Doue, evel ma tlefe. Oh ! eleac'h en em jala, pedit sant Joseph da ober eur zell a druez varnezhan.

Ha c'hui, bugale christen, marteze hoc'h euz eun tad pe eur vam zoken, hag a ra ho clac'har, dre ma ne reont ket ho deveriou a gristen : It daved sant Joseph. Pedit ar patriarch santel-ma evit ho kerent, ha bezit sur, ho peden na chomo ket heb beza selaouet abred pe zivead.

Sant Joseph, grit eur zell a druez var ar bec'herien.

AN EISVET VARN'UGUENT A VIS MEURS

Sant Joseph, patron ar maro mad

Kemeromp sant Joseph evit hor mignon hag hor patron epad hor iec'hed, hag hen a vezo hon alvocad en heur euz hor maro. Heuillomp he vertuziou hag he zantelez, hag hen a astenno an dorn deomp da vont d'ar Baradoz.

Sant Joseph eo patron ar maro mad. Oll e tleomp mervel, abred pe zivead : den na achapo. Oll eta hon euz ezom da gaout eur maro mad, pa'z eo guir dioc'h an heur diveza e tepanto hon euruzded pe hor malheur da viken, evit ato : heur spontuz, pehini e deuz great d'ar brassa Soent crena. Oh ! en heur euz hor maro hon devezo oll ezom braz a zicour. Eun den hag en deuz eur proses euz pehini e tepant he oll vadou, he enor pe he vuez zo-

ken a glask sicour, a guemer eun advocad mad d'he zifenn. Mez petra eo oll vadou, oll enor an den hag he vuez zoken e scoaz ar Baradoz? Ar Baradoz gounezet, setu gounezet oll; ar Baradoz collet, setu collet oll: an traou al na zervichint mui ken nemet evit hor glac'har hag hon anken!

An droug-spered her gouar, hag evel en deuz c'hoant da noazout deomp, hen a laca he oll c'halloud, hen a implij he oll nerz hag he oll ijin evit hor c'holl en heur euz ar maro. Na hean neuze da spounta an ene paour-ze, o lacaat dirazhan ar grevuzded euz he bec'hejou, ar garvder euz a varnediguez Doue hag an heuz euz an ifern, evit tenna digant-han an esperanz, fontet var Passion ha maro Jesus-Christ.

Oh! er mare-ze hon devezo ezom euz eur re bennag evit pellaat divar

hon tro ar sperejou miliguet, evit hon difenn hag hor zicour dirag hor barner.

Piou e c'hellimp caout etouez an oll Zoent guelloc'h eguet sant Joseph? Hen eo patron ar maro mad; Doue en deuz roet guir d'ezhan da zifenn an eneo en ho zremenvan. Mar d'omp bet devot d'ezhan en hor buez, hor bezo leac'h da gonta var he vadelez en heur euz hor maro.

Ia, sant Joseph eo patron ar maro mad, dre ma eo Tad maguer d'hor barner. Moysez, carguet gant Doue da denna ar bopl Israel euz an Egypt ha d'he ren d'an douar santel, a zo bet cre aoalc'h evit miret ouz an Aotrou Doue da rei ar maro d'ar bopl dizent-ze; Doue, var ar poent da zistruja ar bopl-ze, a lavare da Voysez: Lezit ac'hanon da ziscarga va c'holer. Mez Moysez a bedaz ha Doue a bardonaz. Mez sant Joseph, patriarch santel, ho

calloud a zo brassoc'h c'hoaz eguet hini Moysez, dre ma'z oc'h gouarnour ha Tad maguer da Jesus hor barner!

Setu eun den o vont da vervel; eur mignon eo bet da zant Joseph hag ar Zant a zeu d'he zicour. Mont a ra da gaout Jesus, hor barner, ha setu ar pezh a c'hell lavaret d'ezhan: « Oh! va Mab, abalamour d'in-me, ho pet truez ouz ar pec'her keaz-ze; roit d'ezhan ar c'hraz da gaout eur guir glac'har d'he bec'hejou evit ma hen devezo ar pardon. Ar c'hraz-ze, he goulenn a ran diguenoc'h, o barner souverenn, dre an hano a Dad hoc'h euz bet roet d'in ken aliez a vech; dre an daouarn ho deuz labouret evit ho maga, dre an divrec'h ho deuz ho touguet, dre ar garantez am euz bet evidoc'h ha dre ar glac'har hag an anken am euz bet d'ho heul. » Ha c'hui gav d'ehoc'h sant Joseph a vezo refuzet gant Jesus? Oh! nan, ne vezo ket avad. Pedennou

sant Joseph a zo evel ken aliez a chaden a zalc'h divrec'h Jesus, hor barner, pa fell d'ezhan hor skei, abalamour d'hor pec'hejou.

Ar Zœnt al ho deuz evit guir ar galloud d'hon difenn, evel mignoned da Zoue; mez sant Joseph en deuz eur galloud calz brassoc'h hag evel mignon hag eval Tad da Jesus. Ar Zœnt a zo selaouet evel mignoned; mez pedenn sant Joseph a zo evel eur c'hourc'hemen, a lavar Gerson. Peguen euruz eo eta an den, en heur euz he varo, da gaout evit he zifenn Tad maguer he varner, eun alvocad ker galloudeg en eun affer euz pehini e tepant he Varadoz pe he ifern!

Sant Joseph a zo patron ar maromad abalamour an droug-speret a zouj d'he c'halloud; eun dra gaer eo evit an den beza difennet en heur euz he varo gant eur Zant euz a

behini an hano heb ken a ra d'an ifern crena.

Sant Joseph en deuz trec'het an ifern, pa en deuz diframet ar Mabig-Jesus digant Herodez. Ar roue fallacr-ze oa ar skeuden euz an diaoul a rea brezel da Jesus, ha na hean ket da stourm ouz an eneou mad ! Oh ! nag a Herodez a zo c'hoaz hirio an deiz ! O tont a benn euz Herodez, sant Joseph a drec'haz an droug-spered, pehini en em serviche euz ar fallacr-ze evel euz eur benveg.

Evit hen trugarecad da veza he zaveteet, Jesus en deuz roet da zant Joseph ar galloud da zifenn an eneou oc'h an droug-spered. Ar spered miguuet-ze a oar mad kement-se, setu perag na dosta nemet en eur grena oc'h guele eun den clan, a zo bet devot da zant Joseph ; gouzout a ra penoz pried Mari a zo savet huel en env hag eo braz he c'halloud. He hano heb ken

a zo aoalc'h evit ober d'ezhan kemer an tec'h. Piou eta ne vezo ket mall ganthan en em lacaat didan gouard eur zant ker galloudeg, eur zant hag a c'hell dre he brotection hon dioual ouz ar pec'het epad hor iec'hed hag hon difenn en heur euz ar maro.

Piou a c'hell guelloc'h beza patron ar maro mad eguet sant Joseph, maro e tre divrec'h Jesus ha Mari ? Gouren e rankimp evit guir ouz an droug-spered, en heur euz hor maro ; mez oc'hpenn gouzanv a raimp ive ar c'hlenved, ar boan, an anken hag ar spount euz ar maro : o maro, peguen c'houero eo ar sonj ac'hannoud. E creiz an anken hag ar spount-ze, ezom hor bezo da gaout eur mignon mad da lakaat eun tamig joa bennag en hor c'haloun hag eun tamig frankis en hor poaniou. Goude Jesus ha Mari, piou a gavimp guelloc'h eguet sant Joseph evit creat hor feiz hag hor fisianz ;

evit lakaat ar joa hag an nerz en hon ene, hag evit distana hor poaniou ?

Hen en deuz bet en he varo ar brassa joa hag ar c'haera confort a oufe an den da gaout, pa en doa en he guichen Jesus ha Mari, ha pa en deuz rentet he ene d'he grouer e tre ho divrec'h.

Guelet a reomp eta perag eo sant Joseph patron ar maro mad, ha perag e tleomp he bedi en heur euz hor maro : evel mignon ha Tad maguer d'hor barner, hen en deuz mui a c'halloud d'hon difenn.

Evel ma'z eo bet trec'h d'an droug-spered, hen a c'hell he gas kuit divar hon tro ; hag evel m'en deuz bet ar c'haera hag an eurussa maro a oufet da gaout, hen a zeu gant Mari, he bried, d'hor zicour da gaout eur maro mad. Pa'z eo guir e tleomp oll mervel, e tleomp oll, brema pa hon euz amzer c'hoaz, en em lacaat da bedi ha da

enori sant Joseph, patron ar maro mad.

O sant Joseph, pedit evidomp en heur euz-hor maro.

AN NAVET VARNUGUENT A VIS MEURS

Caromp hag enoromp sant Joseph

E peb amzer hag e peb bro, sant Joseph a zo bet enoret, meulet ha caret gant an oll gristenien vad. Nag a c'houeliou e deuz great an Iliz d'ezhan ! Nag a ilizou, nag a aoteriou, nag a vreurie-zou savet en he enor ! E peb leac'h e velomp, en amzer-ma, an dud a zoujanz Doue o redeg daved ar patriarch santel-ma, o veza ma c'hanavezont petra ez int dleour d'ezhan ha petra ho deuz da c'hedal euz he bers. Epad mis meurs dreist oll, e renter d'ezhan peb enor ha

peb trugarez ; e meur a leac'h e caver en ilizou eun engroez dirag he imach, en dra ma pad ar mis-ze. Peb christen mad a fell d'ezhan diskuez he anaoudegez vad da bried ar Verc'hez Vari ha da dad maguer Jesus hag ive caout pers en he vadelez evit an dud.

Ni ive, mar d'omp christenien vad, mar hon euz eur guir garantez evit Jesus ha Mari, ni a dle carout hag enori sant Joseph, abalamour d'ar pezh en deuz great evitho. Penoz a c'hell eun den caout eur galoun en he greiz heb carout he vam ? Peleac'h ema ar c'hrouadur mad ha ne gar ket he vam ? Hoguen Mari a zo Mam deomp oll. An Aotrou Doue en deuz he roet deomp, pa en deuz he lakeat da vam d'he vab en em c'hreat den, ha Jesus ive, en he destamant var ar groaz, en deuz roet Mari he vam deomp oll da vam. Oh ! pebez mam ! Mam Jesus ! Mam Doue !

Peguer mad, peguen tener eo caloun ar vam-ze evidomp ! roet e deuz e Mab muia caret evit savetei he bugale : dre garantez evidomp oll e deuz great gant Jesus var menez Calvar ar zacris euz he Mab evit rei deomp buez ar c'hraz, evit hon tenna euz an ifern hag evit hor c'has d'ar Baradoz. Penoz ne garimp ket eun hevelep Mam ? ha mar he c'haromp, e tleomp carout hag enori neb en deuz great vad d'ezhi. Piou en deuz caret, enoret, servichet an Itron Varia guelloc'h eguet en deuz great sant Joseph, he fried ? Sant Joseph en deuz lezet ganthi he guerc'hded, he brassa enor, he c'haera tenzor ; rag panefe se ne vije ket bet Mam da Zoue. Sant Joseph en deuz he maguet gant poan he zivrec'h, he c'honsolet en he zrubuillou, ha pourveet d'ezhi peadra en he oll ezomou e Bethleem, en Egypt, e Nazareth

hag e peb leac'h. Penoz eta ne garfemp ket sant Joseph, ha ne vemp ket leun a zoujanz evit eun den hag en deuz great kement evit Mari her Mam? Peleac'h ema an den a ve criz aoalc'h he galoun evit mancout da enori ha da garet eun den hag en defe great kement al evit he vam?

Ma vije bet en em gavet ho mam naturel en daill ma eo bet ar Verc'hez santel var an douar; ma vije bet ho mam er meaz euz he bro, etouez an estren, paour, en dioueramant a bep tra, ha gant eur c'hrouadur bihan da vaga, ha mar ho pije clevet ganthi e oa bet lojet, maguet ha guisket e ti eur c'halvez: an den mad-ze en doa kuiteet peb tra evithi, evit caout soursi anezhi. Eur roue criz ha dinatur a felle d'ezhan lacaat he c'hrouadur d'ar maro. Evit savetei he vuez d'ezhan e oa bet red d'ezhi tec'het kuit euz he bro, hag an den mad-ze

en deuz dilezet peb tra evit mont d'he heul, evit he difenn hag evit he maga. Oh! pe leac'h ema, eur vech c'hoaz, ar c'hrouadur ha ne garfe ket an den-ze, abalamour d'ar vad en deuz great d'he vam?

Setu couscoude ar pezh en deuz great sant Joseph evit Jesus ha Mari.

An Itron Varia, mam Jesus hag hor mam, e deuz caret hag enoret sant Joseph, dre ma oa he fried, hag eur pried leun a garantez hag a vadelez evithi: ne refuze netra d'ezhi; euruz en em gave en he boaniou, abalamour d'ezhi.

Ar Verc'hez Vari e deuz eta roet deomp ar scouer da garet ha da enori sant Joseph. He brassa plijadur eo gullet he fried enoret ha caret gant an dud; evel sant Joseph en deuz eur blijadur vraz o velet Mari, he bried, caret hag enoret var an douar.

O velet ar garantez e deuz ar Ver-

c'hez zantel evit he fried, penoz ne vezimp ket leun a garantez evidhan? O c'houzout e reomp plijadur d'hor mam oc'h enori sant Joseph, penoz ne raimpni ket eun dra bennag evit he c'hloar?

Mez mar dleomp enori sant Joseph, abalamour d'ar pezh en deuz great evit an Itron Varia, ha ne dleomp ket ive hen enori abalamour d'ar vad en deuz great da Jesus?

Guelet hon deuz peguer mad eo bet sant Joseph ouz Jesus hor mestr hag hor Zalver; peguement a garantez en deuz bet evit Jesus ha peguement a zoursi en deuz bet anezhan en he vugaleach, peguement a boan hag a drevel evit he vega hag evit savetei d'ezhan ar vuez. Penoz e c'hellimp lavaret e caromp Jesus, ma n'omp ket leun a zoujanz hag a garantez evit an hini en deuz great kement a vad d'ezhan? Jesus eo hon Tad; Jesus

a zo hor breur, evel den; Jesus eo hor guella mignon: sant Joseph en deuz bet kement a vadelez evit Jesus, ha ne zantimp ket en hor c'haloun eur garantez dener evit ar Zant braz-ma? Eur c'hrouadur mad a zo leun a anaoudegez vad evit an neb en deuz greet vad d'he dad; eur breur, eur mignon a gar neb en deuz greet vad d'he vreur ha d'he vignon.

Oh! en em hastomp da drugarecad sant Joseph evit ar vad en deuz greet da Jesus ha da Vari.

Jesus en deuz roet deomp ive ar scouer; Jesus en deuz discouezet deomp peguement e care sant Joseph, peguement a zoujanz en doa evidhan. Roet en deuz d'ezhan an hano a dad: sentet en deuz outhan epad an darn vrassa euz he vuez, he blijadur a oa beza ganthan; he garguet en deuz a zantelez hag e tre he zivrec'h eo maro.

Dre-ze ive Jesus he unan a lavare

da zantez Mac'harit euz a Gorton :
« Me a fell d'in ho pefe bemde eun
devotion dreist-holl da sant Joseph, va
Zad maguer. »

Setu ar pez a c'houlen Jesus digant
he vignoned : beza devot d'he Dad
maguer ; ar pez en deuz lavaret d'ar
Zantez-ze, a zo lavaret evidomp-ni.

Dre-se santez Thereza na ouie ket
penoz e c'heller caret Jesus ha Mari
heb beza devot da zant Joseph.

Trugarez, sant Joseph, evit ar vade-
lez hoc'h euz bet en ho puez evit Jesus
ha Mari.

*Pedit evidomp, sant Joseph, ha lacait
en hor c'haloun eur garantez vraz evid-
hoc'h.*

AN TREGONTVET DEVEZ A VIS MEURS

Petra da ober evit enori sant Joseph

Evel hon deuz guelet, Jesus ha Mari
ho deuz bet calz a zoujanz hag a garantez
evit sant Joseph ; tremenet ho deuz an
darn vrassa euz ho amzer en he gompagnunez
hag eat int beteg senti outhan. Roet ho deuz
dre eno ar scouer deomp euz an doujanz
hag euz an enor a dleomp da eur Zant
hag en deuz bet kement a bers er mysteriou
braz euz hor zilvidiguez.

An Aotrou Doue en deuz discouezet
deomp en Aviel ar reng huel hag ar garg
vraz en deuz bet sant Joseph var an douar,
pa lavar deomp eo pried d'ar Verc'hez
Vari ha pa ro d'ezhan an hano santel a dad
da Jesus. Petra a c'helle lavaret ken*evit
caout hor respet hag hor c'harantez evidhan.
An Iliz santel

e deuz greet goueliou d'ezhan ; ar gristenien vad, leun a anaoudeguez, ho deuz savet e meur a leac'h Ilizou caer en he enor. Breuriezou ho deuz en em lakeat didan he batronaj ; douguet e ve he imach e procession, en eur guer, bep seurt enor a renter da zant Joseph. Neket heb ræson e teu en amzer-ma an oll gristenien vad da enori sant Joseph ha da c'houlenn sicour digant-han ; rag he c'halloud a zo braz ha c'hoant en deuz da ober vad deomp, evel hon deuz lavaret.

Petra a dleomp da ober evit enori sant Joseph, a zo bet ker mad ouz Jesus ha Mari hag a c'hell c'hoaz hor zicour bemde ? Meur a dra a c'hellomp da ober evit enori sant Joseph. N'euz den, daoust peguer paour ha peguen dister bennag a oufe beza, ha n'en defe ar galloud da enori mad sant Joseph. Ar bastored a oa o tional ho

loened da noz Nedelec, na oant ket pinvidik, ha couscoude ho deuz cavet an dro da enori ar Mabig-Jesus e craou Bethleem, en eur zont d'hen enori ha da guinig d'ezhan ho zamig offransou.

Peb hini a dle ober hervez he c'halloud, ha galloud an den a zo braz, pa en deuz bolonte vad. Mar doc'h pinvidik, grit an aluzen ; kemerit en ho carg eur c'hrouadur paour ; maguit ha guiskithen ken a vezo gouest da c'hounid he voued ; pe kemerit da vaga eun den coz bennag ha neket mui nag evit clasg nag evit gounid. Grit an dra-ze dre garantez evit sant Joseph, hag e reot eun enor braz d'ezhan.

Grit da c'houel sant Joseph evel ma vije great guech al e Floranz : eno, eme an Tad Patrignani, peb penn tieguez a guemere da leina tri faour keaz da c'houel sant Joseph.

Eur marc'hadour euz ar guer a

Valanz, eme sant Vicent Ferrier, evit enori Jesus, Mari ha Joseph a guemere bep ploaz, da zeiz Nedelec, tri faour da leina en he di : eun den coz hag eur vam gant he c'hrouadur c'hoaz o tena.

An den mad-ze, o veza maro, hag epad ma oa eur mignon d'ezhan o pedi evidhan, a zeuaz d'he gaout hag a lavaraz d'ezhan e oa deuet Jesus, Mari ha Joseph davedan en heur euz he varo hag e lavarjont d'ezhan : « Epad ho puez c'hui a ziguemere ac'hanomp en ho ti en tri faour keaz-ze ; bremani a zo deuet ive d'hon tro d'ho tiguemer. » Ha ractal ez eaz gantho d'ar Baradoz.

Eun enor caer evit sant Joseph e ve ober Mis sant Joseph evel ma reer e meur a leac'h Mis Mari. Gouel sant Joseph a zo d'an naounteg a vis meurs ; dre-ze ar mis-ze a zo kemeret evit enori ar zant braz-ma. Kement-se

neket dicez da ober : n'euz ken nemet lavaret eur bedenn bennag ha cana eur c'hantik bennag dirag he aoter pe he imach ; ma ouzoc'h lenn, lennit eun dra bennag euz he vuez, pe en eul levr mad bennag.

Eur vreuriezh a zo en enor da zant Joseph. Ar re a zo enhi a choaz eun devez er bloaz evit enori ar zant-ma. En deiz-ze a dleer mont da gofez ha da gomunia, mar d'hoc'h disposet mad ; cle-vout an offeren gant devotion en enor da Presentation ar Mabig-Jesus en Templ ; tremen eun nebeud amzer o sonjal e poaniou hag e glac'har sant Joseph ; tremen an deiz-ze didrouz hag o sonjal aliez e sant Joseph, hag ober eun cevr a drugarez bennag. Mad e ve lavaret seiz *Pater, Ave*, ha *Gloria Patri* evit enori seiz glac'har sant Joseph, hag achui an deiz-se oc'h en em guinig da zant Joseph. Neb a vezo bet devot da zant

Joseph epad he vuez, a vezo consolet ganthan en heur euz he varo.

Evit enori sant Joseph, en em lekeomp da heulia eur vertuz bennag, evel ar burete, an douster, ar baourentez pe' ar garantez. Poaniomp d'en em zizober euz eun tech fall bennag, ha pedomp aliez sant Joseph d'hor zicour da denna ar pleg fall-ze euz hor c'haloun.

En em voazomp da lavaret bemde eur bedenn bennag en he enor.

Calz a draou a c'hellomp da ober evit enori sant Joseph ha neket dicez ho ober. Greomp da viana eun draig bennag en he enor, gant aoun ne vezimp tamallet gant Jesus ha Mari da veza manket da enori ho brassa mignon hag ive gant aoun da veza dilezet gant sant Joseph en heur euz hor maro ; rag gant ar memez muzul hon devezo roet d'ezhan, e vezo roet deomp. Mar domp bet he vignoned

hag he servicherien epad hor buez, sant Joseph hen talvezo deomp ; hen hor miro oc'h meur a zanjer ken evit ar c'horv, ken evit an ene ; hag en heur euz hor maro hen a zeuio d'hon diguemer hag a guinigo hon ene da Jesus ha da Vari.

Sant Joseph, pedit evidomp.

UNAN HA TREGONT DEVEZ A VIS MEURS

Meuleudi sant Joseph

O sant Joseph, c'hui hoc'h euz bet digant an Aotrou Doue ar c'haera hag ar preciusa grassou a ouffe an den da gaout. Hoc'h ene a zo bet santeleet gant graz ar Speret-Santel abarz ma'z oac'h ganet, ha bevet hoc'h euz er brassa santelez. En eur zont er bed ez oc'h en em gavet er penn kenta

euz an Testamant nevez hag er penn diveza euz an hini coz, heb beza nag euz an eil nag euz eguile ; mez oll ez oac'h da Jesus-Christ.

An Drinded Santel en deuz, dre he c'hrassou, ho savet dreist an oll Zoent ha greet ac'hanoc'h eun den burzuduz.

An Tad-Eternel en deuz ho lakeat da zerc'hel var an douar he leac'h a dad hag a c'houarnour d'he Vab unig.

Ar Speret-Santel en deuz ho carguet ouz he c'hrassou, evit m'ho pije gallet ober kement ha ma c'houlenne euz ho pers. Mab Doue, en em c'hreet den, en deuz ho choazet evit guir Bried d'he Vam zantel hag evit he Dad maguer var an douar.

Rouanez an env hag an douar e deuz bepred doujet d'ehoc'h evel d'he mestr ha d'he aotrou ; ho caret e deuz evel he fried mad ha santel, hag e

deuz bet enoc'h eur fizianz vraz, dre ma oac'h he gouarnour ha tad maguer d'he mab.

C'hui a zo bet leun a zantelez evel an Elez ; leun a furnez evel ar Cherubined ; leun a garantez evel ar Serafined.

Ho caloun a luc'he gant ar c'haera grassou a zo bet roet d'an oll Zoent var an douar.

Da c'hinevelez Mab Doue e craou Bethleem, Mari ha c'hui a zo bet an daou guenta ho deuz hen adoret evel ho roue hag ho Doue ; c'hui hoc'h euz mesket ho meuleudiou gant canticou an Elez ; c'hui hoc'h euz pedet gant ar bastored, hag en em guiniguet d'ezhan gant prezanjou an tri roue.

C'hui hoc'h euz bet an enor da rei da Vab unig an Tad-Eternel an hano santel a Jesus : ar c'haera hano a

ouffet da gaout. C'hui a zo bet test euz bugaleach Jesus ; ganthan ez hoc'h eet da bell bro. C'hui hoc'h euz he zouguet hag he vaguet gant ho labour, ha perz hoc'h euz bet en he boaniou hag en he drubuill.

Ho caloun hag ho tivrec'h ho deuz servichet da dron d'an hini a chom a oll viscoaz e gorre en envou. Meur a vech hoc'h euz he stardet var boull ho caloun gant doujanz ha gant carantez.

Labourad hoc'h euz ranket evit maga ho famil, ha caret hoc'h euz al labour hag ar boan.

N'hoc'h euz ket clasket an enoriou nag an danvez. Ar baourentez hag an oboissanz a ree ho plijadur. Ar vuez cuzet a ioa ho pressa joa. En ho tiig bihan e Nazareth ez oac'h eurussoc'h eguet ar rouaned var ho zron.

Berr e cav'jac'h hoc'h amzer e com-

pagnunez Jesus ha Mari, o comz euz mysteriou an env. Ho corv a ioa en ho labour, mez ho speret a oa e Doue.

E scol Jesus ha Mari hoc'h euz cavet eur mor a c'hrassou hag eun tenzor a vertuziou epad an tregont vloaz hoc'h euz bevet gantho.

Goude Jesus ha Mari, c'hui eo ive ar guella mestr a ouffet da gaout er vuez spirituel. Dre eur maro euruz, hoc'h euz achuet ho puez santel. E tre divrec'h Jesus ha Mari hoc'h euz rentet hoc'h ene d'ho crouer ; douguet eo bet gant an Elez d'al leac'h emedo Abraham hag an dud santel, hag a benn eun nebeud goude, unanet gant eur c'horv gloriuz, e savas en env da heul Jesus resuscitet.

O sant Joseph, ho puez a zo bet burzuduz penn da benn. Nobl dre ho ligned, paour en ho speret, santel en

hoc'h ene, guerc'h en ho priedelez, fur e peb tra, dispar en ho labour, euz en ho maro, gloriuz en ho resurrection, leun a c'hloar hag a blijadur er Baradoz : en eur guer, c'hui eo sant Joseph, Tad maguer hor Zalver ha Pried Mari ! Petra a ouffet lavaret ken ?

Ar grassou hoc'h euz bet digant Doue hag ar vertuziou hoc'h euz heuliet a zo burzuduz : her c'hredi hag hen ansaout a ran dirag an oll.

O sant Joseph, den heb he bar ! Ho carout a reomp gant respet hag hoc'h enori a reomp gant carantez.

Meulet ra vezo an Aotrou Doue da veza ho choazet hag ho savet ken huel. Estlammet eo va speret ha joa eo ganin pa velan enhoc'h kement a draou burzuduz. Plijet gant Doue, pehini en deuz roet d'ehoc'h eur santelez ker braz hag eur c'hloar ken

huel, rei d'an oll dud an anaoudeguez euz hoc'h hano hag eur garantez vraz evidhoc'h.

Ra zeuio an Aotrou Doue da lacaat e speret hag e caloun an oll eneoù mad ar zonch hag ar c'hoant da greski gloar Jesus ha Mari en eur veuli sant Joseph.

Consecration da zant Joseph

O sant Joseph beniguet, den just ha santel meurbet, Pried euruz da Rouanez an env hag an douar, ha Tad maguer da Jesus Salver ar bed, me en em ro d'hoc'h corf hag ene evit hoc'h enori hag ho servicha ; bezit, me ho ped, va zad, va gouard ha va scouer en hent euz ar zilvidiguez ; goulennit evidoun ar c'hraz da vale var ho roudou ha da ober peb tra evit gloar Doue. Grit ma c'hellin, oc'h heulia ho vertuziou, paea va dle da justiz Doue ha rapari an dismeganz hag ar glac'har ho deuz great va fec'hejou da galoun Jesus ha Mari. Va zicourit bemde epad va buez ha dreist peb tra en heur euz va maro. Amen.

Jesus, Mari, Joseph, renit bepred em c'haloun.

DEVOTION

AR RELIJIUZET DA ZANT JOSEPH

Sant Joseph, e scol Jesus ha Mari epad tost da dregont vloas, en deuz bet ar brassa anaoudegez euz ar vuez spirituel hag en deuz tanvet var an douar, a speret hag a galoun, ar joa hag an dudi a ra eurusded ar Zont hag an Elez, o veva gant Doue, evel ma lavar an Iliz en hymm euz he vouel.

Dre-ze ive n'ouffemp ket caout guelloc'h mestr eguet sant Joseph evit hor ren en hent euz ar vuez spirituel hag interior. Setu perag santez Thereza a lavare : Biscoaz den n'en deuz lakeet he fizianz e sant Joseph heb ober e berr amzer calz a hent er vuez spirituel.

Len a reomp e buez an Tad Lallemand, euz a gompagnunez Jesus, penoz ar relijiuz-ze a arruaz en unvanvez vraz gant

Doue dre zicour sant Joseph, kemeret ganthan da scouer er vuez spirituel.

Evel m'en deuz difennet ar Verc'hez santel epad ma oa var an douar, sant Joseph ive a zifenn an eneoù devot hag a ro an dorn d'ezho evit ho ren er vertuziou. Didan gouard ar mignon mad-ze, ker leun a garantez evit ar gristenien, piou na dle ket kredi e rei e berr amzer calz a hent er vertuziou hag ec'h arruo hep dale en huella santelez ?

Abaoe pell amzer zo an urzou relijiuz, ken a c'hoazet, ken a verc'hed, ho deuz kemeret sant Joseph evit ho fatron hag ho deuz eun devotion vraz d'ezhan ; hag e gwirionez, goude Jesus ha Mari, n'ouffiet ket caout guelloc'h eguet ar zant-ma evit hor ren er vuez spirituel. Sant Joseph en deuz bepred caret an urzou relijiuz, dre ma heuiller eno ar vuez cuzet e Doue, en deuz bet he unan e Nazareth gant Jesus ha Mari. Pa c'houarvez gant an urzou-ze ienaat e servich Doue ha dilezel ar reolen a heuilent en ho amzer guenta, sant Joseph na vank ket da veza a du gant an dud a galoun, digasset gant Doue evit ho reiz.

evel m'her guelomp e buez santez Thereza hag e leac'h al.

Sant Thereza, aliet gant Doue, en em lekeaz da reiz a urz Carmez, e pehini e oa leanez. Eun tam labour diez ha poaniuz meur-bed e devoa hi cavet ; calz e deuz bet da c'houzaon a bers an oll ; an droug-speret a ioa evel dirollet eneb d'ezhi. En he foan hag en he encrez ar zantez-ma a bede sant Joseph da gaout truez outhi ha da rei an dorn d'ezhi evit dont a benn euz he labour. Pa zave eur gouent nevez, ha calz e deuz hi savet, e roe d'ezhi hano sant Joseph hag her c'hemeraz da batron var he urz nevez.

Sant Joseph n'euz ket great ar skouarn vouzar. He guella mignon eo bet ; hi he unan hel lavar : « N'am euz ket biscoaz, emezhi, goulennet netra digant sant Joseph hep he gaout. » Dre-ze ive ez eo deuet a benn da ober eur vad braz e urz Carmez ha da renta enor ha gloar da Zoue.

O velet peguement e oant dliour da zantez Thereza ha da sant Joseph, an tadou euz a urz Carmez a guemeraz, er bloavez 1621, sant Joseph evit patron ho urz hag a rejont adare an offiz en he

enor ; rag an offiz a ree guechal ar relijiuzet en enor da zant Joseph a oa bet dilezet.

Adaleg ar bloavez 1680, gouel sant Joseph a oa lidet e urz Carmez, evel gouel ho fatron, d'an drede sul goude Pask, .ha divezatoc'h an Ilis a vercaz an deiz-ze evit ober gouel patronaj sant Joseph e peb leac'h. Dre-ze ma'z eo enoret hirio sant Joseph e peb leac'h euz an Ilis gatholic, hervez gourc'hemmen hon Tad Santet ar Pab Gregor XV hag Urban VIII, eo da urz Carmez e tleomp kement-se ; rag an urz-ze e deuz dihunet an devotion-ze a oa evel ancounac'het hag e deuz labouret d'he c'hreski e touez ar gristenien. An Aotrou Doue ive, evel ma lavar an Tad Bollandus, en deuz scuillet he c'hrassou gant larguentez var an urz-ze.

Urz sant Francez a Assiz a ziscouezaz ive abred he c'harantez evit sant Joseph. Sant Bernardin a Sienn a ziscouez aoalc'h peguement e oa enoret sant Joseph gant ar relijiuzet-ze. He scridou caer a zo leun a denerediguez evit pried an Itron Varia. Sant Pascal ha sant Per Alcantara, pere ho deuz labouret evit lacaat ho urz da

viret ar reolen guenta e doa bet digant sant Francez, a zo bet devot braz da zant Joseph hag ho deuz great ho galloud evit ma vije enoret ha servichet e rouantelez Spagn. Sant Per Alcantara, carguet da c'houarn an urz-ze, nevez reizet, a lekeaz, gant ali he relijiuzet, sant Joseph da batroun var an oll gouentjou a oa didan he garg. Aliez e lavare d'he relijiuzet caout eun aked braz da enori ha da bidi sant Joseph ho fatron. Ober a reaz lacaat var siel an urz imach sant Joseph gant ar mabig Jesus var he vrec'h hag en he zorn eur boked lys gant eur goulmig venn var ar penn.

Epad ma laboure eta santez Thereza evit creski enor sant Joseph e Breuriez Carmez, sant Per Alcantara her gree e urz sant Francez, hag ho daou int deut a benn, gant sicour sant Joseph, da lacaat peb hini he urz en he stad kenta ha da rei d'ezho eur vuez nevez flam.

Urz sant Dominik en doa ive calz a devotion da zant Joseph hag en deuz cresket he c'hloar ar muia ma c'helle. Abaoe ar bemzeg canved ne ket eanet da rei da zant Joseph mercou a respet hag a zoujanz,

ha d'he rei da anaout e peb leac'h. Albert-le-Grand, relijiuz euz an urz-ze, en doa reizet eun offis en enor da zant Joseph; mez evel na oa ket heuillet gant an oll, an Tad Gaëtan, general var an urz, a gargaz Isidor de Lill da renca eun offis nevez. Ar relijiuz-ma her greaz gant eun devotion ken tener ma en deuz cresket an devotion da zant Joseph e breuriez sant Dominik, hage leac'h al. Eur relijiuz al euz ar memez urz, an Tad Per, a aliaz ar Pab Paul tride euz an hano, da ober, dre an Ilis gatholic, ar gouel en enor da briedelez sant Joseph. Ar gouel-ze, a rejeur bete neuze dre aotreaj an Tad Santel ar Pab e meur a leac'h, a zo merket d'an daou varn'-uguent a viz guenver, hag an offis-ze a zo bet reizet gant ar memez Tad relijiuz.

Ar relijiuzet euz a urz sant Augustin a zo bet par d'ar re al en ho devotion da zant Joseph. Er bloavez 1632, ho gueler o lacaat ar c'houdenjou euz ho urz didan patronaj sant Joseph.

An Tadou Jesuisted, bugale sant Ignaz, n'ho dije ket credet beza e guirionez euz a gompagnunez Jesus, ma ne vijent ket de-

vot da zant Joseph, Tad maguer hor Zilver. Poaniet ho deuz hag a reont ato da astenn ar muia ma c'hellont an devotion da zant Joseph.

Hel lakeet ho deuz da batron d'an devotion hanvet *Ar Maro mad*, evit m'ho dije ar re a heuil an devotion-ze eur fizianz vraz e vijent sicouret, en heur euz ar maro, gant sant Joseph, maro e tre divrec'h Jesus ha Mari.

An Tad Santel ar Pab en deuz cavet mad ho dije eun offeren a gostez, evit goulenn digant Doue ar c'hraz da gaout eur maro mad, hag an offeren-ze a zo brema lakeat er Missel romen.

An Tadou euz a Gompagnunez Jesus, a zo carguet da ober missionou dre ar bed oll d'an dud divadez ha d'ar gristenien, ho deuz bet evit ar vech eur guir zevotion da zant Joseph, hag ho deuz en ho leandi pe eun ilis, pe eur chapel, pe eun aoter, dediet d'ar Zant-ma. Ne heanont da gas er broiou pell, hag etouez an heretiket, hag etouez an dud gouez, ar sclerijen euz ar feiz, hag er memez amzer an devotion da zant Joseph. En ho missionou e tougont

an oll da bidi ha da enori ar Zant-ma, hag e reont eur vad braz e peb leac'h : den na c'hell conta an eneu ho deuz gounezet da Zoue.

Sant Joseph, pedit evidomp.

AR ROUANTELEZIOU, AR BRINSED HAG AR ROUANED

HO DEUZ ENORET SANT JOSEPH

Abaoe ma eo bet plijet gant Doue rei da anaout d'ar bed christen gloar, santelez ha galloud sant Joseph, cuzet epad keit amzer, e c'heller lavaret anezhan ar pezh a lavare ar roue Assuerus euz Mardoche : « Evel-se e tlee beza enoret neb en deuz cavet mad ar roue enori (1). »

E guirionez hano sant Joseph a zo savet huel meurbed gant Doue, pa her gueler, abaoe meur a gant vloaz, ker brudet er bed oll, adaleg ar Zao-Heol betek ar C'huz Heol ; ha neket ar bopl munut heb ken a

(1) Esther, c. 6.

veul hag a enor ar zant braz-ma ; mez an dud a skiant, beteg ar brinsed hag ar rouaned a bleg ho fenn hag a laca ho c'hurunen e hars he dreid. Penoz e c'helfe neuze an devotion da zant Joseph mancout da veza diguemeret mad e peb leac'h ha gant an oll !

En Allemagn e velomp an impalaer Leopold kenta oc'h en em vouestla da zant Joseph, hen hag he rouantelez ; oc'h ober d'ezhan goueliou caer ; oc'h he c'hervel mirer ar peoc'h. Evit guir calz e oa dliour ar prinz-ma da zant Joseph ; he zicouret en doa d'en em zizober euz an Turket, d'ho lacaat er meaz euz ar vro. Eur c'hraz al c'hoaz : An impalaer en em jale o vellet n'en doa mab ebet evit pignat var an tron en he c'houde. Leun a fizianz e sant Joseph, e c'houlennaz, dre bedennou ar zant, eun heritour. Evit ma vije selaouet guelloc'h he bedenn, e reaz emban e peb corn euz ar vro e kemere sant Joseph evit patron ar rouantelez hag e reaz ober d'ezhan eun imach arc'hant hag eur baniel seiz, brouedet en aour. Epad eiz de e oa great processionou gant eur brezeguen

bemde var meuleudiou sant Joseph. Selaouet oa bet he bedenn : a benn nao miz e oa ganet d'ezhan eur mab hag an impalaer, he dad, a roaz d'ezhan an hano a Joseph.

Er Belgiq, an archiduchez Isabel-Clara e devoa eun devotion ker braz da zant Joseph, ma teuaz an oll dud euz he rouantelez d'he heulia ha da ober eur gouel berz en enor da zant Joseph : en deiz-ze den na ree eun taol labour.

E rouantelez Franz e veler abred an devotion da zant Joseph oc'h en em astenn e peb leac'h. Er guær a Avignon eo bet savet e Franz ar c'henta chapelioù en enor da zant Joseph hag int bet beniguet gant an Tad Santel ar Pab Gregor XI.

Anna-Thereza d'Autrich, rouanez a Franz, e deuz bet eun devotion ker braz da zant Joseph, ma roaz d'he map hena an hano a Joseph oc'hpenn an hano a Louis a zougue.

Rouantelez Spagn, ker devot d'an Itron Varia, ne c'helle ket mancout da enori sant Joseph, dreist peb tra abaoe ho devoa santez Thereza ha calz a Zœnt al ker brudet ar Zant-ma.

Greomp ive eur zell var an Itali hag e cavimp eno dreist an oll vroioù al eur guir zevotion da bried Mari. Penoz n'en dije ket ar vro-ze enoret sant Joseph ha great d'ezhan gouelioù caer pa'z eo guir eno e caver he vaz, he vizou, eun tam euz he vantel hag he diig bihan, en devoa Nazareth, hanvet brema : An Itron Varia Loretta. An tiig-ze a zo bet douguet en he bez gant an Ælez, euz an Douar Santel da guichen ar guær hanvet Ancon. Ar guær a Floranz, abaoe pell amzer zo, en em brepare da vouel sant Joseph dre eun naved dirag aoter ar Zant, ha devez ar gouel oa devez ar garantez e kenver ar beorien.

Evit enori sant Joseph, an Tad pe ar penn euz ar Famil-Zantel, peb tad a famil, er guær-ze, ma en doa pe a dra, a guemere, da c'houel sant Joseph, tri faour keaz : eun den coz, eur c'hreg hag eur c'hrouadur, hag ho lakee da azeza oc'h he daol. Ar re n'ho devoa ket pe a dra d'hen ober, a ree teir aluzen pe bep a aluzen da dri faour keaz.

An ol guærioù al euz ar vro-ze a zo ive leun a zevotion evit Mari ha Joseph.

Mez comzomp euz ar guær a Rom. Rom

eo ar penn hag ar galoun euz ar feiz hag euz ar relijion gristen ; rag hon Tad Santel ar Pab a zalc'h leac'h Jesus-Christ var an douar hag a Rom ema azezet var gador sant Per. Euz a Rom eta eo deut hag e tleje dont an devotion guirion da zant Joseph hag ez eo en em scuillet tre ar bed evel an dour o tiredeg euz ar vamen.

Abaoe en deuz ar Pab Clement X greet euz a vouel sant Joseph eur zolennite vraz ; an oll gristenien a zo en em lakeat a galoun da enori ar Zant braz-ma. Pa en doa ar guer a Rom savet ilizou en enor da zant Joseph, ar c'hœriou al a guemeras scouer varnezhi. Diou vreuriez a zo e Rom, pere a helfe beza bet marteze an abeg euz an oll vreuriezou a zo e peb leac'h er broiou catholic en enor da zant Joseph. Unan anezho eo Breuriez ar Guilvizien, savet er bloavez 1539, hag e deuz eun ilis caer meurbed.

Derc'hel mad a reer bepred d'an devotion da zant Joseph, pe evit lavaret guel, creski a ra bep ploaz. N'euz ket pell c'hoaz, er bloavez 1861, ar c'hardinal vikel hon Tad Santel ar Pab, a lavare en he lizer er penn kenta euz ar c'horais : « Evel ar

c'hatekis a zigoro er bloavez-ma epad eizvede gouel sant Joseph en oll bareziou ; araog ma vezo canet Litanioù an Itron Varia, e vezo lavaret eun Oræson gant teir *Fater* ha teir *Ave Maria* en enor da zant Joseph, evit ma plijo ganthan implij evidomp he c'halloud braz dirag Doue, hag evit ma teui da bellaad ar bar amzer tenval a zo pell zo uc'h penn an Ilis, da zigas ar peoc'h, da rei ar victor d'ar religion, da ziscara he enebourien dirollet ha d'ho c'honvertissa.

Ar re zo carguet da ober catekis, a raio anaout e berr gomzou peguer braz ha peguer cre eo evidomp dirag Doue galloud ar patriarch santel sant Joseph. »

Setu ar fizianz vraz e deuz an Ilis e sant Joseph. Setu penoz eo bet enoret e pep leac'h gant ar brinsed hag ar rouaned. Calz a draou e ve da lavaret var ar poent-ma, mez aoalc'h am euz lavaret evit discouez ar stad a zo bet great anezhan e peb bro. Ah ! plijet gant Doue ma vezo ive enoret ganeomp-ni.

Sant Joseph, pedit evit Breiz-Izel.

SEIZ GLAC'HAR HA SEIZ JOA

Sant Joseph

Evit enori sant Joseph ne oufemp ober netra guelloc'h eguet sonjal aliez en he c'hlac'har hag en he joa. Ar guella merk euz ar garantez etre daou vignon eo ho guelet o kemerout perz an eil e poaniou hag e joa eguile ; rag pa garomp eur re bennag ez omp douguet da guemerout perz en he joa hag en he boan : caloun an den a zo greet evel-se. Mar caromp sant Joseph, e sonjimp eta aliez en he joa hag en he c'hlac'har. Mez penoz e c'helfemp hen ober heb anaout he vuez, heb gouzout ar pez a zo bet tremenet en he speret hag en he galoun.

Plijet eo bet gant ar Spered Santel lavarret deomp eun darn euz a c'hlac'har hag euz a joa sant Joseph ha kemeret en deuz bet ar boan da lacaat ho scriva en Aviel,

evit m'hor bije ho c'havet evit sonjal aliez en-ho, evit maga hor c'harantez e kenver ar Patriarch santel-ma hag ive evit mad hon ene. Rag petra a c'helfe guelloc'h hor c'hennerza en hor poaniou hag en hon encrez e creiz trubuillou ar bed eguet ar guel euz poaniou hag encrez an den santel-ma ker caret gant Doue, ken enoret ha ker doujet gant Jesus ha Mari. Ma en deuz bet joa da heul Jesus ha Mari var an douar, poan hag encrez ne deuz ket manket d'ezhan hed he vuez ; ma en deuz bet var an douar an tanva euz joa an env, bet en deuz ive an tanva euz croaz Jesus-Christ. Nag a vech eo bet treuziet he galoun gant an anken !

Nag a vech eo darbet deomp coll caloun e creiz ar boan hag an drubuill euz ar vuez-ma ! Buhan aoalc'h e c'hellomp a vechou en em rei da gredi ez omp dilezet gant Doue, ken teval eo hor speret, ker mantret eo hor c'haloun. Ah ! na vad a rafe deomp neuze ar zonch euz seiz glac'har ha seiz joa sant Joseph ! Eur zell var boaniou ar Patriarch santel-ma a lakeo ar sklerijen da darza en hor speret

hag ar joa da bara en hor c'haloun. Ma edoc'h en devalijen hager boan, ma edoc'h glac'haret, sant Joseph en deuz tremenet dre an hent-ze. He vuez da heul Jesus ha Mari a zo bet kemmesket a joa hag a c'hlac'har.

Greomp eta eur zell var he boaniou ha var he joa. Lacaat a ran ama varlerc'h eur guer bennag var he zeiz glac'har hag he zeiz joa evit kennerza an neb en devezo ar vadelez da lenn ar pennadig scrid-ma, hag ive evit creski muioc'h-vui ar garantez evit ar zant-ma hag hor fisianz en he c'halloud hag en he vadelez en hor c'henver.

KENTA GLAC'HAR SANT JOSEPH

Guenevelez Jesus-Christ a c'hoarvezaz evel-henn, eme sant Vaze en he Aviel : Mari, o veza demezet gant Joseph, en em gavaz brazez dre ma e doe concevet a berz ar Speret Santel, diagent ma oant eet kevret. Ha Joseph he fried, o veza eun den just, pehini ne felle ket d'ezhan tenna

mes varnezhi, a zonjaz en em denn kuit e cuz.

(Aviel sant Vaze, kenta pennad).

Dre ar c'homzou-ma an Aviel a ziscouez deomp sclear myster an Incarnation ha guerc'hded an Itron Varia. Lavaret a ra deomp e doa Mari pried Joseph, concevet he Map aberz ar Speret Santel, dre nerz ha galloud an Aotrou Doue, ha sant Joseph he fried n'en doa perz ebet e guenevelez Jesus-Christ. Dre-ze eta Mari a zo chomet bepred guerc'hez ; rag guerc'hez e oe abarz e doa concevet he Map ha guerc'hez eo chomet oc'h he lacaat er bed, ha guerc'hez eo bet a c'houdefe hed he buez.

Joseph he unan a rent testeni da vuerc'hded he bried santel, oc'h en em jala o c'houzout petra da ober, pe chom gant Mari pe en em denn kuit.

Gouzout a ree ez oa guerc'hez ha couscoude e vele ez oa douguerez ; ne ouie ket penoz e oe c'hoarvezet kement-se. Ne c'havnaveze ket c'hoaz myster an Incarnation.

Eun den just ha santel e oe ; ne felle ket d'ezhan ober mes d'he bried oc'h he c'hass

kuit, ha ne felle ket d'ezhan ken nebeud chom ganthi gant aoun da veza tamallet. Nec'het braz e oe ; diez e oe he benn o c'houzout petra da ober.

Mari he unan, me a gred ervad, ne oe ket heb gouzout ar boan en doa Joseph he fried, nag heb kemerout perz en he anken, ha couscoude ne lavare guer, o veza ne felle ket d'ezhi discuilla mysteriou an Aotrou Doue araog an amzer. He fisianz a zo e Doue ; d'ezhan da gass an traou da benn, evel ma plijo ganthi. Gouzout a ree hen dije great evit ar guella.

Evelato, nag a boan, nag a anken evit sant Joseph er mare-ze, heb dizoan ebet aberz an dud ! Setu petra a c'hoarvez aliez gant an dud vad, daoust d'ho zantelez ; Doue a zigass d'ezho bep mare poaniou braz evit ma vezo guelet ho feiz hag ho c'harantez. Sant Joseph a guemer an traou-ze euz a zourn an Aotrou Doue heb en em glemm ; n'en deuz ket tamallet na Mari he bried, nag an Aotrou Doue, evel ho dije greet meur a hini al en he lec'h. Na braz e oe he zantelez !

Pebez kentel evidomp, pa teu eur boan bennag beteg henomp. En hor poaniou,

en hor glac'har er vuez-ma, kemeromp scouer var Mari ha Joseph. Pedomp Doue da rei deomp sclerijen evit anaout ar pezh a fell d'ezhan, ha nerz da heuilla bepred he c'hourc'hemenou.

Sant Joseph, pedil evidomp.

Eur *Bater* hag eun *Ave* en enor da c'hla-c'har sant Joseph.

KENTA JOA SANT JOSEPH

« Hoguen, pa zonje ober kement-se, da
 » lavaret eo, en em denn kuit e cuz, setu
 » Eal an Aotrou Doue en em ziscouezaz
 » d'ezhan dre he gousk, o lavaret : Joseph,
 » map da Zavid, n'az pezh ket a aoun o
 » kemerout gan-ez Mari da c'hreg : rag ar
 » pezh a zo ganet enn-hi a zeu euz ar Speret
 » Santel. — Hoguen, Joseph o veza dihu-
 » net, a reaz ar pezh a oe gourc'hemenet
 » d'ezhan gant Eal an Aotrou, hag e tal-
 » c'haz he c'hreg gant-han. »

(*Aviel sant Vase*, kenta pennad).

Mar fell da Zoue caout mercou anat euz a feiz an den ha guelet hag hen a zo carantez en he galoun, o tigas dezhan poan hag anken, dont a ra heb dale d'hen diboania. Pa oa sant Joseph nec'het o clask gouzout petra da ober, pe tec'het diouz he bried pe chom ganthi, Doue a zigassaz eun Eal d'he gaout evel m'her gueler en Aviel. Braz e oe eta glac'har sant Joseph, pa ranker caout eun Eal evit hen diboania. Hoguen na braz a oe ive he joa o velet unan euz a Ælez an env o tiskenn beteg en-han hag o comz outhan ! Nag euruz e oe o clevet e oe arruet myster an Incarnation, e oe Map Doue en em c'hreet den ! Pell a oe e c'hirvoude hag e pede evit ma teuje Doue da gaout truez ouz ar bed ha da zigass ar Zalver a dleje dont. Na braz e oe he joa pa glevaz euz a c'hinou an Eal e oa Mari Mam Doue, e tlie he bried he lacaat er bed ! Pebez enor evidhan beza pried da Vam Doue ha Tad maguer da Zalver ar bed ! Pebez joa evidhan o clevout an Eal o lavaret d'ezhan ne dlie ket caout aoun o chom gant he bried !

Joseph, eme an Aviel, a reaz ar pezh a oe

gourc'hemennet d'ezhan gant an Eal hag e talc'haz he c'hreg ganthi. Ia, dalc'het en deuz Mari ganthi ha chomet eo bet ganthi beteg ar maro. He difennet hag he maguet en deuz gant joa, o labourad hed he amzer var bouez he zivrec'h, ha pourveet en deuz d'he oll ezomou.

Pebez kentel e cavomp aman oll ha dreist peb tra ar priedjou !... Petra a dall eta en em jala ? Ar joa na zale ket da zont goude ar glac'har. Doue a zo eun tad mad, leun a druez ouz he vugale ; lekeomp hor fisianz ennan e pe stad bennag en em gavomp.

Sant Joseph, pedit evidomp.

Pater, Ave, en enor da guenta joa sant Joseph.

EIL GLAC'HAR SANT JOSEPH

« C'hoarvezout a reaz en deziou-ze ma
» oe embannet eur gourc'hemen euz a
» berz Cesar-August, evit ma vije kemeret
» hanoiou an dud dre ar bed oll... hag an
» oll a iee da rei ho hanoiou peb hini en

» he guæ. Joseph eta a bignaz euz ar
 » guæ a Nazareth e bro Galilea, da Veth-
 » leem, kêr David, e bro ar Judea, dre
 » ma oa euz a di hag euz a ouenn David,
 » evit rei eno he hano gant Mari he bried
 » pehini a oa douguerez. Hoguen epad ma
 » oant eno, e teuaz termen Mari da oui-
 » lioudi ; hag e lekeaz er bed he Map kenta
 » ganet, hag o veza he vailluret gant trezen-
 » nou, e couscaz anezhan ebarz ar c'hraou,
 » dre na oa ket a blas evit-ho en hostaleri. »

(*Aviel sant Lucas, kenta pennad*).

Ma en doa bet sant Joseph eur joa vraz
 o clevet gant an Eal e oe arruet an amzer
 merket gant Doue evit diskenn var an
 douar, evit dont da zavetei ar bed ; e oe
 Mari he bried dibabet e mesg an oll groa-
 guez evit beza he vam hag e tlie chom
 ganthi evit derc'hel lec'h a dad da Jesus ;
 braz eo bet ive he anken hag he c'hlae'har,
 pa velaz Jesus ganet en eur c'hraou, gour-
 vezet var eur vriadig plouz. Caer en doa
 bet Joseph goulenn lojeiz e Bethleem,
 den na zigoraz an nor d'ezhan ; en eur
 c'hraou e rankaz mont gant Mari hag eno

e creiz an noz, e creiz ar goan, en eul lec'h
 distro, e velaz he Zoue en em c'hreet den :
 eno e taoulinaz d'hen adori hag e kemeraz
 ar c'hrouadur divin e tre he zivrec'h da
 boca d'ezhan ; he starda a ra var boull he
 galoun o vesca he zaelou gant daelou ar
 Mabig Jesus. Na poaniuz e oe evit sant
 Joseph guelet Jesus ker paour, en diouer
 a bep tra, en eur c'hraou distang a bep
 tu ! Mantra a ree he galoun o velet crouer
 an Env hag an douar diskennet ken izel
 hag e creiz ar baourentez ar vrassa ; caret
 en dije ober vad d'ezhan ha miret diout-
 han caout kement a boan. O pourvei d'he
 ezomou hervez he c'halloud, hen dic'haoue
 c'hoaz ar muia ma c'helle dre he feiz hag
 he garantez.

Deomp ive gant Mari ha Joseph da graou
 Bethleem, adoromp eno a speret hag a
 galoun ar Mabig-Jesus ha mescomp hon
 daelou gant he re. Caromp ar baourentez
 evel en deuz greet ar Famil-Zantel.

Sant Joseph, grit ma carimp Jesus.

Eur *Bater* hag eun *Ave* evit enori eil
 glac'har sant Joseph.

EIL JOA SANT JOSEPH

« Bez ez oa ebarz ar c'harter-ze tud
 » pere a veille bep eil rumm epad an noz
 » o tiouall ho loened. Ha setu Eal an
 » Aotrou en em ziscouezaz en ho c'hichen,
 » hag eur sclerijen vraz a luc'haz en dro
 » d'ezho hag ho devoe aoun ken a gre-
 » nent. Mez an Eal a lavaraz d'ezho : N'ho
 » ped ket aoun ; rag digass a ran d'ehoc'h
 » kelou eur joa vraz, evidoc'h hag evid
 » an oll bobl. Rag ganet ez euz d'ehoc'h
 » hirio eur Zalver, pehini eo ar C'hrist,
 » an Aotrou. Ha setu aman ar merk evit
 » hen anaout : caout a reot eur c'hroua-
 » dur mailluret ha gourvezet en eur
 » c'hraou. Ha kerkent en em gavaz gant
 » an Eal eun arme vraz a sperejou celes-
 » tiel, pere a veule Doue hag a lavare :
 » Gloar da Zoue en huella euz an envou
 » ha var an douar peoc'h d'an dud a vo-
 » lontez vad.

» Pa oe eat an Ælez kuit ha pignet en
 » Env, an dud-ze a lavare an eil d'eguile :
 » Deomp bete Bethleem ha guelomp ar

» pez a zo c'hoarvezet hag a zo discleriet
 » deomp gant an Aotrou. Hag e teujont
 » timad hag e cavjont Mari ha Joseph, hag
 » ar c'hrouadur gourvezet en eur c'hraou.
 » Ha pa er gueljont, e c'hanavjont ar
 » virionez euz ar pez a oa bet lavaret
 » d'ezho divar benn ar c'hrouadur-ze. Ha
 » kement hini a glevaz an nevezenti, a oe
 » souezet braz, kercoulz ha gant an traou
 » a lavare d'ezho ar vesaerien-ma. Hoguen
 » Mari a zalc'he coun euz an traou-ze oll,
 » o tistremen anezho e goeled he c'haloun.
 » Hag ar vesaerien a zistroaz d'ar guær en
 » eur veuli hag o c'hlorifia Doue euz
 » ar pez ho doa clevet ha guelet, hervez ma
 » oa bet lavaret d'ezho. »

(*Aviel sant Lucas, eil pennad*).

Ia, braz e oe glac'har sant Joseph o velet
 tud Bethleem ken didruez outhan hag
 oc'h Mari he bried dare da ouilioudi, o
 serra ho doriou outho bete ma rancjont
 mont da eur c'hraou da dremen an noz ;
 rannet a oe he galoun o velet he Zoue
 ken disprizet gant an dud o tont er bed
 ma ne gavjer den da zigueri an or d'ezhan

ha ma rank mont en eur c'hraou e mesg' al loened. Mez braz eo bet ive joa sant Joseph da zevez guenevelez hor Zalver Jesus-Christ. Ia, dridal a ree he galoun gant al levenez, pa teuaz ar Verc'hez Vari da lacaat he Mab e tre daouarn he fried. Gant pebez doujanz e kemeraz ar buguel divin, e pocaz d'ezhan hag her stardaz var boull he galoun ! Gant pebez feiz ha gant pebez carantez birvidig hen adoraz e craou Bethleem ! Nag euruz en em gave, daoulinet e kichen Mari, oc'h adori ar Mabig-Jesus ! Ma en doa bet poan bete neuze, paet mad ez oa euz he boan. Nag a vall en doe da velet he Zalver ! Nag a vech en doe hirvoudet ha pedet Doue da zigass ar Zalver beniguet-ze, ha setu em breman dirazhan, em ganthan, em brema e tre he zivrec'h, beva a ra en he guichen ! Creski a ra c'hoaz joa sant Joseph, pa c'herruaz ar vesaerien pe ar bastored, pa glev gantho an traou burzuduz lavaret d'ezho gant an Eal epad an noz, pa ho c'hlev o comz euz ar c'hane melodiuz a oa bet gant arme ar sperejou celestiel, o lavaret : Gloar da Zoue e gore an envou ha var an douar peoc'h d'an dud a volonte

vad. Ma ez oa eat an traou-ze doun e caloun Mari hag e talc'he coun anezho, Joseph ive ho mire e goeled he galoun hag ho zremene aliez dre he speret.

O craou Bethleem, na c'houi a zo burzuduz ! Piou a oufe biken lavaret ar mysteriou braz a zo tremenet enhoc'h ? An Elez a oa estlammet. Piou a c'helfe discleria ar joa a oa e caloun sant Joseph hag e caloun Mari d'an ampoent ma teuaz Jesus er bed ? Ne deuz nemet Doue hag her goar.

Ah ! en hor poaniou hag en hor glac'har, deomp ive gant Mari ha Joseph da graou Bethleem ; tosteomp gant ar bastored oc'h ar Mabig-Jesus ; adoromp anezhan ha goulennomp digant-han he c'hressou. Jesus hon dizamo euz hor bec'h glac'har, Jesus a lakeo ar joa en hor c'haloun hag e teuimp ac'hano en eur gana gant an Elez : Gloar da Zoue e gore an envou ha peoc'h var an douar d'an dud a volonte vad.

Sant Joseph, pedit evidomp.

Eur Bater hag eun Ave en enor da joa sant Joseph.

TREDE GLAC'HAR SANT JOSEPH

« Ha pa oa deut an eizved dervez e pe-
 » hini e tlie ar buguel reseo ar Circonci-
 » sion, e oe hanvet Jesus, hano annonset
 » gant an Eal abars ma oe concevet e cov
 » he vam. »

(*Aviel sant Lucas, eil pennad.*)

Eiz dervez goude he c'henevelez, Jesus-
 Christ a fellaz d'ezhan tremen dre lezen ar
 Circoncision, eul lezen denn. Al lezen-ze, o
 veza evit ar bec'herien hag evit effaci ar
 pec'het, ne oe ket great evit Jesus, sant ar
 Zoent, pe ar zantelez ar vrassa e oufet da
 gaout, dre ma oa Doue en em c'hreat den. O
 velet ar bed oll oc'h en em rei da adori an
 idolou, o kemer evit Doue bep seurt traou
 crouet, an Aotrou Doue a zispartiaz a vesg
 an dud eur bobl hag e vije d'ezhan, eur bobl
 hag hen anavje evit Doue, evit he vestr hag
 evit he grouer. Kemer a reaz Abraham evit
 beza tad ar bobl-ze, hag evit ma vije anave-
 zet ar bobl-ze euz ar re al, e reaz d'ezhan
 eur merk, o lavaret d'ezhan : « Setu aman
 ar marc'had a rann etre me ha te da veza mi-
 ret gan-ez ha gant da ouenn en da c'houde :

an oll voazet en ho touez a vezo circonciset.
 Ar buguel a vezo circonciset a benn an eiz-
 ved dervez en ho touez. » Pa oe deut eta an
 eizved dervez, Mari ha Joseph a heuillaz al
 lezen a c'hourc'hemene rei ar Circoncision
 d'ar yugale. An Aviel na lavar ket piou a reaz
 ar Circoncision da Jesus nag e pelec'h e oe
 greet ar ceremoni-ze. Credi a c'hellomp gant
 sant Epiphan ha gant meur a hini all ez oa
 bet greet e craou Bethleem, e leac'h ma oa
 bet ganet hor Zalver. Hervez ar c'hiz, ar
 guerent ho-unan a roe ar Circoncision d'ho
 bugale, evel m'her gueler e meur a leac'h euz
 ar Scritur-Zantel ; ar pez en deuz greet da
 veur a hini sonjal ez eo bet hor Zalver
 circonciset gant Mari ha Joseph. Ha perag
 ne vije ket ? Pelec'h caout daouarn puroc'h
 ha santelloc'h eguet daouarn Mari ha
 Joseph evit touch oc'h corv santel ar Ma-
 big-Jesus ? Mari a c'helle lavaret neuze
 gant pried levr ar c'hanticou santel : « Ar
 mirr, da lavaret eo, goad he Map, a zivere
 euz va daouarn ha va biziad a oa leun a
 virr ar c'houeca (1). »

(1) Le père Giry, *Vie des Saints*.

Daoust gant piou eo bet scuillet goad Jesus-Christ evit ar c'henta guech, na poaniuz e oe evit Mari ha Joseph guelet goad ar Mabig-Jesus o redeg didan countel ar Circoncision !

Pebez calonad evit Joseph, ker leun a feiz hag a garantez evit Jesus, guelet ar goad preciuz-ze o redeg evit heuilla eul lezenn ha ñe oa ket greet evidhan hag evit prena an eniou ! Piou a oufe lavaret ar pez a dremene neuze e caloun Tad maguer hor Zalver ? Gouzout a ree e oe Doue ha den hag her guele o scuilla he voad evit silvidiguez ar bed da c'hedal ma vije maro var ar groaz. Na piz e tastumaz gant doujanz ar goad preciuz-ze ! Na truez en doa oc'h ar c'hrouadur divin !

Oh ! na ker ez omp-ni coustet da Jesus ! na braz eo an dismeganz a ra ar pec'het da Zoue !!

Sant Joseph, pedit evidomp.

Eur *Bater* hag eun *Ave* en enor da c'hlac'har sant Joseph.

TREDE JOA SANT JOSEPH

« Pa oe deut an eizved dervez... e oe » hanvet Jesus, hano annonset gant an » Eal abars ma oe concevet e corv he vam. »

(*Aviel sant Lucas, eil pennad.*)

Na caer eo eta an hano a Jesus ! An Tad Eternel eo hag en deuz roet an hano-ze d'he Vap en em c'hreet den ; rag an Eal en doa hen digasset var an douar hag he lavaret da Vari ha Joseph, en doa he glevet ebars en Env. Evelato, Mari ha Joseph ho deuz bet urs digant Doue da rei an hano caer-ze d'ho Map. Mari he vam e doa guir da rei an hano d'he Map ; Joseph ive, petra ben-nag n'en doa pers ebet e guenevelez hor Zalver, en doa guir da rei d'ezhan an hano, eme sant Ian Chrysostom, pa dlie douguen an hano a Dad maguer da Jesus. Dre-ze an Eal a reaz urz da Joseph da rei an hano d'ezhan, o lavaret : « Ha c'houi her galvo Jesus, rag hen eo hag a saveteo he bobl euz he bec'hejou. » Ne oa ket hano al ebet a zere guelloc'h euz Map Doue en em c'hreat den ; rag Jesus a zinifi Salver,

ha Jesus a zo hor guir Zalver. Bez ez eo Doue ha den, hen eo a bardon ar pec'hejou, a neta an eniou, a drec'h ar maro hag an ifern, a zalc'h an droug spered chadenet ; hor c'harga a ra a sclerijen, ho lacaat a ra e stad a c'hraz ; hen hor gra bugale da Zoue, ho c'hennerz eneb an droug, ho c'hendalc'h er mad, a zigor deomp doriou an Env hag hor c'hass ganthan d'ar vuez eternal.

An hano a Jesus a zigass en hor spered kement tra en deuz greet ha gouzanvet hor Zalver : He c'henevelez, he bassion, he varo hag he resurrection, hag e kement tra en deuz greet ha gouzanvet, e velomp sclear he hano hag he garg a Zalver. Mar d'eo ganet en eur c'hraou, ma en deuz scuillet he voad didan countel ar Circuncision, ma en deuz en em dennet en Egypt, ma en deuz renet epad tregont vloaz eur vuez cuzet ha disprizet, ma en deuz bet kement a boan o prezeg he Aviel, mar d'eo bet staguet ouz ar groaz, mar d'eo bet savet euz ar bez, mar d'eo pignet en Env, ne d'eo ken nemet evit beza e guirionez Jesus ha Zalver, ne d'eo ken

nemet na vije manket netra euz ar pezh a helle talvoud d'hor zilvidiguez. Pa her galvomp Jesus, ni a lavar en eur guer eun Doue en em c'hreat den, eun Doue en em izeleet, paour, er boan ; ni a gomz dre eno euz eun alvocad oll gallouduz a zo bepred oc'h hon difen en Env hag a scuill bepred varnomp he vadou ken evit ar c'horf, ken evit an ene. An hano santel a Jesus a zigass da zonch deomp euz an oll vad en deuz greet hor Zalver beniguet d'ar bed, ha ne ean ket da ober c'hoaz hirio an deiz. An hano-ze eo eta ar c'haera, ar zantela a oufet da gaout ; rag, eme zant Perr, « ne d'euz bet biscoaz roet d'an dud hano al ebet didan an env, dre behini e tlefemp beza salvet. » Na caer eo eta, eur vech c'hoaz, an hano a Jesus ! Na braz e oe joa sant Joseph o rei an hano-ze da Jesus ! Nag a zoujanz en doa evit an hano santel-ze be vech ma en em gave en he c'hinou, o comz ken aliez ouz Jesus hed an amzer en deuz bevet ganthan ! Ia, an hano a Jesus a ioa evel ar mel d'he c'hinou, evel ar velodi d'he ziouscouarn, hag evel eul levenez d'he galoun.

Sant Joseph, pedit evidomp.

Pater, Ave, en enor da joa sant Joseph.

PEVARE GLAC'HAR SANT JOSEPH

Pa oe deut an amzer ma tlee ar Verc'hez Vari ober he sao a oulioud (pe amzer ar purification), hervez lezen Moysez, e toug-jont Jesus da Jerusalem evit he guiniga d'an Aotrou Doue.... hoguen bez ez oa neuze e Jerusalem eun den hanvet Simeon, den just hag a zoujanz Doue, hag a c'hede disc'hlac'har Israel, hag ar Speret Santel a ioa enhan.

Ha lavaret a oa bet d'ezhan gant ar Speret Santel ne velje ket ar maro ken n'en dije guelet da guenta Christ an Aotrou. Hag e teuaz d'an templ aliet gant ar Speret Santel ; ha pa oa digasset ar Mabig-Jesus en Templ gant ar guerent, evit ma rojent evidhan ar pezh a voat boazet da ober hervez al lezen, e kemeraz anezhan e tre he zivrec'h hag e veulaz Doue hag e lavaraz : « Brema, Aotrou,

list ho servicher da vont e peoc'h euz ar bed-ma hervez ho ker, pa ho deuz va daoulagad guelet hor Salver... »

He Dad hag he Vam a oa souezet braz gant an traou a glevent lavaret anezhan ; ha Simeon ho benigaz ; hag a lavaraz da Vari he Vam : Ar c'hrouadur-ma a zo deut er bed evit coll ha silvidiguez meur a hini e Israel, hag evit beza eun arouez, pe eur merg, hag a iello calz a dud eneb d'ezhan. — Hag hoc'h ene-hu a vezo treuziet gant eur c'hleze, evit ma vezo discuillet sonjezonou cuzet e leiz a galonou.

(*Sant Lucas, eil pennad.*)

Doue en he vadelez na ra deomp da anaout ar poaniou a arru ganeomp hag ar c'hroassiou hon euz da zouguen nemet dre ma tigouezont ganeomp, evit n'hor bezo d'ho gouzaon nemet d'ho mare. Ar Verc'hez Vari ne d'eo ket bet damantet evel dompni ; poan e deuz bet, croassiou hag ho anavezet e deuz pell abars ma c'herruent ; rag Doue a felle d'ezhan e vije Mari eur vam a boan, eur rouanez a c'hlac'har, hevel ouz he Mab e peb tra. Bez e doa bepred dirazhi

ar boan, ar glac'har a oa oc'h he gortoz, da lavaret eo, passion ha maro he Map. Ma ne anaveze ket c'hoaz mad aoalc'h poaniou Jesus-Christ bete vrema, professi, pe comzou an den santel Simeon ho deuz ho lakeet selear dirag he daoulagad, o lavaret d'ezhi petra e tlie he Map da c'houzaon ha petra a oa oc'h he deport : Ho caloun, emezhan, a vezo treuziet gant eur c'hleze a c'hlac'har. Mari e doa clevet ar c'homzou-ze ha n'ho ancounac'haz morse. Be vech ma vele he Map, ar zonch euz passion ha maro Jesus-Christ a dreuzie he c'haloun ; be vech ma vele he zaouarn hag he dreid, e teue en he spered ar zonch euz an tachou a dlie ho staga oc'h ar groaz. Mari a ouie, eme sant Bernardin, e tlie Jesus-Christ tremen dre an angoni o c'houeza an dour hag ar goad, e tlie mestr ar bed beza chadennet evel eun torfetour, crouer an env hag an douar beza dispennet a daoliou ha goloet a granch, barner an oll dud beza condaounet, roue an oll rouaned beza curunet gant spern.

Seul vui ma creske Jesus en oad, seu vui e creske anken Mari he Vam ; rag seul vui ma tostae an amzer ma tlie he

Map pignad var ar groaz, seul vui ive ar c'hleze a c'hlac'har en doa comzet Simeon anezhan, a dreuzie he c'haloun a Vam.

Ah ! sant Joseph he fried her gouie : clevet en doa bet ive en templ comzou an den santel Simeon. Pebez calonad evit ar pried santel-ma, hen pehini a gare kement Jesus ha Mari ! Mari a oa ker mad outhan hag her c'hare kement. Joseph a anave he c'harantez, he madelez, he fatiantet, he zantelez, en eur guer, hec'h oll vertuziou. Na braz e oe eta anken Joseph o sonjal e poaniou Jesus ha Mari ! Ha ni, ma caromp Jesus, Mari ha Joseph, chom a rafomp-ni heb kemer pers e poaniou ar Famil-Zantel ?

Sant Joseph, pedit evidomp.

Pater, Ave, en enor da c'hlac'har sant Joseph.

PEVARE JOA SANT JOSEPH

« Brema, Aotrou, list ho servicher da
» vont e peoc'h euz ar bed-ma hervez ho
» ker, pa ho deuz va daoulagad guelet

» hor Salver. An hini ho poa da lacaat
 » dirag daoulagad an oll boblou ; scleri-
 » jen da scleraat ar jentiled, ha gloar
 » Israel ho pobl. »

Hag ar c'homzou-man : « Ha Simeon ho
 benignaz hag a lavaraz da Vari he Vam : Ar
 c'hrouadur-ma a zo deut evit silvidiguez
 meur a hini e Israel. »

(*Sant Lucas, eil pennad.*)

Ma oa bet mantret caloun sant Joseph
 o clevet sant Simeon o comz euz a boan-
 niou Jesus ha Mari, joa en doa bet ive
 oc'h he glevet o comz euz an traou caer
 en doa lavaret divar benn Jesus ; o clevet
 e oa lakeet dirag daoulagad an oll boblou,
 e tlie beza sclerijen ar jentiled ha gloar
 Israel pobl an Aotrou Doue.

Creski a reaz c'hoaz he joa, o clevet e oa
 deut ar Mabig-Jesus evit silvidiguez meur
 a hini e Israel hag e oa Salver ar bed.
 Evel an dud santel euz an amzer-ze, sant
 Joseph e oa ive mall ganthan guelet ar
 Salver. Na eane pell a oe o hirvoudi hag
 o pidi Doue d'hen digass ar c'henta ar
 guella. Dre-ze pa ouie e oa deut ha pa

gleve meuli ar burzudou e tlie ober hag e
 touez ar bobl a Israel hag e touez ar baianed,
 he galoun a zride gant ar joa hag al
 levenez.

Pell zo aoalc'h e oe ar bed en devalijen,
 pell zo aoalc'h e veve an dud er pec'het hag
 en techou mezuz, brema diana, emezhan,
 brema e luguerno ar sclerijen, pa z'eo
 digoret an env ha diskennet Map Doue var
 an douar ; brema e paro dirag daoulagad
 an oll boblou ; brema e vezo guelet gloar
 Israel. Ar gliz euz an Env a ziskenno var
 an douar, grassou Doue en em scuillo var
 an eniou hag an dud a zistroio oc'h Doue
 o kuitaat an idolou, meur a hini e Israel a
 gavo ar zilvidiguez, beteg ar baianed zoken
 a zigoro ho daoulagad d'ar feiz.

Pebez gloar evit Jesus ha pebez enor
 evit Mari he Vam ! Ia, Jesus a vezo caret
 gant an dud ha Mari he Vam a vezo meulet
 e pevar c'horn ar bed.

Setu ar pezh a ree joa sant Joseph o clevet
 comzou an den santel Simeon. Ni ive kemero-
 romp pers e joa ar patriarch santel-ma, o
 sonjal er vadelez, er garantez ho deuz bet
 Jesus ha Mari evidomp. Ia, o velet ar boan

ho deuz kemeret evit hor zilvidiguez,
caromp Jesus, Mari ha Joseph.

*Sant Joseph, trugarecait Jesus ha Mari
evidomp.*

Pater, Ave, en enor da joa sant Joseph.

PEMPED GLAC'HAR SANT JOSEPH

Ha setu Eal an Aotrou en em ziscouezaz da Joseph epad he gousk, o lavaret : Sao ha kemer ar c'hrouadur hag he vam, ha tec'h d'an Ægypt, ha chom eno ken na livirin d'id. Rag c'hoarvezout a rai ma clasko Herodez ar c'hrouadur evit he lacaat d'ar maro. Joseph a zavaz, a guemeraz ar c'hrouadur hag he vam, hag en em dennaz en Ægypt. Hag e chome eno ken na oe maro Herodez, evit ma vije deut da vuir ar pez en doa lavaret an Aotrou Doue dre c'hinou ar profed evel-hen : Galvet am euz va Map euz an Ægypt.

(Sant Vase, eil pennad.)

Mari ha Joseph, ho spered hag ho c'ha-

loun leun euz ar pez ho doa clevet en Templ divar benn Jesus, a zaoure an traou caer, ar mysteriou braz e cavjent e comzou an den santel Simeon hag e re ar brofedez Anna. Ma oe bet kemesket ar glac'har gant ar joa, ho c'haloun a oe couscoude euruz oc'h heuilla bolontez Doue ha tanva a reent eur blijadur zantel, o tremen dre ho spered an oll draou burzuduz ho doa clevet.

Mont a reent bep mare d'an Templ ; eno e tremenent an darn vrassa euz ho amzer er beden, o veuli hag o trugarecaat an Aotrou Doue euz hec'h oll vadelezou e kenver an dud hag en hor c'henver-ni dreist-oll.

Nag euruz ez oant eno ! Na berr e cavjont an nebeud deveziou-ze tremenet en Templ gant Jesus ! Na caret ho dije chom eno epad ho buez ! Allaz, siouaz ! ar joa ne bad ket pell er bed-ma. Hep dale, evel hon euz lennet e comzou an Aviel, e teu d'ezho ar c'helou euz an env da guitaat an Templ, ho bro, ho c'herent, ho mignoned, ha da dec'het d'an Ægypt, e touez paianed, tud hag a oa leun a gassoni oc'h ar Iusevien.

Pebez calonad evit Joseph pa glevaz comzou an Eal : « Sao ha kemer ar c'hrouadur hag he vam ha tec'h d'an Ægypt. » Penoz mont d'an Ægypt ! En em lacaat en hent racdall, e creiz an noz ! Na penoz a c'hello Mari ober ar veach-ze gant he Map c'hoaz ken iaouang ha ken dister ! Oh ! na braz e oe anken sant Joseph o vont da zihun Mari ha da gas d'ezhi ar c'helou-ze ! Neuz forz : urz Doue eo ha Joseph hen heuillo. Mari ive na glaskaz morse nemet ober bolontez Doue var an douar hag e lavaraz aman da Joseph, me gred ervad, evel ma reaz d'an Eal da zevez an Anonciation : *Ecce ancilla Domini, fiat mihi secundum verbum tuum* : Setu aman servicherez an Aotrou Doue, ra vezo greet d'in hervez ho comzou. Ractal e savaz hag e pacaz he dillad hag he samouigou traou, ha setu hi en hent gant he Map, heb sellet pe noz pe zeiz e oe, na pe seurt amzer a ree.

Eur veach hir ho doa da ober, an henjou a oa fall, eun dezert ho doa da dreuzi. Dre-ze eta ti ebet da loja, guele ebet da gousket. Na penoz caout eun tam bennag da zibri, hag eur banne dour da derri ar

zec'hed e creiz ar zabr pe an treaz euz an dezert ?

Neuz forz eur vech c'hoaz : urz Doue eo ha Mari ha Joseph hen heuillo. Ar Mabig-Jesus a zo gantho ; he vuez e rancant da viret ; « rag c'hoarvezout a rei ma clasko Herodez ar c'hrouadur evit he lacaat d'ar maro. »

O feiz Mari ha Joseph ! O carantez Mari ha Joseph evit Jesus ! Mez na braz a oe ho glac'har ! Na ker eo bet coustet d'ehoc'h heuilla gourc'hemenou Doue !

Ha ni petra a zonzimp hag a levirimp var guement ma ? Nag a draou a zeu e spered an den, o velet buez ar Famil-Zantel ! Na burzuduz eo ar vuez-ze !

Sant Joseph, pedit evidomp.

Eur *Bater* hag eun *Ave* evit enori glac'har sant Joseph.

PEMPED JOA SANT JOSEPH

Evit tec'het eta araog Herodez, den criz ha didruez, Mari ha Joseph en em dennaz

en Ægypt evit savetei he vuez d'ar Mabig-Jesus. Na tenn e oe bet da Vari ha da Joseph ober eur seurt beach, o vale dre bep seurt henjou, a dreuz carter ha dre greiz eun dezert. Sant Bonaventur a lavar e c'helfe hiniennou e pemzeg dervez ober ar pennad hent-ze. « Mez Mari ha Joseph ho doa lakeet, emezhan, marteze oc'hpenn daou viz evit hen ober, o veza ma e leverer ez oant eat dre an dezert en doa treuziet ar bobl Israel. » Dirag daoulagad ar feiz, na caer eo gullet ar Famil-Zantel o senti ker mad ha ker buhan ! An Ælez e gore an envou a oa estlamet gant eun dra ker burzuduz : an Oll-C'halloudeg o tec'het diouc'h counar eun den fallacr, evel pa vije bet trec'h da Zoue ! Eun Doue o senti oc'h eun den ! Pebez kentel ! Mari ha Joseph her gouie hag a oa leun a joa e creiz ho foaniou o senti ouz urz ho C'hrouer. Daoust d'ho zrubiell hed an hent, ho c'haloun a oe euruz o touguen Jesus. N'ho dije ket caret trog buez gant nicun euz tud ar bed.

Ar Mabig-Jesus na eane o scuilla he c'harrassou en ho eniou hag e tanvent en

ho speret hag en ho c'haloun eun dra-bennag euz euruzded ar Zoent. Na scanv e oe evid-ho ho bec'h o touguen Jesus !

An Aviel na lavar deomp netra euz ar pez a c'hoarvezaz epad an hent hag en Ægypt. Caout a reomp couscoude eun dra bennag divar guement-ma e levriou ar re ho deuz scrivet *Histor an Iliz*. Miret ho deuz en ho scridou eun darn euz lavariou an dud euz an amzer-ze. Hervez Sozomen ha Nicephor, pa dostae ar Famil-Zantel oc'h eur guer hanvet Hermopolis, eur vezen vraz divent, eur vezen galvet *Persis*, a blegaz he fenn beteg an douar evit adori Jesus, crouer ha mestr an oll draou crouet, pehini a dremene dirazhi.

Ar baianed a ree ho Doue euz ar vezen-ze ; adori a reent en-hi an diaoul. Abaoe, plusken ar vezen-ze, he deliou hag he frouez ho doa ar galloud da barea diouc'h pep seurt clenvejou. Hervez Euseb a Cesaree, an droug-sperejou, boazet da gomz dre c'hinou an idolou, a oe strafuillet pa c'herruaz hor Zalver er vro-ze. En em gaout a rejont ker trec'het ma teujont da veza mud ha ne cavjont mui netra da

lavaret d'ar re a iee da c'houlenn cuzul digantho. Sant Atanaz hag Orijen a lavar zoken e couezaz an idolou hag e ouent bruzunet.

Pebez joa evit sant Joseph o velet an idolou discaret, an droug-sperejou trec'het ha beteg an traou crouet o c'hanaout Jesus evit ho c'hrouer hag ho mestr!

Nag a guentelliou e cavimp aman, ma keromp lacaat hor spered da zonjal er pezh hon euz lennet.

Sant Joseph, pedit evidomp.

Eur Bater hag eun Ave evit enori joa sant Joseph.

C'HOUVED GLAC'HAR SANT JOSEPH

« Hoguen pa oe maro Herodez, Eal an » Aotrou Doue en em ziscouezaz da Joseph dre he gousk, en Ægypt, hag a » lavaraz d'ezhan : Sao, kemer ar c'hrouadur hag he Vam, ha kea da zouar » Israel, rag maro eo ar re a glaske ar » c'hrouadur evit he laza. Sevel a reaz,

» kemer a reaz ar c'hrouadur hag he Vam » hag e teuaz e douar Israel. Mez o cle- » vout e oe Arkelaüz roue er Judae, e » plaz Herodez he dad, en devoe aoun o » vont di, hag o veza bet eun ali dre he » gousk, en em dennaz var-zu Galilea. » Hag e teuaz da chom en eur guer han- » vet Nazareth, evit ma teuje da vuir ar » pezh ho doa lavaret ar brofeted : Nazaread » e vezo galvet. »

(Avel sant Vaze, eil pennad.)

Mari ha Joseph a veve eta en Ægypt diouc'h ho foan hag ho labour ha var bouez poania e teujont abenn da gaout peadra d'en em vaga, d'en em visca ha da baea ho lojeiz. Mari a guempenne he sieguez, a laboure o neza, o c'hriat, oc'h ober stam; Joseph a heuille he vecher calvez. Var dro seiz bloaz bennag e oant er vro-ze, hervez ma lavar sant Bonaventur, pa teuaz an Eal da lavaret da zant Joseph kemer ar c'hrouadur hag he vam, ha distrei da zouar Israel he vro. Mari ha Joseph, sentuz bepred ouz mouez an Aotrou Doue, en em lekeaz hep dale en

hent evit distrei d'ho bro. Eun tam labour poaniuz ho doa adare da ober : eur veach hir, henjou diez, eun dezert da dreuzi, ar Mabig-Jesus da zouguen. Dister e oe c'hoaz, petra bennag ma oe kresket gant an oad. Penoz e c'hello eur c'hrouadur ken iaouank ober eur seurt pennad hent? Ar Mabig-Jesus, emesant Bonaventur, oa re vraz evit beza douguet gant Mari ha Joseph, ha re dister evit ober ar veach-ze var droad. Petra bennag ne oe ket pinvidig ar Famil-Zantel, Doue a bourveaz d'ezho eul loen bennag evit douguen ho samouigou traou hag evit sicour Jesus ha Mari da ober ho hent. Evelato, na braz e oe trubuill ar Famil-Zantel hed an hent. Guelet Jesus, Mari ha Joseph goulloet a bouldren, ar c'houezen varnezho, an dour o tivera diouc'h ho zal, o vale calonek dre an henjou. Guelit ar Mabig-Jesus o vale en dezert, dre an dorn guech gant Mari, guech gant Joseph, ar grouan o vont en he voutou, he dreidigou kignet, an dour o tivera oc'h he dal... ha pa c'herrue an noz, ti ebet da loja, guele ebet da gousket, da ziscuiza... O Mari ! O Joseph ! Na poaniuz e oe an traou-ze d'ho

caloun a vam hag a dad ! O Joseph, ancounac'haat a reac'h ho poaniou evit sonjal e poaniou Jesus ha Mari ! Scuz ez oac'h o vale, sec'hed ho poa, en diouer a bep tra en em gavae'h ; mez ho speret hag ho caloun a oa bepred e poaniou Jesus ha Mari.

Arruout a rejont var douar Israel ho bro. Mall e oe gantho guelet Jerusalem, guelet an Templ, guelet Bethleem ; caret ho dije chom eno evit saouri ar mysteriou braz arruet el lec'hiou santel-ze ; evit tanva eno gant Jesus eun dra bennag euz euruzded an Env ; mez allaz ! pebez glac'h ar ha pebez anken evit Mari ha Joseph ! Clevout a rejont e oe Arkelaüz roue er Judea, e plaz Herodez he dad ; aoun ho devoe o vont di. Setu Joseph nec'het adare : Petra da ober ? Pelec'h mont ? Doue hen tennaz euz he encrez ; ali en doa dre he gousk hag en em dennaz varzu Galilea. Mont a reaz da chom da Nazareth ; urz Doue e oa, rag merket e oe gant ar brofeted e flie Jesus tremen an darn vrasa euz he vuez e Nazareth ha beza galvet Nazaread.

Na braz eo bet poaniou sant Joseph !

Ne scuizomp ket oc'h he lavaret ; mez ive lekeomp da dalvoud evit hor zilvidiguez trubuill ar Famil-Zantel. Caromp Jesus, Mari ha Joseph, kemeromp pers en ho foaniou ha bevomp ive er boan heb en em glemm evel ho deuz greet Jesus, Mari ha Joseph.

Sant Joseph, pedit evidomp.

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* en enor da glac'har sant Joseph.

C'HOUEVET JOA SANT JOSEPH

Hoguen pa oe maro Herodez, Eal an Aotrou en em ziscouezaz da Joseph dre he gousk, en Ægypt, hag a lavaraz d'ezhan : Sao ha kemer ar c'hrouadur hag he vam, ha kea da zouar Israel, rag maro eo ar re a glaske ar c'hrouadur evit he laza.

(Ariel sant Vaze, eil pennad.)

Setu eun den er prison, er galeou, ma kerit. Ah ! na braz eo he joa pa teuer da zigueri doriou he brison, da derri he

chadennoù ha da lavaret d'ezhan : Setu achu ho poan, achu hoc'h amzer ; it d'ar guæer, it da velet ho pro, ho kerent, ho mignoned. M'ho list da zonjal petra a dremen e caloun an den-ze.

Na braz oa ive joa sant Joseph pa glevaz mouez an Eal o lavaret d'ezhan : Sao ha kemer ar c'hrouadur hag he vam ha kea da zouar Israel, rag maro eo ar re a glaske ar c'hrouadur evit he laza.

Sao ha distro d'ar guæer ; tec'h diouc'h an Ægypt, achu eo da amzer boaniuz aman.

Na braz e oe he joa o clevet e oe maro ar re a glaske ar c'hrouadur, ar Mabig-Jesus, evit he laza. Ia, braz a oe he joa o cass ar c'helou mad-ze da Vari, o lavaret da Vam Jesus e oa maro ar re a glaske he mab evit he laza. O kelou mad evit caloun Mari : maro eo ar re a glaske he mab evit he laza !!!

Ma ho devoe bet poan hed an hent, ma ho devoe bet glac'har o clevet e oa Arke-laüs roue ar Judea, hag ho devoe aoun o chom eno ; ma ho dije caret chom en unan bennag euz al lec'hioù santel ; joa ho devoe o vont dre urs Doue da Nazareth : eno e

oe bet arruet myster an Incarnation, eno e oe bet concevet Mab Doue en em c'hreet den. Nag euruz e oe Mari ha Joseph gant ar Mabig-Jesus pa c'herrujont e Nazareth. Calon Mari ha Joseph a zride gant levenez o velet ho c'herig vihan, e lec'h ho doa tremenet ar penn kenta euz ho friedelez. Euruz e oant eno o sonjal en ho foaniou drement e craou Bethleem, hag en (E-gypt, heb conta ar pezh ho doa bet hed an hentchou, du-ma du-hont.

Euruz e oant o sonjal er mysteriou braz arruet abaoe ma ho devoe kuiteet ho ziik bihan, hag ho c'hærig a Nazareth. Setu Mari ha Joseph arruet ar guæ, e touez ho mignoned, gant ar Mabig-Jesus d'ho heul. Piou a oufe lavaret aman joa Mari ha Joseph e Nazareth ?

List ama ho speret da ziskenn beteg ar goueled euz an traou burzuduz arruet gant ar Famil-Zantel ha tennit outho muia ma c'hellot kement a vezo talvoudeg d'ho silvidiguez ha da c'hloar Doue.

Sant Joseph, pedit evidomp.

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* en enor da joa sant Joseph.

SEIZVED GLAC'HAR SANT JOSEPH

Hoguen ar c'hrouadur a greske en oad hag a grevee, leun a furnez, ha graz Doue a oa enhan. He guerent a iee bep bloaz da Jerusalem da zeiz braz ar Pask. Pa oa eat en he zaouzek vloaz, ez ejont da Jesuralem. Hervez ma oant boazet d'hen ober da zeiz ar gouel (hag e casjont Jesus gantho evel ma reent bep tro); ha pa oe tremenet deiziou ar gouel, evel ma tistroent d'ar guæ, ar c'hrouadur Jesus a chomaz e Jerusalem heb gouzout dare d'he guerent. O sonjal edo ebars ar vanden, e valejont eun dervez hent. Hag e claskent anezhan e touez ho c'herent hag an dud euz ho anaoudeguez. Hag o veza n'her c'havent ket, e tistrojont da Jerusalem, oc'h he glask bepred. Hag a benn tri dervez e cavjont anezhan ebars an templ.

(*Aviel sant Lucas, eil pennad.*)

Bez ez euz hag a lavar ez oa ar c'holl-ze euz a Jesus ar brassa poan hag ar brassa glac'har ho deuz bet Mari ha Joseph. Ha

setu perag : Mari ha Joseph ho deuz bet meur a vech nec'h, glac'har hag anken ; mez da viana Jesus a oe gantho hag ar guel anezhan a zistane ho foan hag a ree ho joa. Mari ha Joseph, guir eo, ho deuz santet eur glac'har vraz en templ, en Ægypt hag e lec'h all, mez Jesus a vije bepred gantho. Elec'h aman ho deuz poan, nec'h, glac'har pell diouc'h Jesus hag heb gouzout e pelec'h ez oa.

Kement e carent Jesus, ma ho doa, eme Orijen, epad an disparti-ze eur boan hag eun anken trec'h da boaniou ar verzerien. An tri dervez-ze a zo bet evidho ken hir evel pa vijent bet tri c'hant vloaz, ha derveziou ker leun a c'hlac'har ma n'ho doa den d'ho c'honsoli.

Ar peza greske ho glac'har eo o veza ma ne ouient ket perag e oe en em dennet Jesus diout-ho.

Allaz ! piou a oar, e c'heljent lavaret, piou a oar ha ne d'omp-ni ket manket a zoujanz da Jesus ? Piou a oar ha ne d'omp-ni ket faziet en unan-bennag euz hon de-veriou en he guenver. Neb a gar Doue a oarne d'euz ket brassoc'h poan eguet be-

za displijet da Zoue dre eur pec'het ben-nag.

Setu perag Mari ne d'eo ket bet clevet oc'h en em glemm oc'h Jesus en he foaniou nemet an dro-man. N'he doa ket gallet en em viret da rebech da Jesus ar boan hag ar glac'har en doa greet da Joseph ha d'ezhi oc'h ho c'huitaat. « Va mab, emezhi da Jesus, perag hoc'h euz-hu greet an dra-man d'eomp-ni ? Setu ho Tad ha me glac'haret ho claske. »

Glac'har Mari ha Joseph da veza collet Jesus a dlefe talvout da scouer d'an eniou mad, pa ne zantont mui e goueled ho c'halloun ar brezanz dudiuz a Zoue. O eniou santel, braz eo ive ho clac'har hag ho anken, pa en em guz Jesus, pa ne zantit mui an domder euz ar c'hraz, pa ne velit mui ar sclerijen o para var hoc'h ene, pa en em gavit en denvalijen hag er zec'hor. Ah ! Setu ive Jesus dianket evidhoc'h. Caer hoc'h euz her c'hask, her goulenn du-ma du-hont, n'her c'havit mui. Goelit, mez goelit gant Mari ha Joseph ; arab eo coll caloun. Jesus a zo dianket, mez ne d'eo ket collet ; distrei a rai daved hoc'h.

Arab eo d'ehoc'h credi hoc'h euz collet graz Doue ; rag ma en em bella an Aotrou Doue dioc'h daoulagad eun ene hag he gar, n'en em bella ket dioc'h he galoun ; n'en em denn ket dioc'h he ene. Aliez en em guz evit ma her c'haskimp gant mui a c'hoant d'he gavout. Neb a fell d'ezhan cavout Jesus, a dle her c'hask gant Mari ha Joseph er glac'har, er boan, er groaz. Her c'havout a rint en templ, da lavaret eo, er beden, en œuvrou a garantez hag en ho dever e kenver Doue hag an nessa.

Sant Joseph, pedit evidomp.

Eur *Bater* hag eun *Ave* en enor da seizved glac'har sant Joseph.

SEIZVED JOA SANT JOSEPH

Hag a benn tri dervez e cavjont anezhan ebars en templ, azezet e creiz an doctored, oc'h ho selaou hag oc'h ober goulennou outho. Ha kement hini her c'hleve a chome estlammet gant he furnez ha gant he responchou. He dud oc'h he velet a

oe souezet braz ho unan. Hag he vam a lavaraz d'ezhan : Va mab, perag hoc'h euz-hu greet an dra-ze d'eomp-ni ? Setu ez omp oc'h ho clask, glac'haret braz, ho tad ha me. Hag hen a lavaraz d'ezho : Perag em c'hlaskec'h-hu ? Na ouiec'h-hu ket eo red d'ime en me rei oll d'ar pez a zell ouz va Zad ? Ha ne gomprenjont ket ar gomz en doa lavaret d'ezho. Hag e tiskennaz gantho hag e teuaz da Nazareth, hag e touje d'ezho. Hag he vam a zalc'h mad an traou-ze oll en he c'haloun. Ha Jesus a greske e furnez hag en oad, hag en neuz vad dirag Doue ha dirag an dud.

(Aviel sant Lucas, eil pennad.)

Na braz eo joa an den, pa en deuz cavet eun dra dianket, eun tenzor collet ! Neb en deuz tremenet dre eno her goar. Me ho list da zonzal ive er joa ho doa Mari ha Joseph pa gavjont Jesus ho Mab en templ, azezet e creiz an doctored, etouez an dud desketa euz ar vro ha var lezen Doue, oc'h ober goulennou outho hag o respont

d'ezho gant kement a furnez ma e oe estlammet kement hini her c'hleve; he dud zoken a oe souezet braz ho unan oc'h he velet, hervez a lavar an Aviel.

Ma oe eta mantret ho c'haloun gant ar c'hlac'har epad tri dervez o clask ho mab dianket, dic'haouet mad ez int bet o cavout Jesus en templ, hag o velet an oll estlammet gant he furnez.

Ne deuz ket da goll gant Jesus; mar kemeromp poan hoc'h he glask, her c'havimp abred pe zivezad hag e vezimp paet mad; hon digoll hor bezo en tu all d'ar pez a oufemp da zonzal. Mari ha Joseph a zo testou mad a guement-se. Ho spered en em gave sclereet gant ar sclerijen a zeue euz furnez Jesus hag ho c'haloun a ioa leuniet gant an dousder euz ar grassou a scuille ho Mab varn'ezho er mare-ze; rag Jesus a ouie ho doa ezom a c'hrassou evit distan ho glac'har. Jesus a lavaraz d'ezho e oe deut er bed evit ober kement a zell ouz he Dad Eternel: kent-se ne oe ket diskennet euz an env evit traou an douar, mez evit gloar he Dad hag evit silvidiguez an dud.

